

KANTIGOU BREZONEK

ESKOPTI SANT-BRIEG HA LANDREGER

Adreizet dre urz

An Aotrou 'n Eskob F.-J.-M. SERRAND



GANT AN TONIOU WAR GAN



SANT-BRIEG

MOULET E TI A. PRUD'HOMME

Mouler an Eskopti

1934

Nihil Obstat :

Brioci, die 21^a Novembris 1933.

Y.-M. BROCHEN.

Censor ex officio.

Imprimatur :

Brioci, die 24^a Novembris 1933.

Eug. LE BELLEC,

Vic. gen.

Archid. Trecorensis.



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2021

KANTIGOU BREZONEK

N^o I. — **Ar Veni, Sancte Spiritus.**

M. (♩ = 60) (1)


Spe-red-San-tel, spe-red a skle-ri
jen Pli-jeh ganeoc'h ennomp bremañ dis
keny: a skle-ri-jenn kar-giz hon spe-re-
jou a ga ran-tez tom-mis
hon c'ha-lon-on.

1. An Ebestel en eur sal unanet,
A dan ho kras hoc'h eus gwechall nerzet ;
Ho pet 'vidomp hevelep madelez
Ne domp hepoc'h nemet sempladurez.
2. Gwerchez Vari, esperans ar pec'her,
Pedit Jezuz ho Mab hag hon Salver ;
Grit d'hon spered intent komzou Doue
Ha d'hon c'halon o mirout goude se.

(1) M. ♩ = 60 ar sin-se a verk eallusk a 60 ♩ bob munuchpa wandaos

N^o II. — An Oferenn.

(An ton-man pe an ton XVI)



2. En oferenn, e gwirione(z),
Korf ma gwad Jezuz, Mab Doue,
E-lec'h ar bara hag ar gwin,
Aman dirazoun a welin.
3. Gant ar beleg e fell d'in-me
Kinnig ivez an Oan-Doue
'Vit adori 'vel m'eo dleet
An tri Ferson eus an Drinded.
4. Da drugarekaat an Aotrou
'Vit kement a vadelezou,
Warnoun ha war an holl skuilhet,
Abaoe m'en deus krouet ar bed.
5. 'Vit goulenn pardon digantan
Eus ar pezh a zisplij d'ezan
Ennoun hag en holl bec'herien :
Ar pec'hejou, ar yenijenn.
6. 'Vit ma hado bemdez ennomp
Grasou da grenvaat ac'hanomp
Enep hon c'horf, an droukspered,
Hag enep ar bed milliget.

7. Kinnig 'ran c'hoaz ar « Sakrifis »
'Vit hon Mamm santel an Iliz,
Ma trec'ho dre-holl er brezel
Graet a bep tu d'an Aviel.

8. Bremaouden, ô ma Salver,
E tiskennot war an Aoter ;
Kargit a feiz krenv ma ene,
Ha ma c'halon a garante(z).

9. Ho pet sonj, c'houi Gwerchez Vari,
Hoc'h eus e c'hanet 'vidomp-ni,
Taolit 'ta warnan ha warno(u)n
Eur sell a vamm, sell ar galon.

N^o III. — An « Adoro te ».

TON : Adoro te.

1. M'hoc'h ador gant doujans, o. Doue kuzet,
A chom aman gwir-mat en osti sakret ;
Holl, d'anzav oc'h enni e pleg ma c'halon,
Hep gortoz kompren eur mister 'zo ken do(u)n.
2. Lagad, dorn ha genou a fazi aman,
Met 'dal m'hoc'h eus komzet, me gred hep krena(n):
Penaos ne gredfen ket lavar Mab Doue ?
Gwiroc'h 'vit e gomz n'eus ket eur wirione(z).
3. Er groaz en em guzec'h 'vel Doue hepken ;
Aman ez oc'h kuzet 'vel Doue ha den :
C'houi, ma Salver Jezuz, C'houi eo koulskoude,
Ha gant feiz al laer mat ho pedan ive(z).
4. Goulou ho korf sakr Tomaz o gwele ;
Hep gwelout me ho kalv ma Mestr, ma Doue,
Grit ma kresko em ene ar feiz bemdez,
Koulz, vel an esperans, hag ar garantez.
5. Osti a zegas sonj eus maro Jezuz,
Bara leun a vuhez, d'am ene magus,
Bezif c'houi ma bevans, ha grit d'am spered
Kavout ennoc'h blaz mat, blaz Doue bepred.
6. Pellikan truezus, ma Zad, ma Aotrou,
Am gwalc'hit en ho kwad diouz ma fec'hejou :
Eur strink hepken a c'hall gwalc'hi holl ar bed,
A gement pec'hed a zo hag a zo bet.

7. O Jezuz, d'am sellou breman goloet,
Ar c'hoant 'm eus d'ho kwelout, grit ma vo torret ;
Ho kwelout azezet e lein an Nenvou,
Evel m'ho kwel eno ar Sent hon tadou. Amen.

N^o IV. — D'ar Gorreou.

(♩ = 112)

Me ho sa-lud, Korf ma sal-
ver, Zo — — — dis-ken-nek war an Ao-
ter; En — nac'h ar ba-ra zo chen-
cher, Ha ganeoc'h c'houi e vin
ma — get

2. Me ho salud, Gwad ma Salver
'zo 'lec'h ar Gwin, war an Aoter ;
C'houi evidoun 'zo bet skuilhet,
Deut d'am gwalc'hi a bep pec'hed.

(Pe don CXVI)

N^o V. — An "O Salutaris"

(♩ = 160)

O Je-zuz, o Os-ti san-tel,

a zalc'h di-gor por-ziou an Nenv, Spon-
tus ou-zimp e sav bre-zel, Ro-
ad d'imp nerz hag e vimp krenv.

2. Setu c'houi deut war an Aoter,
E-lec'h ar gwin hag ar bara
Evit 'n em rei, o ma Salver,
D'hon eneo 'vit o maga.

3. D'an tri Ferson 'zo e Doue,
Gloar a-berz ar grouadurien :
Gras d'imp d'o gwelout hepdale,
En hon gwir vro da virviken.
Amen, Amen, Amen !



N^o VI. — War an Aoter.

(♩ = 56)

War an Ao-ter Ziou a welan o
tis-kenn ? Je-zuz, ma mestr, gwir Doue
ha den, War an Ao-ter ; Ken gouzout a
rañ, C'houi, Jezuz, a zo a-mañ ;
War an Ao-ter.

2. Dre garantez
Ouz ar Groaz c'houi voe staget ;
En eur vervel hoc'h eus hon prenet
Dre garantez :
Aman c'hoaz bemdez
D'in e tegasit buhez,
Dre garantez.
3. Me hoc'h ador
'Vel ar bastored gwec'hall
E Betleem; 'kreiz an noz tenval ;
Me hoc'h ador,
'Vel ar Vadalen
War ar C'halvar 'n ho kichen,
Me hoc'h ador.
4. Me a garfe,
'Vel ar c'hreuzoul arc'hantet,
En hoc'h iliz chom ganec'h bepred,
Me a garfe
Santout ma c'halon
Mui ouz mui gwrezus enno(u)n.
Me a garfe.
5. O ma Jezuz,
Ho p'nnoz a c'houlennan ;
Ar bed 'zo fall, ha me 'zo ken gwan,
O ma Jezuz,
Roit d'in hirle
Nerz da servija Doue,
O ma Jezuz.


N° VII. — Sakramant an Aoter.



- 1
O Sakramant ar c'haera
'lec'h teu Doue d'hon maga ;
Jezuz a zo aman c'hoaz
Kouls ha gwechall war ar Groaz.
- 2
D'an ebester 'lavare
Ha d'ar veleien goude :
« Heman eo ma c'horf, debrit,
Heman eo ma gwad, evit. »
- 3
Ar beleg, er gorreou,
'Lavar hevelep komzou :
Kerkent ha ken alies
Jezuz a sent ouz e vouez.
- 4
Ha n'eus ken war an Aoter
Nemet Korf sakr hon Salver :
E Gorf; 'lec'h ar bara-kann,
Elec'h ar gwin, Gwad an Oan.
- 5
Ar spesou o deus miret
O liou, o blaz 'vel bepred ;
Kuzet breman dindane
Eman Korf ha Gwad Doue.
- 6
Diaes e vefe kompren...
Kredi a dleomp hepken :
Ha gant feiz krenv hon ene,
E c'hallimp gwelout Doue.
- 7
Jezus en daou spes a zo
Den ha Doue war eun dro :
'n e bez er spes a vara,
Er spes a win memes tra.
- 8
Dont a ra d'hon ilizou
Hep kuitaat lein an Nenvou ;
Er burzud-se e welomp
Pegeit e kar ac'hanomp !
- 9
Neb en em gav e gwall stad
Hag a gred 'lkent tostaat,
A ra sur eun torfed bras
Henvel ouz hini Judaz.
- 10
Neb a gemer e stad vat
Korf hon Salver hag e Wad,
Gantan a zo unanet
A galon hag a spered.
- 11
Ra vo ganimp adoret
Jezuz ouz e Groaz staget ;
E adoromp-en Nenvou
Ha war e holl aoteriou.

N^o VIII. — Aktou kent ar Gomunion

(♩ = 92)




2. Doue ar Barfetedd wirion,
Me ho kar a greiz ma c'halon .
Ma nesa a garan ive(z)
Abalamour d'eoc'h, ma Doue.
3. Siouaz, siouaz, petra oun-me
Da dostaat ouzoc'h, ma Doue,
Ne doun nemet eur pec'her kaez,
Met c'houi zo leun a vadelez !
4. Pegement ne fell ket d'in-me
Degemer bara an ene !
Dizec'ha ran gant ar sec'hed
Ken na vezin ganeoc'h maget.
5. Gwerc'hez c'houi hoc'h eus e roet
Er c'hraou gwechall d'ar bastored,
Eus ho torn fell d'in degemer,
Em c'halon hirie, ma Salver.
6. Eur sell c'hoaz, eur sell truezus
Ouz ma ene, o ma Jezuz,
A-raok diskenn, gwalc'hit ennon
Kement a ra poan d'ho kalon !


N^o IX. — Aktou goude ar Gomunion.

1. Doue eternel, leun a c'hloar,
Krouer an Nenv hag an douar,
M'hoc'h ador breman em c'halon
Gant feiz ha gant doujans wirion.
2. Penaos 'c'hallin-me, pec'her kaez,
Trugarekaat ho madelez ?
Ne welan netra em ene
Nemet pec'hed ha paourente(z).
3. A greiz ma c'halon, ma Doue,
M'ho kar hag ho karo bemde(z).
Abalamour m'eo d'eoc'h dleet
Dreist pep tra holl beza karet.
4. Me 'ginnig d'eoc'h, o ma Doue,
Ho Mab, ma Mestr ha ma Roue ;
Me 'ginnig eus ma faourente(z),
Ma c'halon, ma c'horf, ma ene.
5. O ma Jezuz, sellit ouzin
Roit d'in ar pezh a fell d'in ;
Ar c'hras d'ho servija bepred,
Hag ar c'hras da chom hep pec'hed.
6. Ma Jezuz, binniget ive(z)
An Iliz gant he bugale,
Ma bro, kristen, ma mignoned,
Ha d'o heul ma enebourien.

N^o X. — Deut holl ha deut gant fe.

(♩ = 116)





Ma c'hoantait madou,
 Aman eman an tenzor
 Tenzor hag o lako
 Pinvidikoc'h 'vit ar mor,
 Jezuz !
 Perc'henn an holl vadou
 Ha mestr an holl c'hrasou.

3

Aour hag arc'hant 'zo berr,
 Ne dint nemet paourent(z)
 E-kichen ar prof kaer
 A ginnig d'imp Mab Doue,
 Jezuz !
 A ro d'imp e holl vad
 'vit hon pinvidikaat.

4

Korf ha gwad hag ene,
 Jezuz en osti kuzet,
 Gwir den ha gwir Doue,
 A vezo danvez ar pred
 Jezuz !
 Ha c'hoaz pec'her divat
 Ne brizez ket tostaat !

5

M' e wel war an Aoter,
 Devet gant ar garante(z),
 O c'hortoz ar pec'her.
 Evit tomma e ene,
 Jezuz !
 O c'houlenn hon c'halon
 Evit beza a dron.

Goude poaniou ken bras
 Gouzanvet war ar C'halvar,
 En deus teurvezet c'hoaz
 Chom ganimp war an douar
 Jezuz !
 Evit maga bemde(z)
 Hon c'horf hag hon ene.

7

Holl sent eus an Nenvou
 Prestit d'in ho karante(z),
 Roit d'in ho kalonou
 Evit karout ma Doue,
 Jezuz !
 A glask diskenn ennon
 Dre ar gomunion !

8

Met siouaz ! pa sonjan
 Penaos em eus glac'haret
 Ar Mignon ar gwella(n)
 Hag ar feala pried,
 Jezuz !
 Gant gwir geuz em c'halon,
 E c'houlennan pardon !

9

Nann, nann, ne dlean ket,
 M'hen anzav gant karantez,
 Goude beza pec'het,
 Debri bara an aelez,
 Jezuz !
 C'houi eo ar santelezh
 Ha me eur pec'her kaez !

Enor da virviken
 E Sakramant an Aoter
 D'an Doue a ziskenn

Dindan spesou ken dister,
 Jezuz !
 Ra vo dre-holl meulet
 Ha gant an holl karet !

N° XI. — C'hoant 'm eus da Virviken.

(d. = 60)




- Ma Jezuz, c'houi 'zo mat, c'houi a zo trugarezus,
 Ma Jezuz, c'houi 'zo dous, c'houi a zo karantezus.
- Betek breman, siouaz ! Kalz amzer am eus kollet
 Gant traou dister ar bed ken e oan gante dallet.
- Met breman, ma Jezuz, me a ro d'eoc'h ma ene,
 Ma c'horf ha ma c'halon 'keit ma chomin e buhe(z)
- O pebez karantez hoc'h eus c'houi bet, ma Salver,
 Da veza bet skuilhet ho kwad evit ar pec'her !
- Goude mervel 'vidomp er Groaz war lein ar C'halvar,
 E chomit c'hoaz ganimp d'hon maga war an douar !

7. Pegen euzus eta, pegen foll eo ar pec'hed,
P'en deus lazet Jezuz, ma Dasprener binniget !
8. O pec'hed milliget ! birviken mui n'am zrec'hi,
N'em bezo ken ouzit nemet euz ha kasoni.
9. Pegoulz e welin-me an holl oc'h ober brezel
E pevar c'horn ar bed d'an holl bec'hejou marvel !
10. Setu me koulskoude, ma Jezuz, paour ha dister;
N'hallan ket pell mont eeun ma n'am renit, ma Salver.
11. 'Vit heulia ho lezenn ha plega ma gwall dechou,
Em eus ezomm bemdez eus ho nerzusa grasou.
12. Grit eta, me ho ped, d'in ma-unan ma varvin
Hag evidoc'h hepken em holl amzer ma vevin !
13. N'em eus ken, o Jezuz, c'hoant ebet war an douar
Nemet mont davedoc'h gant an aelez en ho kloar.

N° XII. — O ! na hir eo an noz.

(♩ = 112)




Diskan.

1. Tommit ma c'halon baour d'ho kemer, ma Doue ;
Kreskit ennoun feiz, esperans ha karantez.
Tommit...

2. Dihun ha sav, ma c'horf, deomp betek Jezus,
Me 'glev ouz ma gervel e vouez karantezus.
Dihun...
3. Pegoulz e vi erru, o hent, na hir out-te !
War fêin ho tiouskell, Aelez, ma doughit-me.
Pegoulz...
4. Bez leun a levezet, em c'hreiz, o ma ene,
Gwelout a ran 'velkent ti santel ma Doue.
Bez leun...
5. O iliz vinniget digor buan da zor
Ma 'z in betek Jezuz : hen eo ma holl denzor.
O iliz...
6. Diwar dreuzou ho ti, Jezuz, ho saludan,
Eur pec'her evelvoud a dfele chom aman...
Diwar...
7. Me ho salud ivez, sent hag aelez eurus,
A zo en iliz-man tro-war-dro da Jezuz.
Me ho...
8. Armel sakr alaouret te 'zo tron ma Roue,
Setu ma taoulinan dirazan 'vel Doue.
Armel...
9. Jezuz, me hoc'h anav dre zaoulagad ar Feiz :
An osti pa welan, me ho kwel en he c'hreiz.
Jezus...
10. Diskennit o Jezuz, eus an Aoter breman,
Diskennit em c'halon, diskennit d'am maga(n)
Diskennit...
11. Jezuz a zo ganin ha me 'zo gant Jezuz,
Nemet er Baradoz netra ken dudius.
Jezuz...
12. A-vreman, ma Jezuz, c'houi hepken a garin,
Dalc'hat em ezommou c'houi hepken a glaskin.
A-vreman...

N° XIII. — Aelez eus ar Baradoz.

(♩ = 52)



li pe-bez e - nor a ra d'imp er sa -
 kra - manñ he - zuz hon Re-dermptor Eur weñ
 , e - vi horpre-na ez eo bet in-kar-
 net ha bem dez 'vil hon ma-ga ga.
 nimp e chom be - pred.

2. Mari, gwir Vamm da Jezuz, Mari, ma Mamm dener,
 Ma sikourit da gemer ho Mab ha ma Salver :
 Me ne doun siouaz netra, netra nemet pec'hed,
 Met ennoc'h ec'h esperañ, o ma Mamm vinniget !
3. Krouer an Nenv, an douar, war an Aoter Bemdez,
 Dre gomz nerzus ar beleg a ziskenn a-nevez :
 Eun Doue kalz uheloc'h eget bolz an nenvou,
 En em izela 'vit dont betek hon c'halonou.
4. Eun Doue bet a-viskoaz hag a vo da viken,
 Eun Doue n'eo ar bed holl 'vel netra 'n e gichen.
 En em lez gant ar beleg da veza diblasel,
 Evit diskenn e kalon ar paoura eus ar bed !
5. O burzud ar souezusa e-touez ar burzudou,
 O burzud n'hall ket kompren ar c'haera sperejou :
 Evit gounit kalonou ho pugale dic'hrad,
 O magit, o ma Jezuz, gant ho korf hag ho kwad !
6. Nann, ouz eur bugel karet, ar vamm an denara,
 Biskoaz na zeuas kement he c'halon da domma :
 Goude ken bras karantez, piou a c'hallfe chom yen
 E-kenver Jezuz ken mat 'vit e grouadurien !
7. Mar deo dister kalonou ar sent hag an aelez,
 Evit karout eun Doue ken din a garantez,
 Penaos 'teurvezit, Jezuz, dre ar gomunion,
 E kalonou ken sklaset dont da ober ho tron ?

8. Penaos kredi daoulina ouz taol sakr eun Doue,
 Goude beza e boaniet kement 'pad hon buhe(z) ?
 D'eoc'h, Jezuz, bet evidomp, ken mat, ken kalonek,
 E kinnigomp kalonou, siouaz, dianaoudek !
9. Koulskoade pa 'z omp galvet da gemer lod 'n ho pred,
 Dre eur gomz a-drugarez peurvalc'hit hon pec'hed :
 Teuzit skorn hon c'halonou gant tan ho karante(z),
 Leun a joa hag a fizians e tostaimp neuze.
10. Pebez eürusted breman pa santin em c'halon
 Jezuz o veva ganin evel eur gwir vignon :
 E ene gant ma ene muioc'h en em vesko,
 Gant ma gwad em izili e wad neuze 'redo.
11. Prestit d'in ho tiouaskell, ma Ael mat soursius,
 Ma nijin evel eur goulm etre divrec'h Jezuz ;
 Me roy d'ezan ma c'halon, hen roy d'in e hini.
 Ha gantan e tiskuzin e peuc'h ha dizoursi.

Nº XIV. — Me Hoc'h ador, ma Jezuz.

(J = 112)

Me hoc'ha - dor ma he - zuz eus a greiz
 ma c'ha - lon c'houi eo Dou : e ma
 c'hrou - er c'houi ro den e - vel - doun O
 pe - gen bras ka - ran - tex ke - mer
 hon sem - pla - sur klag er se - kra - manñ
 san - tel beza hon ma : ga - sur.

Diskan : O pegen bras karantez
 (ad lib.)

2. Dister edoc'h en eur c'hraou e-touez al loened mut,
Dinerz, ouz ar Groaz staget, ha nac'het gant an dud ;
Aman pa sellan ouzoc'h, izeloc'h ho kwelan,
Pa selaou ma dioueskouarn, mouez ebet ne glevan !
3. A-dreuz d'ar spesou tromplus ma c'halon koulskoude,
Ho klask, ho kav, hoc'h anav, ma zad ha ma Roue :
C'houi eo bugel Betleem, micherour Nazared,
Prenour ha perc'henn ar bed, eil berson an Drinded !
4. Pa sonjan ez oc'h Doue, e krenan dirazoc'h ;
Er c'hraou ha war an Aoter n'em eus ket aon ouzoc'h ;
Trugarez 'la ma Jezuz, da veza diskennet
En hon touez, en iliz-man, 'vit chom ganimp bepred.
5. Er park 'pad ma labouromp da c'hounit hon buhez,
Ho lagad tener hon-heuilh dreist reier ha menez ;
Pa gemer hon izili diskiuz e-pad an noz,
Eus an Aoter ho sellou a bar war ar barroz.
6. Kaer 'm eus, n'hallan ket tremen, nann, hep skuilha
Pa sonjan 'n ho madelez, ma Jezuz, ma Aotrou, [daerou,
Pa welan ho karantez evit ar bec'herien
En ho kenver koulskoude ken dizeblant ha yen !
7. D'eoc'h eo an erv hag ar greun, ar prad hag al loened,
Ni 'zo mevelien ho ti, gant eneoù sklaset,
Sklaset dindan an avel a c'houez eus an ifern ;
Eno, mar n'hon diwallit, e kouezimp bern-war-vern !
8. Mirit hon teod 'n hon genou evit na finvo ket
Da gomz dirak an nesa komzou an droukspered :
Renit hon daouarn, hon treid, ha dreist-holl hon ene,
Ma vo hon erv eeun ha leun ha kaer an eost goude !
9. Ha goude beza poaniet dirazoc'h er bed-man,
Goude beza pedet stank en hoc'h iliz aman,
Dirak ho tron en Nenvou, d'eoc'h ni holl a gano
Kan an anaoudegez vat, 'vel ma kaner eno.

Nº XV. — Adoromp holl e Sakramant an Aoter.

(♩ = 58)

Al - dor omp holl e Sa-kra-mant an

Ao - ter Gwir val Dou-e Jezuz hon

mestr hon Sal- ver Spe - re-jou e - ii -

rus ni ho ped da zis - ken D'e,


a - do - ri ga - nimp D'e veu-li da vi -

Ken D'e veu - li da vi - Ken

2. En em c'hraet den evidomp dre drugarez,
Hag en osti 'n em guzet dre garantez,
Deut, ma Salver Jezus, diwar an Aoter-man
Da rei d'imp breman, ho pennoz ar wella(n)
Ho pennoz ar wella(n).
3. Enor ha gloar ha karantez hollbadus,
D'an tri ferson eus an Drinded eürs :
D'ezo gloar, meuleudi, ha bemnoz, ha bemde,
E-pad an-holl amzer hag an eternite,
Hag an eternite,

N° XVI. — A-vreman betek ar maro.

(♩ = 58)




2. D'ar bobl 'zo aman, ma Salver,
 O kana dirak hoc'h Aoter,
 Teurvezit rei, gant ho pennoz,
 Nerz d'ho servija deiz ha noz.

3. Enor d'an Tad ha d'ar Spered
 Dre-holl, dalc'hmat, 'vel m'eo dleet :
 Ha da Jezuz-Krist, hon Salver,
 Er Sakramant eus an Aoter.

N° XVII. — Meulomp holl da viken.

(♩ = 104) Diskan



2
 Biskoaz tad ne voe gwelet
 Ouz bugale ken mat,
 Ken soursius dalc'hmat
 D'o diwall korf ha spered.

3
 Pastor karantek-meurbet
 Na sell ket ouz e boan,
 Klask a ra hep ehan
 An danvad kaez dianket.

4
 Lamet en deus an anken
 A-ziwar ma spered,
 Trec'h d'am c'horf ha d'ar bed
 Torret en deus ma chadenn.

5
 Pareet 'n deus ma ene,
 Hen an holl vadelez,
 Ha ma magadurez,
 Mar karan. 'vo ma Doue.

6
 Skuilha a ra hep skuiza(n)
 E c'hras bemdez warnoun ;
 Hag e-kreiz ma c'halon
 Eman ma Salver breman.

7
 Hen eo ma finvidigez,
 Ma nerz ha ma skoazell :
 Rak-se betek mervel
 E kanin, e vadelez.

N° XVIII. — Meulomp e pep amzer.

Ton : XVII

Diskan

Meulomp e pep amzer
 Kalon Jezuz hon Salver.

1
 Me ho meul, o ma Jezuz,
 C'houi hoc'h eus ma c'hrouet,
 C'houi hoc'h eus ma frenet,
 C'houi am mag, o ma Jezuz.

2
 Mil bennoz d'eoc'h, o Jezuz.
 C'houi a zo ma fastor,
 C'houi a zo ma zenzor
 C'houi 'zo ma holl vad, Jezuz.

3
 Pec'het em eus, o Jezuz,
 Alies em buhez :
 C'houi hoc'h eus bet truez
 Ouz-ma stad, o ma Jezuz.

4

Ma ene paour, o Jezuz,
Ganeoc'h 'zo bet gwalc'het,
Breman eo kaer-meurbet
Dre ho kras, o ma Jezuz.

5

Ma skoazellit, o Jezuz,
Ar rest eus ma deizioù,
E-kreiz ma holl boanioù,
Bezit ganin, ma Jezuz.

6

Hastit, hastit, o Jezuz,
Terri ma chadennoù :
Na pegoulz en Nenvou
Ho meulin, o ma Jezuz.

7

Meuleudi d'eoc'h, o Jezuz,
Dre-holl, e pep amzer ;
C'houi ken mat 'n hon c'hen
Meuleudi d'eoc'h, ma Jezuz.

N° XIX. — Enor ha gloar.

(♩ = 72) *diskan*

O - nor ha gloar da vir - vi -
ken da Jezuz-Krist Roue ha deus Roue Tad
e groue - su - rian. Krouet en deus bez an ar -
bez d'e servi - ja gant le - ve - ner d'hoz mirour
dalc' hmas ha kem - der


2. Dre nerz e vrec'h hollc'halloudus,
E hadas ar stered lintrus,
Tro-war-dro, d'e dron peurbadus.
3. Eur gomz hepken hag e teuas
An dour da veza ar mor bras :
Dizec'h an douar a chomas.

4. War ar parkou noaz hag hudur
Kerkent e ledas a glazur,
Bleunioù 'n e douez ha magadur.
5. An den ivez 'zo graet gantan,
Kement hon eus a zo d'ezan,
Koulz er bed all hag er bed-man.
6. E deiz ar Varn, hen a hejo
Hag a zrailho 'vel ma karo
Heol ha stered, bev ha maro.
7. O Pegen krenv dourn hon Roue !..
Krenvoc'h e gavan koulskoude
Pa sonjan en e garante(z).
8. Diskenn 'ra 'n eur c'hraou evidomp,
Paour ha simpl e vey eveldomp,
E youez a gelenn ac'hanomp !
9. Mervel a ra war ar C'halvar
Evit bugale ken digar
Stag o c'halon ouz an douar !
10. Chom 'ra dalc'hmat war an Aoter
Dindan spesou mut ha dister,
Gant aon da sponta ar pec'her !
11. Ha goude eun nebeut poaniou,
Skanvaet gant e holl c'hrason,
E tigor d'imp dor an Nenvou !
12. Mari e Vamm hag hon Mamm vat,
Deut ganimp da drugarekaat
Jezuz hon Roue hag hon Tad !

N° XX. — O Kalon Sakr.

(♩ = 54)

O Ka-lon, sakr eus ma je-zuz
Ka-lon, meur-bez ka-ran-te-zus Plijet se.



kreiz hon c'halo-nou.

2. C'houi eo ar vammenn dalvoudus,
Eus ar grasou krenv ha nerzus
A c'hallan kaout da bep mare
'vit derc'hel buhez em ene.
3. O Kalon Sakr c'houi 'zo eun nor
Hag a welan bepred digor,
Da zegemer ar bec'herien,
Pa ouzont ober pinijenn.
4. Bet-oun, siouaz, o ma Salver,
Dianaoudek en ho kenver :
Sellit ouz ma ene dic'hrad,
Distrei a ran a galon vat.
5. Torret em eus lezenn Doue
Kant ha kant mil gwech em buhe(z) ;
Muntrer euzus, bugel divat,
Treuzet em eus kalon ma Zad !
6. Pastor mat c'houi hoc'h eus klasket
An danvad a oa dianket,
Setu hen o c'houlenn pardon,
Digorit d'ezan ho kalon.
7. Stouet holl betek an douar,
Hon c'halon rannet gant glac'har,
(Lavaromp d'ezan, truezus :)
Pardon, pardon, Kalon Jezuz !
8. Pardonit d'imp-ni kristenien
An diegi, ar yenijenn
Hon eus bet ouzoc'h, keit amzer,
Er Sakramant eus an Aoter.
9. Pardonit c'hoaz an torfejou,
An dismegans, ar blasfemou,
Graet enep d'eoc'h gant an dud fall,
Ken gwaz hag er C'halvar gwechall !

10. Me a garfe em gwad gwalc'hi
Eus ma c'halon ar falloni :
Da vihana me a ouelo
D'ezi betek eur ma maro.
11. Ouspenn se en hoc'h ilizou
Gant doujans 'larin pedennou :
Alies er gomunion
E tigorin d'eoc'h ma c'halon.
12. An oferenn c'hoaz a glevin
Ken alies ha ma c'hallin :
Eno e kinnigin d'ho Tad
Ho kalon bev ha leun a wad.
13. Ho pet sonj ivez, ni ho ped,
Eus kalon ho mamm bet treuzet,
E-harz ar Groaz gant seiz kleze
Dre an nerz eus he c'harante(z).
14. Unanomp breman hon moueziou,
Lavaromp dre hon c'hantigou :
Gloar d'ho Kalon, Salver Jezuz,
Gloar d'ho Kalon, Mamm druezus.

N° XXI. — Da galon Jezuz.

(♩ = 63)



O na fell e-ta e ve-fen-me o c'hom ou.

Zoc'h yen pe glouar o c'hom ou zoc'h yen pe glouar
Diskan (ad lib)

ma si-kou-ru Jezuz binniget
ma c'hallin ho karout bepred. (2 w.)

2. C'houi hoc'h eus dibabet an danvez)
A vev em izili breman ;
C'houi hoc'h eus krouet d'in ma ene,
'vit m'hoc'h anavezin gantan ;
Ha goude ken espar donezon,
Hoc'h eus graet eur burzud nevez :
Kuzet hoc'h eus ennoun eur galon,
Ma c'hallin ho karout ivez. (2 w.)

2. Kemeret hoc'h eus bet en hon touez
Daouarn da c'houren ouz Satan,
Daoulagad da glask e-mesk an drez
An denved touellet gantan ;
Dioukouarn 'vit klevout hon c'hlemmou,
Eur vouez da rei d'imp ali mat,
Hag evit poueza hon ezommou,
Eur galon domm ha leun a wad. (2 w.)

4. Lein ar C'halvar a zo bet ruziet,
Gant gwad Jezuz a zistrilhe
Dre bemp gouli truezus-meurbet
Toullet a-hed ar vammen-se.
O pegen kriz gwelout eun Doue
Stag ouz eur groaz etre daou laer
N'eo ket an tachou houarn ho talc'he,
Met ho karantez 'n hon c'henver. (2 w.)

5. Na pegeit so en hon ilizou,
E teuit seul gwech m'ho kalver ;
Ha 'vel an aelez en Nenvou,
En em blijit war an Aoter

Ho prasa plijadur koulskoude
Eo diskenn en hon c'halonou
Ha keja e gwad ho pugale
Ar gwad a red en ho memprou. (2 w.)

6. War-lerc'h madoberou ken souezus
E-kenver eur paourkaez pec'her.
Ne glaskit ken ennoun, ma Jezuz
Nemet ma c'halon degemer :
D'eoc'h he gouestlan evit birviken,
'vit he mirout renit enni :
Mervel a rin sioul ha dianken,
Gant ho kalon bev em hini. (2 w.)

N° XXII. — Eur c'hantig all da Galon Jezuz.

(♩ = 104)
Diskan

En - or wat an douar e-vel e leun an Neñ.


you da ga-lon hon sal-ver kel leun a garan.

tez a bevar c'homar bed savomp zihel hon mout

ziou hanomp holl meulendi da ga-lon hon dou.

e ka-nomp holl meulendi da galon hon dou.

e. D'e. ga-lon neb a rend e - not



1
D'e Galon neb a rent enor,
Nag e ve pec'her,
He c'hav bepred digor
'vit e zegemer.


3
Mar poaniomp d'ober hon de
Jezus hon miro [ver.
En e Galon dener
Betek ar maro.

2
Koulskoude neb a chom amzent
Kaer en deus pedi,
Ne gerz ket war an hent
A ya betek hi.

4
Kalon Sakr, ni fell d'imp bre.
Ha da virviken, [man
Ho selaou, ha beva
Hervez ho lezenn !

N° XXIII. — Dirak skeuden ar Galon sakr.

(♩ = 69) Diskan



2
Eus ar gouli
A splann enni
E sav ar flamm ar c'haera ;
Gwir sklerijenn
'vit ar c'hristen
Jezus ro d'imp da heulia.

3
Ar groaz savet
Ar gwad skuilhet,
Ar spenn a red tro-war-dro,
A gomz ouzimp,
A lavar d'imp :
Ho pet sonj eus e varo.

4
Gant an Ae(z)
Evel Doue
Jezus, c'houi zo enoret :
War an douar
'z eus tud klouar,
Ouzoc'h ivez tud skournet.

5
War an Aoter,
E pep amzer,
Ganimp aman c'houi a chom
D'hon para
Ha d'hon maga,
D'hon c'hlevout e peb ezomm

6
Hag alies,
Na pebez mez !
Kristen eno ne weler.
Er Sakramant
Piou 'ra seblant
Ouz eur Galon ken tener ?

7
Kalon Jezus
Trugarezus,
Sellit ouzimp gant truez :
D'imp ho skoazell
Ouz pep avel,
Bremen ha 'pad hon buhez

8
D'hon c'huzat do(u)n
En ho kalon
Ni a zeu d'hoc'h aspedi :
Bepred eno
Neb a chomo
D'an Nenv 'yelo sur d'ho meul.

N^o XXIV. — Karantez ar Galon-Sakr.

Jezuz, a holl vis koar ennon hoc'h eus son.

Jez; Jezuz, a holl vis koar c'houi hoc'h eus ma c'harez.

Diskan

O Ka-lon Sakr Je-zuz, Ka-lon Sakr ma Dou.

e En-ta-niä ma c'balon gant tan bo ka-rante

2. Petra ho touge c'houi da rei d'in ar vuhez
Petra ho touge c'houi nemet ho karantez ?
3. Perak eus lein an Nenv emoc'h c'houi diskennet
E Kraouig Betleem ? Rak m' hoc'h eus ma c'haret.
4. Jezus, war ar C'halvar, pe liamm ho talc'he,
Astennet war ar groaz ? Lamm ho karante,
5. Petra a felle d'ac'h en eur sevel d'an Nenv ?
Digori 'r Baradoz d'ho pobl a garante.
6. Ganimp war an aoter perak emoc'h chomet ?
N'hallet ket dilezel ho pugale karet.
7. O Jezuz, pa-z-eo gwir n'houlet met karante
Perak eta, Jezuz, perak n'ho karan me ?
8. Jezuz, beteg breman, mar n'em eus ho karet,
Ho karout e fell d'in, hag ho karout bepred.

N^o XXV. — An anjeluz.

(J. = 69)

Euz arc'hael deus eus an Nenvou da va-ri

a berz an do-trou a gemmenas' ea di-ba-

ber e-via mamm da sal-ver ar bed.


2. Mari a lavaraz neuze :
« Servijerez oun da Zoue ;
Em c'henver eta bezet graet
Ar pezh hoc'h eus d'in diskleriet. »
3. An eil Person eus an Drinded
Kerkent den a zo en em c'hraet,
Bebet en deus war an douar
A-raok mervel war ar C'halvar.
4. Pedit, Gwerchez, Mamm Doue
Evidomp holl ho pugale.
Ma c'hounezimp kaout ar grasou
'ginnig d'imp Jezuz, hon Aotrou.

N^o XXVI. — An Anjeluz : O pia !

*Angelus Domini nuntiavit Mariae,
Et concepit de Spiritu Sancto.*

Ti ho sa-lud gant ka-ran-ter Mari Rou.

a-nez an ae-lez c'houi a zo binni-ges.




*Ecce ancilla Domini,
 Fiat mihi secundum verbum tuum.*

2. Ra vezo meulet ho pugel
 E pep lec'h, o Gwer'hez santel :
 Kanomp gant an aelez, o pia !
 E veuleudi bemdez, Ave Maria...

*Et Verbum caro factum est,
 Et habitavit in nobis.*

3. Diganeoc'h ivez ni c'houlenn
 Ho sikour pa vimp o tremen,
 M'hon bo digant Jezuz, o pia !
 Eur maro mat, eürus, Ave Maria...
*Ora pro nobis Sancta Dei Genitrix,
 Ut digni efficiamur promissionibus Christi.
 Oremus, Gratiam...*

Nº XXVII. — Anjeluz sul fask.



2. Alleluia, o pebez joa,
 D'eoc'h-c'houi, Mamm a garantez !
 D'imp-ni ivez, Alleluia,
 Pebez laouenidigez !
 O welet hon salver karet
 A varo da vev savet.

3. Gwer'hez santel, bezit joaus,
 Ho kalon 'zo dizammnet :
 A varv da vev eo deut Jezuz,
 Evel m'en doa lavaret ;
 Ha breman, Mamm drugarezus,
 Ra vimp ganeoc'h difennet !

N^o XXVIII. Anjeluz amzer bask.

Ton : O Filii, o Filia.

1. Mari, Rouanez an Nenvou,
Stankit breman ouz ho taerou,
Ha selaouit hon c'hantigou. Alleluia !

Diskan

Alleluia, alleluia, alleluia.

2. Ar Mab hoc'h eus gwechall douget,
War ar maro en deus trec'het,
Evel m'en doa hel lavaret, alleluia !

3. Mamm Jezuz, leun a drugare(z),
Ho pet sonj eus ho pugale,
Hag evidomp pedit Doue, Alleluia !

*Gaude et laetare, Virgo Maria, alleluia.
Quia surrexit Dominus vere, Alleluia.*

N^o XXIX. — An Ave Maris Stella.

(J. = 58)


9i ho sa lud ste - re - denn
 vor Mamm sa Zou-e leun a e -
 nor gwar c'hez be pred sor an 9leñ -
 vou se - laouit ouz hon pe - den - nou.

2. O klevout ar salud santel
A-berz an Arc'hael Gabriel,
E peuc'h Doue grit d'imp beva
O chench an ano a Eva.
3. Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re dall roit sklerijenn,
Hon mirit ouz pep droug dalc'hmat
Ha goulennit 'vidomp pep mad.
4. Diskouezit ez oc'h eur Vamm vat
E-kenver an dud emzivad ;
Grit m'hon selaouo an hini
Hoc'h eus ganet evidomp-ni.
5. Gwerc'hez dispar e pep doare,
Dous dreist an holl, glan a enc,
Gwerc'h ha divlam a bep pec'hed,
Grit ma vimp dous ha glan bepred.
6. Grit ma vo santel hon buhe(z),
Ha sur hon hent 'trezek Doue,
'vit ma vimp, o welout Jezuz,
En hon gwir vro ganeoc'h eürus.
7. Gloar atao d'an Tad eternal,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel ;
D'an tri ferson eus an Drinded
Hevelep enor 'zo dleet. Amen.

N^o XXX. — An Ave Maris stella.

(J. = 64)

Sa - lud d'eañ hag e - nor Gwir
 ste - re denn ar mor Mamm ge - zur hon ao -
 trou C'houi 'zo sor an 9leñ - vou Sa -




Pe ton : Ave Maris Stella

- | | |
|---|---|
| <p>2
Gant an ael saludet
Hag a c'hrasou karget,
Hoc'h ano, Maria,
'Zo dreist hini Eva.</p> <p>3
Dinaskit ar pec'her,
Roit d'ar re dall sklaerder ;
Grit d'hon poaniou pellaat
Grit m'hon bo pep seurt mad.</p> <p>4
Bezit d'imp eur Vamm vat,
Grit ma vo hon mennad
En Nenv degemeret
Gant ho Mab binniget.</p> | <p>5
Gwerc'hez ar gwerc'hezed,
Dous ha dinamm bepred,
Hor mirit gwerc'h ive(z)
A gorf hag a ene.</p> <p>6
Grit ma heuilhimp dalc'hmat
Didamall an hent mat,
Ken na vimp gant Jezuz
Da virviken eürus.</p> <p>7
O Trinded eternel,
Tad, Mab, Spere-Santel,
Ra vo graet d'eo'k'h ho tri
Hevelep meuleudi.</p> |
|---|---|


(Levr bugale Mari).

N° XXXI. — Ar Salve Regina.



2. D'eo'k'h-c'houi, Gwerc'hez e kasomp hon pedenn,
Ni divroet ha siouaz ! pec'herien :
Ouzoc'h, Gwerc'hez, ne reomp met gouela,
Ni hag a zo bugale da Eva. (
3. Ouzoc'h bepred e tomm hon c'halonou,
D'eo'k'h e kasomp hon gouelvan, hon daerou ;
Hon fizians-ni 'zo en ho madelez,
En draonienn-man leun a distrigidez.
4. Rak-se pa 'z oc'h hon difennourez ker,
En hon c'henver bepred dous ha tener,
En an' Doue, troit ho taoulagad
Ouzimp-ni holl, tud paour hag emzivad.
5. Pa zeuy an deiz da guitaat ar bed-man,
Raktal goude hon hirvoud diveza(n)
Diskouezit d'imp, Mamm vat ha truezus,
Er Baradoz, dremm sakr ho Mab Jezuz.
6. O Gwerc'hez sakr meurbet karantezus,
O Gwerc'hez dous, meurbet trugarezus,
Ni hoc'h asped, da glevout hon pedenn,
Hon diwallit breman ha da viken !

N° XXXII. — Ar pemp mister a joa.



joa he de-va ar 'Wer- c'hez Pa
 voe gant an ael sa-lu-dek e.
 Diskan
 vel Mamm da sal- ver ar bed a.
 ve, a-ve, a-ve Ma-ri-a; a.
 ve, a-ve, a-ve Ma-ri-a.

2. En eil mister setu Mari
 O kuitaat he bro hag he zi,
 Evit gwelout Elizabed,
 A zouge Sant Yann binniget.
3. En trede mister, hon Salver
 'zo ganet en eur c'hraou dister,
 Hag a lavar d'imp distaga (n)
 Hon c'halon diouz traou ar bed-man.
4. Er pevare mister, joas
 Ar Werc'hez hag he mab Jezuz
 'n em ginnig en templ evidomp :
 Ganto da Zoue 'n em ouestlomp.
5. Er pempet mister, ar Werc'hez
 A gavas goude tri devez
 He mab e-touez an doktored,
 Leun a furnez hag a spered.

N^o XXXIII. — Ar pemp mister a C'hlac'har.

TON : XX.

1. Ar c'henta mister truezus
 A ziskouez d'imp glac'har Jezuz
 Beuzet en eur c'houezenn a wad
 Ha stouet o pedi e dad,

Diskan.

O Kalon Sakr eus ma Jezuz,
 Kalon meurbet karantezus
 Plijit selaou ar pedennou
 A sav eus kreiz hon c'halonou.

2. D'an eil mister e voe freuzet
 E gorf santel a daoliou fouet :
 Evit hon pec'hejou mezus
 E c'houzanv eur boan ken euzus.
3. Eur gurunenn spern war e benn,
 Etre e zaouarn eur gorzenn,
 Eur goz vantell en-dro d'ezan,
 En trede mister a welan.
4. Jezuz, er pevare mister,
 A zoug e Groaz dre ruioù kêr,
 Hag a gouez teir gwech d'an douar
 O vont etrezek ar c'halvar.
5. Er pempet mister, Mab Doue
 A ro evidomp e vuhe (z) :
 Piou a vezo c'hoaz ken dic'hrad
 Da c'hlac'hari Jezuz ken mat.

N^o XXXIV. — Ar pemp mister a c'hloar.

TON : XXIX.

1. Er c'henta mister gloriuz,
 Kanomp meuleudi da Jezuz :
 Rak eus ar bez eo bet savet,
 Goude tri deiz 'vel 'n doa lâret.

Diskan.

Ni ho salud, steredenn vor,
 Mamm da Zoue, leun a enor,
 Gwerc'hez bepred, dor an Nenvou,
 Selaouit ouz hon pedennou.

2. Jezuz, en eil mister a c'hloar,
 A zeu da guitaat an douar,
 Sevel a ra d'ar Baradoz,
 Eno eman ouz hon gortoz.

3. En trede mister me a wel,
Er sal war benn an ebestel,
Ar Spered-Santel o tiskenn
Da rei d'e nerz ha sklerijenn.
4. D'ar pevare mister, Mari,
E-kreiz ar joa, ar veuleudi,
A zo douget, korf hag ene
D'ar Baradoz gant an Aele(z).
5. D'ar pempet e voe kurunet
Mari hon Mamm gant an Drinded :
En Nenv breman, dirak Doue,
N'ankouna ket he bugale.

N^o XXXV. — Ar Memorare.

(J.=69)

O Gwerc'hez Va - ri leun a dru -
ez m'ho ped da zerc'hel sonj be - pred Pe -
naos biskoaz den en e vu - her'n'endous na
gwe - les na kle - ver ho pi je di - le -
zer bep skoa - zell kli - ni a
ge - ment a xeu - e O'en em wouestla d'eoc'h

be - tek mer - vel d'ous pe - gen
Diskan
bras pec'her vi - je O Gwerc'hez va - ri
leun a dru - ez m'ho ped da zerc'hel sonj be -
pred, pe - naos biskoaz den en e vu -
bez ganeoc'h ne deo bet di - le - xer


2. Nann, biken ne c'houllfec'h dilezel
Neb a zeu gant fizians, ennoc'h
Da guzat dindan ho tiouaskell
Ha d'en em erbedi ouzoc'h :
Hirie em c'halon ar fizians-se,
O Gwerc'hez, Mamm, ar Gwerc'hezed,
E teredan davedoc'h ive(z),
Gant ho madelez gounezet.
3. Oc'h hirvoudi dirazoc'h aman,
Pa 'z eo glac'haret ma c'halon,
Evit ar wech-man c'hoaz e kredan
Ho pedi da gaout ma fardon :
Pa 'z oc'h gwir Vamm ma Salver Jezuz,
Na zisprizit ket ma fedenn,
Grit c'hoaz ouzin eur sell truezus,
M'ho ped, roit d'in ma goulenn.

Diskan.

O Gwerc'hez Vari leun a druez,
M'ho ped da zerc'hel sonj bepred
Penaos biskoaz den en e vuhez
Ganeoc'h ne deo bet dilezet.

N° XXXVI. — Gwerc'hez Vari Rouanez.

(♩ = 60)




1. Gwerc'hez vari, Rouanez an Nennou,
Mamm d'hon Salver ha Mamm d'ar gristenien,
Plijet ganeoc'h selaou holl bedennou
Ho servijerien.

2. O Mamm dener, o Mamm drugarezus,
Hon diwallit diouz ar pec'hed marvel :
Grit d'imp kaout pep a varo eürus,
Eur maro Santel.

N° XXXVII. — Gwerc'hez, diwar ho tron.

(♩ = 52)





1. Goullit 'vidomp karout Jezuz,
Ha war e lerc'h kerzout, nerzus,
Grit ma vin d'ezan feal bepred
O Mamm vinniget, o Mamm vinniget !

2. En eur ar maro, me ho ped,
Ma mirit ouz an droukspered :
Deut da serri d'in ma daoulagad,
O Mamm dous ha mat, O Mamm dous ha mat.

N° XXXVIII. — Santez Mari, Mamm Doue.

(♩ = 112)






2. E-touez ho servijerien, d'am c'hemer me ho ped,
Meurbet eo dous ho serviji, c'houero servij ar bed:
Netra dre holl an douar, a bep tu pa sellan,
Netra ken karantezus evel d'oc'h ne welan.

3. O Gwerc'hez, me lavar d'eoc'h, na rin, na lavarin
Netra enep hoc'h enor e-keit ha ma vevin:
En-dro d'in, den ne lezin, mar gallan d'ho poania,
D'ho poania, Mamm ma Jezuz, ar Vamm an denera.

4. Hed ma buhez em labour sonjit ennoun bepred,
Dreist pep tra, war ma maro, deut d'am sikour, m'ho ped.
En ho taouarn d'am Barner mar dougit ma ene,
Sur ec'h in d'ar Baradoz d'ho meuli hep dale.

5. Evit gwelloc'h enori ano ma Rouanez,
Ha beza bugel gwirion ar Vamm a vadelez,
Me a glasko rei skoazell d'an dud kaez ankeniet,
Breudeur omp holl, bet prenet gant he Mab binniget.

N^o XXXIX. — Kantig sant Kazimir, roue.



2. Teod an den a zo gwall zister
Evit komz eus a Vari;
Met he c'halon a zo tener
Holl e c'hallomp he meuli.

3. Eus a Vari an holl boblou
A denn gloar ha sklerijenn,
He santelez he vertuziou,
A zo skouer ar gristenien.

4. He mouez 'lavar, leun a druez:
« Sentit, sentit ouz Jezuz,
« Ha m'e garit 'hed ho puhez,
« Jezuz ho lako eürus. »

5. Kalonou sec'h ha glac'haret.
Deut da gavout ar Werc'hez;
Gant Mari 'vezet frealzet
Er vrasa tristidigez.

6. C'houl hec'her paour a-greiz kalon
Pedit, enorit Mari:
Hag evit kaout gras ha pardon
Ho pet holl fizians enni.

7. N'ankouait ket, c'houi den santel,
Ez eo Mamm an holl c'hrasou ;
'n em zerc'hel dindan he mantell,
Zo kemer hent an Nenvou.
8. O Mari, klevit ma fedenn,
Pareit ma gouliou ;
En ho krasou roit d'in lodenn
Ha perz en ho vertuziou.
9. Evidomp hell dirak Jezuz,
Pedit, Mamm a drugare(z) ;
Pred ar maro a vo fromus,
Deuit d'hon skoazella neuze.
10. Ar re a zeu e gwirionez
War an douar d'ho pedi.
Grit ma 'z aint gant an Aelez
D'ar Baradoz, d'ho meulli.

N° XL. — Mari, hon Mamm.

(♩ = 118)

da vi - ken o Mamm ger ni vo
ho pu ga - le gant si - kour ho ka lon de vel
a ga ran - tez Ho pel sonj mar
o Mamm de ner a gomz di - we - ra hon sal -
ver pa de war ar groaz as - ten - na
Ken kin - nig d'e ad e spe - red

2. Jezuz da Yann a lavare :
« Selaou, e man da Vamm aze. »
D'eoc'h e lavare, o Gwerchez !
« Ho Mab evel doun 'vo hennes. »
3. C'houi 'oar, 'n eun doare meurbet splann,
N'oa ket hepken, eno, Sant Yann,
Met ni holl Jezuz a roe
D'eoc'h-c'houi, hon Mamm, da vugale.
4. Gwerchez ni 'oar pell 'zo, ivez,
Ez oc'h ar Vamm a garantez ;
Kalon eur vamm, d'he bugale,
A vez digor da bep mare.
5. C'hoaz e fell d'imp d'eoc'h 'n em ouestla,
Mari, hon Mamm, ar vamm wella.
Pa 'z omp ken sempl, n'hon eus esper
Nemet 'n ho kalon ken tener.

N° XLI. — An ano Santel a Vari.

(♩ = 104)

E. nor d'hoc'h a - ni bin - ni - get
Ra ve - zo gant an holl meubet Mra.
ri Ra ve - zo gant an holl meu.
Ech.


2. O Mamm dener, piou 'lavar
An holl douter eus hoc'h ano,
Mari,
An holl douter eus hoc'h ano,

3. Ano Jezuz ea ar c'haera,
Ano Mari eo an dousa,
Mari,
Ano Mari e an dousa.
4. Ar ger Mari 'zo Rouanez,
Itron, Steredenn ha Mestrez,
Mari,
Itron, Steredenn ha Mestrez.
5. Hag 'eun ano ken gloriuz
A oa dleet da Vamm Jezuz,
Mari,
A oa dleet da Vamm Jezuz.
6. Rak mar deo Jezuz hon Roue,
C'houi 'zo hon Rouanez ive(z).
Mari,
C'houi 'zo hon Rouanez ive(z).
7. Jezuz a zo gwir heol an den,
Ha c'houi a zo e steredenn,
Mari,
Ha c'houi a zo e steredenn.
8. Jezuz, ho Mab eo hon Aotrou,
Ha c'houi, Itron hon c'halonou,
Mari,
Ha c'houi, Itron hon c'halonou,
9. Itron ha n'he deus ket he far,
Nag en Nenv na war an douar,
Mari,
Nag en Nenv na war an douar.
10. Hoc'h ano 'zo dous d'hon genou,
Dousoc'h eo c'hoaz d'hon c'halonou.
Mari,
Dousoc'h eo c'hoaz d'hon c'halonou.
11. El levriou ne glaskan netra,
Nemet hoc'h ano, da genta,
Mari,
Nemet hoc'h ano da genta.
12. N'eus ket kaeroc'h 'vit ar c'hleved,
Eget hoc'h ano binniget,
Mari,
Eget hoc'h ano binniget.

13. Me e veulo diouz ar beure,
Ha pa zeuy an noz adarre,
Mari,
Ha pa zeuy an noz adarre.
14. Em poaniou me e veulo c'hoaz,
Evit ma vo skanvoc'h ma c'hroaz,
Mari,
Evit ma vo skanvoc'h ma c'hroaz.
15. D'am frealzi war ma maro,
Ne c'houlennan 'met hoc'h ano,
Mari,
Ne c'houlennan 'met hoc'h ano.
16. Pa vo klozet ma daoulagad,
Me sonjo em Mamm dous ha mat,
Mari,
Me 'sonjo em Mamm dous ha mat.
17. Pa vezo 'ma zeod sklaset.
A galon 'lavarin bepred,
Mari,
A galon 'lavarin bepred.
18. Eürus mar gallan mervel
Gant hoc'h ano war ma muzell,
Mari,
Gant hoc'h ano war ma muzell.

(Levr Bugale Mari.)

Nº XLII. — O ma Jezuz, na pegen kaer !



na pe-gen kaer eo an e - ne
 a gar Ma - ri mamm da Zou - e .

le
 2 *2+3*
 O ma ge-xuz na pe-gen kaer
 Bem dez bem-noz e pep an-xer
 na pe-gen kaer eo an e - ne
 a gar Ma - ri Mamm da Zou - e .

2. Petra ray d'in an droukspered,
 Pa 'z ouñ gant Mari diwallet ?
 Raktal ma klevo ma fedenn,
 He zroad a vruzuno e benn.

3. Ar c'horf, ar bed, a fell d'ezo
 E stagfen ma c'halon outo :
 Ma c'halon-me 'zo da Vari,
 Pell 'zo 'm eus he roet d'ez.

4. War ma maro ne grenin tamm,
 Rak neuze me 'welo ma Mamm
 E-touez hec'h aelez o tostaat
 Da gloza d'in ma daoulagad.

5. Karit, holl boblou, ma ltron,
 Hag e pouezot en ho kalon
 Pegen eürus eo an ene
 A gar Mari Mamm da Zoue.

N° XLIII. — M'ho kar, Gwerc'hez.

(♩ = 66)

M'ho kar gwer-c'hez Bag
 ho ka-rou ma 't. tron 'vel ma sal-
 ver fell d'in diouz ma gwel-la
 M'ho kar gwer-c'hez ha be pred 'kreizma
 c'ha-lon Gori-de ge-xuz c'houi^{Diskan}
 a vo ar gen-ta Ma-ri, ma
 't. tron ma c'haran-ter
 Re-niñ em c'ha-lon ha bemnoz ha bem.
 dez Re-niñ em c'ha-lon ha bem.
 noz ha bem-dez.

2. M'ho kar, Gwerc'hez, rak me 'ghev war ar C'halvar
Ar Groaz hoc'h eus gleviet gant ho taerou
O lavarout : Ar Werc'hez ivez da gar,
Pa ro he Mab evit da bec'hejou.
3. M'ho kar, Gwerc'hez, ha ganeoc'h ez oun karet,
Ho karantez, ganti 'vin bepred krenv ;
Nag a c'hrasou dre ho taouarn binniget
D'an neb ho kar a ziskenn eus an Nenv !
4. M'ho kar, Gwerc'hez, pet gwech dirak hoc'h aoter,
N'em eus ket me kontet d'eoc'h ma foaniou ?
C'houi 'roe d'in nerz ha fizians, Mamm dener !
Mari, ma Mamm, c'houi sec'he ma daerou !
5. M'ho kar Gwerc'hez, hag evit ma vin karet
En holl amzer, ganeoc'h-c'houi muioc'h-mui,
Me a viro ma ene ouz ar pec'hed
Ha ne garin nemet Jezuz ha c'houi.


Miz Mari an Ao. Cabec.

N^o XLIV. — Da Vari a-viskoaz.


(♩=58)




Ken-ta kom-zou a res kis war an oaled ar




gêr a voe'n ano a va ri ha Jezuz e mab



Ker our mac'herc'hen e tougen e-pign he me da




Kenn ha-me ho soled Mari voe mui



Jenn a va a-nik den.



rel bag e - no rel ar Werc'hez



Be-pred em aus bec'h an - sa-vez




e vin Mamm ha Rou a nez

2. Nag a wech he dourn tener, abaoe ma badeziant,
'bellaas diouz ma c'havell pechou an aerouant ;
Nag a wech he daoulagad, evel diou steredenn,
War eun dro gant re ma mamm, a baras war ma fenn !
3. 'lies em bugaleaj ma mamm d'in lavare :
« Eur vamm all ec'h eus en Nenv gwelloc'h egedoun-me. »
Ha p'am douge d'an iliz, biken n'ankounain,
Dirak aoter ar Werc'hez am lake d'an daoulin.
4. Brassat 'rae ma fizians dre ma kresken en oad ;
Gant aon da boania ma Mamm e talc'his en hent mat.
Betek an deiz m'am renas 'trezek an daol santel,
E-lec'h ma tiskenn Jezuz e kalon e vogel.
5. Breman pa vezan nec'het gant klenved pe glac'har,
Pa welan an droukspered o c'hantaat ma diskar,
Eus kreiz ma c'halon kerkent e sav eur griadenn :
« O Mari, o Mamm garet, deut eta d'am djenn.
6. Eun deiz pa vin daoubleget dindan ar bloaveziou,
Hag e ve stanket ma mouez ha mut ma muzellou,
E sonjin bepred ennoc'h, ha da heul ma ene,
Ez ay, ma Mamm, hoc'h ano ganin betek Doue.

N^o XLV. — Maria, Mater gratiæ.

(♩=58)



ghev war ar Werc'hez c'halvar - duz Mamm




dous ha Mamm de - ner C'houi zo bepred triu.
e - aus e Kenver ar pec'her Pel -
la - a dioux hon e - ne e ene - bour, dreist
holl da fin hon bu - hez Deu d'honoi - kour.

2. Enor d'eoc'h, Salver ar bed,
Gloar d'eoc'h ha meuleudi,
C'houi hag a zo bet ganet
Gant ar Werc'hez Vari :
D'an Tad, ha d'eoc'h-c'houi ive(z),
Spered-Santel,
D'an tri Ferson e Doue,
Gloar eternal !

N° XLVI. — Kalon dous a Vari.

(J = 112)



Ka - lon dous a Va ri leu a ga - ran.
ter ni zeu d'ho da lu di gant an holl ve -
Diskan
ler a - ve, a - ve, a ve Mari - a ; a
ve, a - ve, a - ve Mari - a

2
Piou c'hallfe lavarout,
Kalon druezus,
Pegeit 'it 'vit karout
Bugale Jezuz ?

3
C'houi hoc'h eus e welet
Er c'hraou evidomp,
War ar plouz astennet,
Ha paour eyeldomp.

4
Ganeoc'h e Nazared
Jezuz, ho pugel
En deus bet labourer
Da rei d'imp kentel.

5
War ar C'halvar goude
Pebez kalonad !
Dirazoc'h pa skuilhe
Evidomp e wad.

6
'N e gomzou diweza,
Sonj hoc'h eus, Gwerc'hez
'Lavare d'eoc'h beza
Mamm an holl dud kaez.

7
Eur Vamm a galon vat,
Dreist an holl mammou
En hon c'henver dalc'hmat
Ez oc'h en Nenvou.

8
Bremen omp holl spontel
Mui eget biskoaz,
O welout disprizet
Jezuz hag e Groaz.

9
Ar bed en deus ezomm
'N eun amzer ken kri(z)
Eus eur galon ken tomm
Ha kalon Mari.

10
An Iliz hag ar Pab
'N ho trezeg a sell,
Digant Jezuz, ho Mab
Pa glaskont skoazell.


11
Selaouit ouz o mouez,
Komzit ouz Jezuz,
Ma vougo en hon touez
Ar brezel mezus.

12
Ar Brezel didruez
A reer a bep tu,
Enep ar Wirionez,
Enep ar vertu(z).

13
Röit nerz ha skoazell
D'imp ivez e Breiz,
Ha mirit divarvel
Ar Feiz en hon c'hreiz.

N° XLVII. — Da galon Mari.

(J = 54)



Eur c'hoant bras am eus da veu - li
Ka - lon ma mamm ka - lon Ma - ri Ho - an

penaos e kre sin me Meuli tron eü rus
 Maß Dou.e. Ka-lon sous a Va-ri
 Pe-si, ey-i-samp-ri.
 Con all (J.=76)
 Sur c'hoant bras am eus da ven. li
 Ka lon ma mamy ka. lon Ma-ri
 Ho gen pe-naos e kre sin me Meuli tron
 eü rus Maß Dou.e Ka-lon.

2. Doue 'grouas ar bed kaera
 Evit palez d'an den kenta :
 Evit rei d'e Vab eur palez
 E krouas kalon ar Werc'hez.
3. Palez an den 'zo burzudus :
 Mil gwech kaeroc'h palez Jezuz ;
 Tenva eo heol, aour ha perlez
 E-kichen Kalon ar Werc'hez.
4. Kalon Mari a zo eun nor
 D'ar sant ha d'ar pec'her digor,
 Digoret gant ar seiz kleze
 A dreuzas gwechall hec'h ene.

5. Poblou diskenvel eus ar bed,
 Na c'houi hoc'h eus biskoaz klevet
 'vefe bet kollet an hini
 En em guz e kalon Mari ?
6. Kousket war boull-Kalon Mari
 Jezuz en deus roet d'ezi
 Galloud, truez ha madelez,
 Pep tra, met e zoueelez.
7. Kalon Mari, kalon Jezuz,
 Diou galon ken karantezus,
 Enno'h pa sonjan, ma c'halon
 Leun a fizians a drid enno(u)n.

I.-W. Herri, beleg.

Nº XLVIII. — Me a laka ma fizians.

(J.=69)
 Me a la-ka ma fizians gwerc'hez en ho si.
 Kour seul ta m'ho ped gant dou-jañs
 S'argas ma en.e-bour pa vo ma eur si.
 we-ra ra xey ho ka-ran-ter d'a.
 Ber d'ij mont d'a-re-ra e-kichen an de-ber.

2
O Mamm leun a drugarez,
O Gwerc'hez vinniget.
Ra vimp bemnoz ha bemdez
Gant ho prec'h skoazellet :
Kinniget d'ho Mab santel
Pedenn ho pugale,
Ha selaouet 'vint kent pell.
Sur omp a gement-se.

3
Gant c'hoant da greski ar gloar
'Zo dleet d'eoc'h, Gwerc'hez,
M'ho karo war an douar,
'Vel Mamm ha Rouanez ;

Ouspenn e fell d'in. Itron,
Dougen d'hoc'h enori
Kement den 'zo dindano(u)n
Ha ganto ho meuli.

4
Sellit 'ta ouz ma daerou,
O Mamm a vadelez :
Ma frealzit em poaniou
Hag em zristidigez ;
Torrit ma holl chadennoù,
Kemerit ma c'halon,
Koulz ha war sent an Nenvou
Renit ivez warno(u)n !

Nº XLIX. — Na pegen kaer eo Mamm Jezuz.

TON : XIX.

Diskan.

Na pegen kaer eo Mamm Jezuz,
Pegen dous ha karantezus,
Pegen mat ha madelezus !

1. Lavar d'in-me, den an Arvor,
Ha ken kaer eo da vag war vor.
Gant he gouelioù gwenn-kann digor ?

2. Lavar d'in-me, den an Argoad,
Ha ken kaer deliou glas ar c'hoad,
Pa zeu an heol splann d'o sklaeraat ?

3. Lavar d'in-me, den an Are,
Ha ken kaer eo lein ar mene(z),
Gwenn-kann gant an erc'h, d'ar beure ?

4. Lavar d'in-me, mesaer loened,
Hag-hen z' eus steredenn ebet
Ken kaer en noz steredennet ?

5. Lavarit d'in, tud ar maeziou,
Ha ken kaer eo ar glazennoù
O lintra gant ar glizennou ?

6. Lavarit d'in, bugaligoù,
Er pradou o kutuilh bleunioù,
Ha bleunv ken kaer 'zo er pradou ?

7. Nag en Arvor, nag en Argoad,
Er menez, en oabl, nag er prad,
Netra ken kaer, netra ken mat.

An Ao. Kermarker.

Nº L. — Mari hon Mamm garantezus.

TON : V.

2. Ezomm en deus en e neizig
Eus askell e vamm, an evnig :
Dindan ho tiouaskell ive(z),
Mari, kuzit ho pugale.

3. D'an hanv, pa verv an heol re domm,
Ar roz a c'h'lao en deus ezomm,
Degasit warnomp gliz Doue,
Sec'h-korn, allas ! eo hon ene.

4. Ezomm o deus an denved keiz
Da veza miret ouz ar bleiz ;
Ni hon eus ezomm, Gwerc'hez c'hlan,
Da veza miret ouz Satan.

5. Eur c'hrouadurig 'n e g'lenved,
Gant an derzienn pa vez devet,
A c'halv e vamm evit kaout dour :
No 'zo klanv-bras, deut d'hon sikour.

6. War vor, pa stourm ar gwall amzer,
Hep dale bag ar peskataer
Ouz ar rec'hel a vez drailhet
Ma chom an Avel kounnaret.

7. Ar bed a zo eur mor euzus
Tenval, meinek ha houlennus :
Hon bag a zo skanv ha dister,
Diwallit-hi, o Mamm dener !

(Troet diwar Brezoneg Gwened.)

Nº LI. — Da Vari, Patronez Eur Barroz Pe Eur Chapel.

(J.=66)

Rou - a - nez vras an Yeu - vou a
zo hon pa-tro - nez en des-ped d'hon pe -
c'he - jou ha d'hon simpla - du - rer. C'houi
'zo bez gwerc'hez va - ri mamm va ha hon ta - jou
Roz: Warnomp i-vez ni ho ped ha
skuil - ha ho pen - noz.

1. Aman, pa vezomp dined'h, d'he meuli e teuomp,
Ha da ouela dirazi pa gouez anken warnomp.
2. Nag a glenved eneoù, nag a boaniou spered
A zo bet aman ganti 'n hec'h iliz pareet !
3. Pegen dous ar blijadur a garg hon daoulagad
Dal ma welomp ti hon Mamm kuzet 'n eun tammig koad !
4. Hon c'halon a drid ennomp o klevout, dudiùs,
Mouez he c'hloc'h teir gwech bemdez o son an Anjeluz.
5. Paour, pinvidik e teskomp abred d'hon bugale
Anavezout, servija Rouanez an Ae(z).

6. Talvoudusoc'h 'vo d'ezo, yac'husoc'h d'oc'h ene,
Kerzout eeun gant he lezenn eget dastum leve.
7. Ar bugel a gar Mari, en em blij gant e dud,
O poanial er ger ganto pell diouz gwall-skouer ha brud.
8. An den yaouank he selaou, 'vez gwell gantan mervel
Eget glac'hari Doue dre eur pec'hed marvel.
9. Mar 'n em gav bugel Mari e-touez an dud estren,
N'en deus ket mez eus ar Groaz nag eus ar Feiz kristen
10. Heulia 'ra lezenn ar sul ha lezenn ar gwener
Evel pa oa en e vro gant e gerent er ger.
11. Eürus neb a dremeno e vuhez penn-da-benn,
E skeud iliz hon Itron, dindan he c'hurunenn !
12. Eürusoc'h neb a varvo 'n eul lavarout : « Mari ! »
Hag a vo beziet e gorf er vered 'tal he zi !
13. Eno betek deiz ar Varn, na brao e vo kousket,
'vel eur bugel gant e vamm 'n e gavell lusket !

Nº LII. — Rouanez an Iliz.

(J.=66)

Rou - a - nez an Y - liz Ma -
ri gwerc'hez san - tel ma - ri Mamm da ye -
ruz ha Mamm an e - bes - tel
ni 'zo ho pu - ga - le Be tek eur hon ma
ro 'vil an Y - liz hon Mamm bem



2. Ar bed hag an ifern unanet gant kounnar,
'ra brezel d'an Iliz, dre-holl war an douar ;
Met hoc'h ano, Mari, 'spouron an droukspered ;
'vit difenn an Iliz, da sevel ni ho ped. 2 w.
- 3 M'ho kwel, Iliz, ma Mamm, 'vel gwechall lestr sant Per,
O redek mor ar bed dastrewet a reier :
Ar gwagennou 'a groz, dre-holl tenvalijenn ;
O Stredenn ar mor degasit sklerijenn ! 2 w.
- 4 An Iliz er bed-man, 'vel Jezuz 'gerz, siouaz !
Spern war he fenn santel, war he diousoaz eur groaz :
Mari, c'houi heulie Jezuz war hent ar C'halvar,
Bezit gant an Iliz pa 'z eo leun a c'hlaç'har. 2 w.
5. Bezit ivez, Gwerc'hez, gant ar Pab 'zo anvet
Tad an holl' gristenien, Pastor an holl zenved,
Sturier bras an Iliz, vikel Jezuz, ho Mab ;
Roit skoaz, O Mari, d'hon Tad Santel Ar Pab ! 2 w.
- 6 Hon Tad Santel Ar Pab, gant ar Spered-Santel,
En deus bet diskleriet vel an Ael Gabriel,
Oc'h bet karget a c'hraas krouet holl hep pec'hed ;
Pedit evit hon Pab, o Mari, ni ho ped. 2 w.
7. An Iliz hag ar Pab 'zo breman dilezet :
D'an Iliz ha d'ar Pab, ni 'zalç'ho, Bretoned !
Er-maez eus an Iliz 'neus ken 'met ar maro :
Mirit eta Mari, an Iliz en hon bro ! 2 w.

40 devez a « induljansou » a-berz an Ao
BOUCHE, Eskob Sant-Brieg ha Landreger
(Levr Bugale Mari).

Nº LIII. — Mari Rouanez Breiz-Izel.



2
En oc'h holl bedennou,
Gwerc'hez vinniget,
'Vezit e kalonou
An holl Vretoned.

3
Bep beure ar poanour,
D'an daoulin stouet,
A-raok mont d'e labour
Ouzoc'h 'n em erbed.

4
War gern ar menezioù,
Mesaer an denved,
A gan ho kantigou
E-touez e, loened.

5
'Lies war an tornaod,
'Liesoc'h war vor,

E ped ar martolod
Steredenn Arvor.

6
Pa son teir gwech bemde(z)
Kloc'h an Anjeluz,
'Lavaromp eun Ave
D'eoc'h -c'houi, Mamm Jezuz

7
Ar c'hlanvour 'n e wele
'Gav skany e c'hlaç'har,
Gant ar Vamm a ouele
Ouz Kroaz ar C'halvar.

8
Evit plijout d'ezi,
Evit kaout grasou,
Heuliomp eun evelti
Hent ar vertuzioù.

9.
An hent, mar deo diaes,
Neb a gerz drezan
Betek dor he Falez
'Vo renet gantan.

10
Neuze ni, dianken,
Tro-war-dro d'he zron,
A veulo da viken
Mari, hon Itron.

N° LIV. — Itron Varia Lourd.

TON : XLVI.

1
Eun deiz a viz C'houevrer,
D'an eur a greiste(iz),
Pa sone 'us pep kêr
Kloc'h an teir Ave. Ave...

2
Eur plac'hig yaouank flamm
Merc'h eur micherour,
A glaske koad d'he mamm,
O vont 'hed an dour.

3
Kreiz eur sklerijenn
Dirak Bernadeta
Setu o tiskenn
Eun itron ar gaera.

4
He sae a zo gwennoc'h
Eget lilienn ;
Eget an oabl glasoc'h
Ez eo he seizenn.

5
War he zreid diou rozen
En aour a weler.
Er Baradoz hepken
'Z eus bleuniou ken kaer.

6
'N he dourn eur chapeled,
Chadenn aour, greun gwenn
Uheloc'h 'vez gwelet
Eur ouel war he fenn.

7
'Kreiz ar roc'h, en he sav,
'Lies evel-se
An Itron dianav
A baras goude.

8
Meur a wech e komzas :
Selaouomp he mouez
Evel m'he selaouas
Bernadeta gaez.

9
« C'houi hag ar gristenien.
Ma merc'h, emezi,
Evit ar bec'herien
E tleit pedi. »

10
Aman ra vo gwelet
Kalz a dud o tont,
Hag eur chapel savet
War ar roc'h du-hont.

11
Eur wech 'lavare
Da Vernadeta :
Ouz dour ar vammenn-se
Tostait d'eva.

12
Dindan ar roc'h eno
Biskoaz ne oa bet
Nemet deliou maro
Ha geot dizec 'het...

13
Kerkent e tarzas dour,
Ha diwar neuze
E kav meur a glanvour
Drezan ar pare.

14
Kalon Bernadeta
A dride bemdez
O klask gouzout piou 'oa
Itron ar menez.

15
« Pebez joa d'am c'halon,
D'in ma lavarit
Piou ez oc'h, ma Itron,
Pe ano 'zougil. »

16
Raktal en eur sevel
He sellou d'an nec'h :

« Me eo ar Vamm santel
A-viskoaz dibec'h. »

17
Rouanez an Nenvou
A davas goude :
Met he madelezou
Bemdez a greske.

18
Da Lourd, en eur gana
A-vern e tered
Tud da birc'hirina
A bep korn ar bed.


19
Trugarez d'hon Itron
'Vit an holl c'hrasou
A strink dre he c'halon
War hou eneo.

N° LV. -- Ar Vamm vinniget.

(♩ = 92) Diskan

Meulomp hon sal-ver da ye-za ro-
er d'an dud e-vi Mamm e Vamm vi-ni-
get d'an dud e-vi Mamm e Vamm vi-ni-
get C'houi o gwerc' bez leun a c'Bras
a zo di-bec'h a-vis-koaz

Cant. Bret.



2
Abred d'an Templ voec'h kaset
Evit pellaat diouz ar bed :
Kuzet eno, hoc'h ene,
War gaeraat bemdez yae.

3
Eus ar gwragez n'eus hini
A vefe bet koulz ha c'houi.
Setu perak ho Krouer
Evit e Vamm ho kemer.


4
E Nazared, dianav,
C'houi gant Jezuz en em gav :
War ar C'halvar ez oc'h c'hoaz
En e gichen, 'harz ar Groaz.

5
C'houi 'zo breman Rouanez
War ar bed holl ha mestrez :
Dre ho taouarn ar grasou
A ziskenn eus an Nenvou.

6
Mamm galloudus dreist an holl.
Mirit ouzimp d'en em goll :
Boazet oc'h da zont a-benn
Da flastra d'an diaoul e benn

7
Hed hon beaj, o Mamm vat !
Roit d'imp ho tourn dalc'hmat :
Ar bugelig hep e vamm
Da bep kammed en deus lamm

Nº LVI. — Breiz-Izel da Vari.



2. Stank en e yaouankiz, stank en e gozni,
E pign sonj e galon betek tron Mari.

3. Nag a di da Vari e Breiz a ouestler !
Nag a dud daoulinet dirak hec'h Aoter !

4. Nag a gan da Vari e Breiz a glever,
E kêr ha war ar maez, 'dal ma selaouer.

5. He Mamm 'zo Patronez a bell 'zo warnomp,
He fried Sant Jozeb, holl a servijomp.


6. Bep ma varv eur c'hristen war douar Arvor,
E klever eus an Nenv digeri an nor.

7. 'tre Breiz hag an Nenvou ez eo berr an hent,
Gant sikour ar Wamm vat a garomp kement.

8. Me 'wel en-dro d'ezi, 'leiz ar Baradoz,
Breiziz Koz hon Tadou 'zo ouz hon gortoz.

Nº LVII. — Diskan ar Vretoned.






vel da ge-zuz da va-ri be-pred koulz
Bag Bon Goude Koz ni vo be-lek mer-
vel da ge-zuz da va-ri be-pred da ge-
zuz da va-ri be-pred. Gant Bon tud-
Koz 'dal ma voe da-vel eun ao-ter
d'bon sal-ver ge-zuz en be c'bieben e
ve-ze ka-vel Ao-ter e Vamm dru-
ga-re-zus.

3. Pa gavent re bounner ar vuhez,
Diganti e klaskent sikour,
Diganti e c'houlennet truez
En o foaniou, en o labour.
4. Pa sone drant kloc'h he fardonioù,
Bras ha bihan, 'leiz an hentou,
E teredent eus an holl gêrioù,
'n eur gana he meuleudioù.

5. Pa sone trist o eur diweza(n),
O daouarn stardet ouz ar Groaz,
A galon kent kuitaat ar bed-man,
E c'halvent Mari eur wech c'heaz.
6. Breman ganti dirak tron Jezuz,
Emaint bodet er Baradoz :
Ganti d'hon tro ni a vo enrus
Mar heuliomp roudou hon tud-koz.

Nº LVIII. — Da Vari evit ar Vretoned divroet.

(♩ = 69)




Ma-re pa'z oc'h Mamm Breiz. 'I - zel
Xi bo ped da deu-rel eur sell
War meur a vre-ton di-vro-er
ha ganimp ni n'bo pedoni ket

2. An delienn c'hlas, eur wech distag
Diouz ar wezenn he doug, he mag,
Kaer he deus nijal ha bale,
Er poull a vreino hep dale.
3. Evel-se kalz a Vretoned,
Pell diouz ar gêr pa 'z int tec'het
A weny a gorf hag a galon
Hep Doue na relijion.
4. Kalz a zismantr 'hed an hentou
Pinvidigez o eneoù.
War zigarez gounit arc'hant
A freg sac wenn o badeziant.

5. Gounit arc'hant, koll ar wir Feiz,
Eürusted ar vuhez, e Breiz,
Dispriza ha bro ha kerent,
Ankounaat an Anaon, ar Sent.
6. Darn en arme, darn all war vor
A zifenn o bro gant enor,
Hag a chom hep ober brezel
D'an diaoul ha d'ar pec'hed marvel.
7. Kasit d'o gwelout, o Gwerc'hez,
Unan bennak eus hoc'h Aelez;
Unan eus ar re 'zo breman
Ganimp o kana d'eoc'h aman.
8. Hoc'h Ael d'ezo a lavaro,
Eus ho perz, eus perz tud o bro,
Daoulina bep heure ha noz,
'vel ma raent en o farroz.
9. Hoc'h Ael d'ezo a lavaro,
Sonjal en o c'herent, 'n o bro,
Klevout bep sul an ofrenn,
Ha tostaat ouz ar Binienn !
10. Faea an holl dud dizoue,
Hag anzav Jezuz o Roue :
Neb en deus mez eus e gredenn
Ne deo na Breizad na kristen !
11. Dont ivez dalc'hmat ha bemdez
D'en em domma ouzoc'h, Gwerc'hez,
Ha distrei 'lies a spered
Betek Santez Anna Wened.
12. Bep bloaz e teu ar wennili
D'ober he neiz er nemes ti :
Hag hec'h evned a vo savet
E-lec'h ma 'z eo bet hi maget.
13. Degasit an holl Vretoned,
Micherourien ha soudarded,
Mari, o degasit d'ar gêr
E-lec'h ma chome o zud ker.
14. Ma vint gant o zud'eürs,
Ha ma varvint e peuc'h Jezuz
Ma vo c'hoaz o c'horf douaret
E-tal bez o mamm, er vered.

Nº LIX. — Mari, Mamm an Esperans.

(J.=63)



Mari n'ankouna - is ket o deus bet a-bell




'zo Bon eo ki-bien d'eoc'h gouestlet hag o fobl hag o




Bro. Mari Mamm an Es - perans. Ho pe truer ouz



Breiz ni hoc'h asped gant Doujañs : dalc'hi enni ar



Feiz Mari Mamm an Es - pe - rans



Ho pe truer ouz Breiz ni hoc'h asped gant



Doujañs : dalc'hi en - ni ar Feiz

2

Mari n'ankounait ket,
O deus bet a-bell 'zo,
Hon eskibien d'eoc'h gouestlet,
Hag o fobl hag o bro.

3

Ar gouestl 'zo graet a-nevez
Gant hon Bro, Mamm denei,
Mamm oc'h d'imp e gwirionez,
D'eoc'h omp bugale ger.

4

A spont, a dristidigez,
Hon c'halon 'zo karget,
C'houi 'zegaso en hon touez
Fizians ha joasted.

5

Pa gomzit, mor hag avel
A sioula holl a-grenn ;
Eus an oabl e skarzit pell
Ar glao hag ar goabrenn.

6

Grit ma tavo an avel
A c'houez er c'halonou,
Ha ma welimp o sevel
Sklærder d'ar sperejou.

7

'Tre ho taouarn bepred sur
E lakaomp hon bag,
Dalc'hit hoc'h unan ar stur
En Nenv ken na vo stag.

8

Pell-pell diouzimp Satan
Gant e holl vevelien,
A glask lakaat an tan
'Touez ho servijerien.

9

Dousoc'h get n'eo d'ar bleunioù
Ar c'hlizenn e miz Mae
'Vo d'imp ho madoberou,
O Mamm a garantez.

N^o LX. — Itron Varia wir sikour (Gwengamp).

(♩ = 80)

Sa - lus d'oc'h, o guverc'haer yin - ni - get,
pa zeu warnomp an a-bar-daez e teuomp
d'bo pe-di Mamm ga - rel da ginnig
d'oc'h han c'ba-ran - ter se - laouid
han pe-denn a - ga. lon Mamm c'boui'zo
bepred han re - kour; Be - zis da
vi-ken han y - tron Itron Varia wir si-.

Rour y-aron va - ri - a wir di - Rour

2. Mamm ar grasou a zeu eus Doue,
Hon diwallit ouz ar pec'hed,
Goulennit ma chomo hon ene,
Hep beza gantan mastaret.

3. Ho pugale deuit da zifenn,
O Mamm dener 'kreiz ar brezel;
Roit dourn d'ezo e pep tachenn,
Breman ha pa vo ret mervel.

4. Ha neuze, 'vel sikour diweza,
'vit kaout peuc'h Baradoz Doue,
Grit er bed-man, 'lec'h tremen pep tra,
Ma vo padus hon c'harante (z).

Y. M. G.

N^o LXI. — Meuleudi d'ar Werc'hez e Miz Mari.

(♩ = 56)

Ar miz-mañ leun a vu - bez ken
kaer d'an daoula - gad a zo 'bet
an-veh mat M'iz Rou-a - nez an de -
ler ka - nomp holl meuleu -
di da vamm Doue, da va - ri -.

2
Ar miz-man leun a vuhez,
Ken kaer d'an daoulagad,
A zo bet anvet mat
Miz Rouanez an Aelez.

3
Evel eun evnig joaus
A salud ar beure,
Me ho salud ive(2)
O Gwerchez karantezus.

4
E Miz Mae, o Mamm garet
Peu tra a ro kentel,
A lavar d'imp sevel
Betek ho tron, hon spered.

5
Pa c'hrougous an durzunel
Er c'hoad e-pad an deiz,
E galon 'drid 'n e greiz,
Ennoc'h e sonj ho pugel.

6
A-dreuz ar prad o redek,
Pa velan ar wazig,
Pell diouz ar bed, Mammig,
E fell d'in mont 'n ho trezeg.



7
Sioul-kaer an abardaez,
An eostig, brao, a gan :
'Vel-se me ma unan,
Da noz a gan d'eoc'h ivez

8
A-wechou garm ar sparfell
A daol spont tro-war-dro :
C'houi, Gwerchez, am mird
Bremen ha betek mervel.

9
En ho Paradoz goude,
Hep aon, me ho meulo :
An nevez-hanv eno
A bado keit ha Doue !

Nº LXII. — D'ar Werc'hez, diouz ar beure.

(J. = 66)





2. Evnig skanv en amzer o nijal,
Beure mat 'lavar e sonig,
'hed an deiz betek an noz tenval
Morse ne davo e vouezig :
Evel-se, Mari, hep paouez,
E rankan bemdez,
Ho saludi gant levenez.
Ave ! Ave !

3. Eun deiz all evidoun a darzo,
Na pebez spont 'vit ma spered !
Sklaset em gwle, ma c'horf maro
Da c'houlou-deiz ne savo ket :
Eus an Nenvou, d'am diarbenn,
Diskennit neuze,
Ha d'eoc'h e kanin da viken :
Ave ! Ave !

Nº LXIII. — D'ar Werc'hez, diouz an noz.

(J. = 63)





2. Brezel hon eus gant an diaoulou,
An dud fall hag hon gwall dehou :
Dirak hoc'h Aoter koulskoude
Eo ken dous pedi, Mamm Doue,
Ma trec'h ar peuc'h en hon ene.
3. Ar boan hag an dristidigez
A frailh hon c'halon alies :
Dirak hoc'h Aoter koulskoude
Eo ken dous pedi, Mamm Doue,
Ma tizec'h hon daerou neuze.
4. Rust-kaer alies an amzer
Hag al labour hir ha pounner :
Dirak hoc'h Aoter koulskoude
Eo ken dous pedi, Mamm Doue,
Ma vez skanvoc'h hon bec'h goude.
5. Aman ganeoc'h ne skuizomp ket ;
Kuitaat eur vamm a zo kalët :
Dirak hoc'h Aoter koulskoude
Eo ken dous pedi, Mamm Doue,
M'hon gwelot o tont adarre.

N° LXIV. — Evit Kloza Miz Mari.

TON : L.

1. Hirie 'lavaromp trugarez
'vit ar grasou hoc'h eus skuilhet
Warnomp, Rouanez an Aelez
E-pad ar miz-man binniget.

Diskan.

D'eoc'h e ouestlomp hon c'halonou ;
Redit enne 'vel en Nenvou,
Ho servija fell d'imp, Mari,
A-raok mont du-se d'ho meuli.

2. Bep heure 'baoe an deiz kenta
Ho saludemp gant levenez,
O Klevout dre-holl o kana
Evnigou an amzer-nevez.
3. Da noz dirak hoc'h Aoteriou,
C'houi a wele ho pugale,
Kaeroc'h 'get eur parkad bleuniou,
O tiskouez d'eoc'h o c'harante (z).
4. Ouz ar pec'hed e tiwallemp,
Ma ne ouelje ho taoulagad :
Hent ar vertuziou a heuliemp
D'ober plijadur d'hon Mamm vat.
5. En deiz ma tarzo c'hoaz brezel
Enep d'eoc'h ha d'ho pugale,
Bezit dalc'hmat, o Mamm santel,
Hon skoazell 'vel e-pad miz Mac.
6. D'an Illiz savet gant Jezuz,
Dre e vuhez hag e varo,
Plijit astenn ho tourn nerzus,
Ganeoc'h warnomp 'vit ma reno.
7. Da c'hortoz ma vimp unanet
Er Baradoz en-dro d'ho tron :
Eno Nevez-amzer bepred,
Ha levenez 'leiz ar galon !

N° LXV. — Bemdez, Bemnoz.

TON : O Filiti...

Diskan.

Bemdez, bemnoz hag e pep ti,
Meulomp Mari.

1. Tridal 'ra palez an Nenvou
Hag hon sent koz en ilizou
Pa lavar an holl galonou :
Meulomp Mari.
2. Kristenien, deut d'an ilizou,
Heman eo miz ar c'hantigou ;
Klevout reer en holl vroioù :
Meulomp Mari.

3. Plijet ganeoc'h, sent hag aele (z)
Unani ho mouez gant hon re :
Hon c'han a vo kaeroc'h neuze.
Meulomp Mari.
4. Ni zo da Vari 'n em ouestlet,
Da Vari ni a vo bepred :
Kanomp eta gant joausted :
Meulomp Mari.
5. Kalz o deus doujans 'vit Mari,
Ha kalz o deus fizians enni :
Aman an holl a zo d'ez.
Meulomp Mari.
6. Hirie, Rouanez an Nenvou,
Plijit degemer hon gouestlou ;
Ni a ro d'oc'h hon c'halonou.
Meulomp Mari.
7. Mari, war an Aelez renit,
An Anaon cus ar boan tennit,
Holl nerz an droukspered torrit.
Meulomp Mari.
8. Mari repu e pep mare,
Mamm dous bepred d'ho pugale,
C'houi hon c'haso betek Doue,
Meulomp Mari.
9. Mari, ne vimp ket pardonet,
Ne drec'himp war an droukspered,
Nemet ganeoc'h-c'houi skoazellet.
Meulomp Mari.
10. Hep Mari vezer ket salvet,
Gant Mari ne vezer kollet ;
Mari ni a vo d'oc'h bepred.
Meulomp Mari.
11. Selaouit ouz hon pedennou,
Hon difennit 'hed hon deizioù,
Hon sintrit war hon talarou.
Meulomp Mari.
12. Mari, pa 'z oc'h ken galloudus,
Bezit ivez trugarezus,
Pedit 'vidomp ho Mab Jezuz.
Meulomp Mari.

13. Grit ma vo bepred dourn Doue
Dous e-kenver ho pugale,
Ma 'z aimp d'an Nenv da gana ge :
Meulomp Doue.

N^o LXVI. — Al labourer d'ar Werc'hez.

(J = 64)

Ar marto-lob an e va-gig bo salub
gant eur galon la- ouen d'al labou-
rer en e bar-rig ez oc'h gwerc'hez ar Werc
la- ouenn. C'houi a zo eur vaun gavan
te : zus be-pred ma e-vil al la-bou
rer bezit ou tan truga-re - zus,
e pep de-gouez bag e pep am-
zer ez pep de-gouez bag e pep am-zer

Dishan

2. Doue, e galon ken tener,
Madelezes 'vit e vugale,
Dre wir vuzud en o c'henver,
O gwisk hag o mag da bep mare ;
Met ar c'haera eus e vuzudou
Drezi holl c'hrasou an Aotrou
A vez bemdez d'imp holl kinniget.

(2 w).

3. Hada 'reomp 'n hon douarou
Ar greun gant hon c'hoezenn distrempet,
Met alies hon trevadou
A vez gant gwall amzer dispennet ;
Pellait pep droug, pep gwalenn,
Ni hoc'h asped, diouz hon tiegez,
Hag e lavarimp d'eoc'h, laouen,
Mil bennoz evit ho madelez.

(2 w.)

4. Gant bodekou hon parkeier,
En o zouez bleun roz ha bleun lili,
E unanimp hon moueziou gredus,
O Mamm dener, evel n'eus hini.
Ha pa 'z omp d'eoc'h gwir vugaligou,
E unanimp hon moueziou gredus,
Gant richan an evnedigou,
Da gana d'eoc'h, Mamm drugarezus.

(2 w.)

5. Pa son ar c'hloc'h an Anjeluz,
E seblant d'imp klevout an aelez,
O kana en Nenvou skedus :
« Ni ho salud, c'houi, Mamm ha Gwerc'hez ».
Teurvezit selaou hon pedennou,
Skuilhit war hon labour ho pennoz ;
Hag e ve kalet hon planedenn,
D'eoc'h, gloar meuleudi bemdez, bemnoz.

(2 w.)

6. Pa zeu miz Mae, miz ar bleuniou,
E kan ar maeziou gant levenez :
Pegen brao beza en Nenvou,
E-kichen Rouanez an aelez.
O Mari, e-kreiz hon trubuillou,
Grit ouzimp eur sell leun a druez,
Hag e kanimp meuleudiou
D'eoc'h, Mamm vat, betek fin hon buhez.

(2 w.)

7. An amzer buan a dremen,
Pe vez yen-skourn, tomm-skaot pe glouar ;
Ken buan hag eul luc'hedenn,
'tremen ar vuhez war an douar.

O Mari, pa 'zeuy hon tremenvan,
Grit d'imp beza dinec'h, dibreder,
'vit mont, ho tor digor-ledan,
D'an Nenv, ganeoc'h 'vit an holl amzer. (2 w).

KANTIGOU DA SANT JOZEB

N° LXVII. — Sant Joseb, Pried Mari.

(♩ = 54)

Sant Jo-zeb pried Mari tad
ma-ger da ge-zuz ni 'fell d'imp boc'h e.
Diskan
no ri pa-tron karante-zus. Sant
Jo-zeb pried Mari tad ma-ger da ge-
zuz ni 'fell d'imp boc'h e - no - ri pa-
tron ka-ran-te - zus

2
Mirour roet gant Doue
D'e Vab ha d'ar Werc'hez,
Bet hoc'h eus en ho puhe(z)
Arken ha levenez.

3
Evit degemer Jezuz
N'hoc'h eus na tan na ti,
Met ho kalon 'zo eürus
O tont d'E adori.

4

Pa glask Herodez Jezuz
D'E lakaat d'ar maro,
Gant pebez feiz burzudus
E gasit da bell bro !

5

Pebez poan, 'pad tri devez !
Jezuz a zo kollet :
Goude, pebez levenez,
Jezuz hoc'h eus kavet !

6

Ho labour en deus maget
Ho Krouer, Mab Doue ;
En ho labour Mestr ar bed
Ouzoc'h-c'houi a sente !

7

War an douar trubuilhet,
En Nenvou, war ho tron,

C'houi 'zo galloudus-meurbet
Ha tener a galon.

8

Jezuz a bleg d'ho pedenn
'Vel e Vamm ho pried :
Teurvezit 'ta d'in goulenn
Ar c'hras ma vin salvet.

9

Pa vin galvet gant Doue,
Patron ar Maro Mat,
Deut gant eun dourn a drue(z),
Serret ma daoulagad.

10

Tost d'eoc'h ha tost da Vari.
E-kichen tron Jezuz,
Neuze ez in d'ho meuli,
O ma Patron eürus.

T. B.

N° LXVIII. — Kanomp-holl meuleudi da Jozeb.

TON : XVII

Diskan.

Kanomp holl meuleudi
Da Jozeb, pried Mari.
Kanomp holl meuleudi
Da Jozeb, pried Mari.

1

iou a c'hallo ho meuli,
Sant Jozeb eürus
ad mager da Jezuz
ried d'ar Werc'hez Vari p

2

n hini a voe spontet
n zeuas en he zi
n ael d'he saludi
o kemas da bried.

3

War ho tivrec'h binniget
Hoc'h eus douget Jezuz,
War ho kalon joaüs
Pet gwech en deus-hen kous-
[ket ?]

4

Roue an holl rouaned
Ouzoc'h-c'houi a sente ;
Ha gwir Vab ho Toue
Ganeoc'h a zo bet maget.

5

An Doue Hollc'halloudus,
Dindan ho ti kuzet,
En deus ho skoazellet
En ho labouriou poanuis.

6

Bet hoc'h eus en ho puhe(z),
Siouaz, kalz a boaniou :
Met pa skuilhec'h daerou,
Dourn Jezuz o dizec'he.

7

Ha pa zeujoc'h da guitaat
Eur bed ken ankenius,
Gant Mari ha Jezuz
'Voc serret ho taoulagad.

8

Dreist ar sent hag an Aeled,
'N ho santelez skedus
War eun tron lugernus,
C'houi a zo breman savet.

9

Troit eta ho sellou
Ouzimp, ho pugale,
Ha betek tron Doue
Plijit kas hon pedennou.

10

O sant bras, evidoun-me
Eur c'hras a c'houennan
Deut em eur diweza(n)
Da zegemer ma ene.

11

O ma zad karantezus,
Grit ma teuy ho pugel
Evel doc'h da vervel
Etre Mari ha Jezuz.

12

Joseb, Jezuz ha Mari,
Roit d'in ho skoazell,
Ha gras d'in da vervel
'N eur gana ho meuleudi !

13

Goude se en ho kichen,
En Nenvou azezet,
Gant ar sent, an Aeled
Me ho meulo da viken.

ho devez « induljans »
(Levr Bugale Mari)

N° LXIX. — Sant Jozeb ni 'zeu d'ho pedi.

(J = 66)

Sant Jo-zeb ni 'zeu d'ho pe-di en

a - no Je-zuz ba Mari ka-sa Bon

goulenn da zou-e ka si - kou-

ri- ho pu-ga - le.

1. Eveldoc'h mirout ni 'garfe,
E-kreiz ar bed, Lezenn Doue,
Trec'hi war hon holl fallblegou,
Ha mont eun gant hent an Nenvou.
2. Ho ti 'zo bet ti hon Salver,
Ho heulia ' rae war ho micher ;
Hon c'halon a dridfe 'n hon c'hreiz,
Gant Jezuz-Krist enni noz-deiz.
3. Met dre bec'hi ma tigouezfe
D'imp e bellaat diouz hon ene,
E gavout ni 'garfe raktal,
'vel p'ho poa e gollet gwechall.
4. Gant ho micher start ha poanius
Hoc'h eus maget ho Mab Jezuz ;
Dre hon oberou ni 'garfe
Maga e c'hras en hon ene.
5. Echu ganimp hon reuz aman,
Pa vimp o kuitaat ar bed-man,
Eveldoc'h ni varvfe eürus,
En hon c'hichen Mari, Jezuz.
6. Ha neuze goude beza bet
Aman war-eun-dro ho pedet,
Er Baradoz c'hoaz, war-eun-dro,
Da virviken ni ho meulo.

N^o LXX. — Da sant Jozeb goude Kuz-heol.

(♩ = 69) *Diskan*

O sant jo-zeb er Bara-doz soñ-jñ en
nomp e - pad an noz ; d'bo puga-le gant karan-
tez pli. iñ rei bo pen - noz. An
beol en deus ku-za ou-zimp e skleri.


jenn War ar bed a bep tu e
Kouez teñ - va - li - jenn : dañ c'ba en hon c'ba
lon, splann be - pred ha gwre-zus ar gra-
sou d'imp prenet war ar groazgou ge-zus.

2. Al loened gouez en noz a glever o yudal
Enepe d'imp noz ha deiz e yud hon techou fall ;
Harzit na vez ganto hon eneou taget,
N'ouzomp nemet huchal, met trec'hi n'ouzomp ket.
3. A-dal ma vo warc'hoaz distro heol ar beure,
Ha deut koulz al labour hag ar boan adarre,
Ra vo ano Jozeb an trede 'n hon genou,
Gant Jezuz ha Mari en hon holl drubuilhou.

N^o LXXI. — Dirak skeud enn sant Jozeb.

(♩ = 112)

ma e - ne a vez lavu-en trid al 'ra
ma c'ba - lon bep tro ma wa - l-
skeudenn sant jozeb di - ra zon. Dre
va - ri ha dre ge - zus Pa vo



2
N e zourn eur flourdilizenn,
War e vrec'h Mab Doue,
War e benn eur gurunenn
Kurunenn eur roue.

6
Tro-war-dro pa ne gavin
Nemet tenvalijenn,
Hag o sklasa pa santin
Ma c'halon ha ma fenn.

3
Eur roue e gwirionez,
Uhel dreist an Aeled ;
Eun Tad leun a garantez
En hon c'henver bepred.

7
O pegen euzus neuze
E krenin gant ar spont,
O welout 'vo deud d'in-me
An eur da renta kont !

4
Ken a gredan, me ive(2),
O sant Jozab, goulenn
Diganeoc'h a-berz Doue,
Maro eur gwir gristen.


8
Satan ma skei a glasko
Gant horz an dizesper :
Piou outan am difenno
P'am galvo ma Barner ?

5
Pa ne glevin ken mouezioù
Ma c'herent o ouela,
Pa vo marc'het em genou
Ma zeod a gan brema.

9
Na lezit ket ma ene
Da guitaat ar bed-man,
Nann, hep kaout digant Doue
Ar pardon evitan.

EN ENOR D'AN AELEZ

Nº LXXII. — An Aelez hag an Dud.
(J. = 34)



2. Gwelet o deus an douar o kemer e dachenn,
An heol o skuilha warnan e genta sklerijenn ;
Dirazo e tibabas Doue ar pri melen,
Ma reas gantan ken brao e gorf d'ar c'henta den.
3. Skrijet o deus pa gouezas Adam en e bec'hed,
Ha pa ruilhas gwad Abel gant dourn e vreur lazet,
Pa glevjont o tidarza ar c'hurunou spontus,
Hag an dour-beuz o tiriilh war benn an dud kablus.
4. Ouz Abraham e Membre 'lies o deus komzet,
Gant Moizez er gouelec'h pell o deus baleet,
Tridet o deus pa gane David ha Salomon,
Pa c'harme Jeremias war lein menez Sion.
5. Eun Ael a zezrevelas d'ar profed Daniel
Pegoulz e tlee Jezuz ha genel ha mervel,
Eun Ael henchas Tobiaz eus Niniv da Rajez ;
Izaiaz hag Elias a veve en o zouez.

6. Pa voe ganet hon Salver, 'us d'e graou 'pad an noz.
O mouezioù flour a gane soniou ar Baradoz ;
Pa rae e vuzudou e pep lec'h e heulient,
Pa varvas war ar C'halvar, 'tal ar Groaz e klemment.
7. Int 'larnas ar maen pouner a stoupe war e vez,
A strafuilhas ar gwardou 'oa outan war evez ;
E-pad ma pigne d'an Nenv betek e dron uhel,
Daou Ael a zic'hlae'hare kalon an ebestel.
8. 'us d'an Iliz katolik e nijont a-vandenn,
Er peuc'h evit he mirout, er brezel d'he difenn :
Yudal forz a ra warni Satan hag ar re fall ;
Harpet-mat eo a-bell 'zo, n'haller ket he finval.
9. An dud varo, deiz ar Varn, ganto a vo galvet,
Hag e traonienn Jozafad a bep tu dastumet :
Stlepel 'raint 'kreiz an ifern diaoulou ha re daonet,
Ha dougen d'ar Baradoz ar gristenien salvet.
10. Neb a gar a zo karet ; neb a bed, skoazellet ;
Hep eun Ael mat d'e virout n'eus ket eun den er bed :
Heuliomp e ali bepred, hep ober poan d'ezan ;
Hag er Baradoz ivez 'vimp etirus gantan.

N° LXXIII. — Pedenn d'an Ael-mat.

(♩ = 104)

Me 'oar e ebomil seiz ha
noz, d'am beul 'vil rei d'in bo pennor. Pe.
naos 'tau - fen d'boe' an kou-naas, ma
gwe - lla mi gnon, ma Ael - mat ?

1. Roit d'am divrec'h pa labouran
Nerz d'ober ar pezh a dlean,
Ma c'hallin gounit ma buhe(z),
Keit ha ma plijo gant Doue.
2. Ganin er park p'en em gavit,
Pep pec'hed ouzin a harzit :
Grit d'am zeod em genou tevel
Enepe d'ar Feiz, d'an Aviel.
3. Ni Holl er gêr, tud hag Aeled
Evel er Baradoz mesket,
Grit ma vevimp er garante(z),
Nesa, kerent ha bugale.
4. War ma daoulin, gant ma Fater
Dirak Kroaz Jezuz, ma Salver,
Pedit ganin, 'us d'am spered
Ganeoc'h hoc'h eskell astennet.
5. Hoc'h eskell warnoun astennet
Da guzat ouzin traou ar bed :
Mougite ennoun trouz an douar
Ma vo ma sonj gant ma lavar.
6. Aet an heol diwar ar bale,
Deut neuze ganin da vale,
Rak an diaoul hag e vevelien
'zo gwasoc'h en denvalijenn.
7. Em gwele, pa vin o vervel,
O, deut 'vel gwechall em c'havell,
Rak ganeoc'h e fell d'in nijal
Prim eus ar bed-man d'ar bed all.
8. Betek an Nenv c'houi am hencho,
Betek Jezuz c'houi am reno,
Hag e teskot d'in kana ge
Ar soniou a blij da Zoue.

N° LXXIV. — Aelig Doue (War don XIX).

TON : XIX

Diskan.

Ma diwallit, aelig Doue
Mirit ma c'horf ha ma ene (bis).

1. Diskouezit d'in e peb amzer
Bolonte santel ma Salver (bis).

2. Ma mirit diouz an drouk-spered
Ha dreist pep tra diouz pep pec'hed (bis).
3. Lakit evez na vin tromplet
Dre fallagriezou ar bed (bis).
4. Hag em c'hichen chomit ato
Dreist-holl pa zeuio ar maro (bis).
5. Reit d'in neuze kalz a zaerou
Da ouela ma holl fec'hejou (bis).
6. Evit ma c'hallin da Zoue
E stad vat renta ma ene (bis).

EN ENOR DA SANTEZ ANNA

N° LXXV. — Mamm an Itron Varia.

(J. = 69) *Allegretto*

Mamm an I-tron Va - ri - a Ba

Mamm ar Vre - to - ned, o I-tron San-tes

An-na, ni bo ka-ro be-pred. a-

viskoaz 'deus bet tridet bo ka-ranter'n hon

c'Breiz; a - bell 'zo oc'h bet an-vel da

Ba - tro - nez 'd'bon Breiz.

2
'Vel hon tud-koz Bretoned
Hon fizians ar vrasa
Ennoc'h 'lakaomp bepred.
Itron Santez Anna.

3
Sellit, c-tal ar c'havell,
Ar vamm-se daoulinet;
Pedi 'ra 'vit he bugel
Santez Anna Wened.

4
Ar c'hlanvour gant an derzienn
Dalc'het war e vele,
D'eoc'h en deus graet eur be-
Ha selu hen pare. [denn,

5
War ar maez e Breiz-Izel
Pa glaskers diskuiza,
Ouz an Nenvou graet eur sell,
E kroger da gana :

6
Selaouit war ar menez
Ar mesaer o kana :

Ho meuli a ra ivez,
Itron Santez Anna.

7
Ar soudard kaez er brezel
A bed Santez Anna,
Ha pa vezo ret mervel
E leuy c'hoaz da gana :

8
Ar mor 'zo dichadennet,
He fedit, martolod,
Ha Santez Anna Wened
'Gaso ho lestr d'an aod.

9
War eur mor leun a reier
'Omp siouaz er bed-man
Diwallit hon bag dister,
Itron Santez Anna(n)

10
Bugale geiz da Eva
Ni a glask hon gwir vro ;
O Itron Santez Anna,
D'an Nenv c'houi hon reno.

40 devez « induljans »
(Levr Bugale Mari)


N° LXXVI. — Itron vat santez Anna.

(J = 100)

I-tron vat santez An-na, c'boni

'zo nerz Breiz-I-zel, bon skoa-zell e pop

am-zer, er peuc'h bag er Bre-zel; an



1. C'houi hepken 'houez ar mammou 'ch eus lakaet er bed
 Eur bugel gant he c'hrouer. a-raok genel, karet :
 C'houi 'zo Mamm da Vamm Doue, da Vamm ar gristenien,
 Ho merc'h a zo Rouanez an holl grouadurien.
2. Pa oa ganeoc'h en ho ti, Mari d'eoc'h a blege,
 Pa lavarec'h eur gerig, raktal hi selaoue ;
 N'eo na bouzar nag amzent, en Nenvou, war he zron
 Teneroc'h eget biskoaz eo breman he c'halon.
3. Evel Mari ha Jozeb, pa gomzit ouz Jezus,
 E anvit e gwirionez ho Mab karantezus :
 An dud a gar o mamm-goz, c'houi 'zo mamm-goz ive(z),
 Ha Mab ho Merc'h a zo gwir den ha gwir Doue.
4. Eürus dreist an holl boblou ar bobl a Vreiz-Izel,
 O kaout evit Patronez eur santez ken uhel !
 Keit ha ma talec'h ar mor da c'houriza hon bro,
 E Breiz, dre skoazell Anna, ar Feiz start a chomo.
5. N'eo ket a-walc'h d'ar c'hristen anavout ar wir Feiz :
 Ne deo nemet eur barr sec'h, hep karantez 'n e greiz ;
 Anna, deskit d'imp karout Jezuz hag ar Werc'ez,
 Ha ganti da virviken bezit hon Rouanez.

(Tennet eus Levr an Ao. Gwillouzig.)

N° LXXVII. — Itron santez Anna.

Ton : LXXV

Diskan

Itron Santez Anna,
 Mamm-goz ar Vretoned,
 Grit ma vimp dreist pep tra
 Gwir gristenien bepred.

'Vidomp eun enor kaer,
 Eur joa dispar, ive(z).
 Anna deut d'hon c'hemer
 Evit he bugale.

2
 'Vidomp he deus Anna
 Ar garantez vrasa,
 Hag evidomp e ra
 He burzudou kaera.

3
 Anna 'vit ar re glanv
 A zo eur gwir rekour ;
 O foaniou 'gavont skanv
 Pa deurvez o sikour.

4
 Pet gwech 'he deus rentet,
 O, madelez dispar !
 D'an den dall, ar gweled,
 Ar c'hleved d'ar bouzar.

5
 Pet gwech e-kreiz ar mor
 'Deus roet a-greiz-holl
 Avel vat ha goudor
 D'an dud o vont da goll.

6
 Rak-se 'ta pa savo
 Ar mor e houlennoù.
 D'ez, m'o diwallo,
 Gouestlit ho kalonou.

7
 Pa zeuio d'o samma
 Poan gorf pe boan spered.
 Pedit Santez Anna
 Hag ho po ar yec'hed.

8
 Tud yaouank, ma vennit
 Mont e servij Doue
 Diganti goulennit
 Terri d'eoc'h pep fouge.

9
 Pedit, c'houi, mammou ker,
 Evit ho pugale ;
 Warni kemerit skouer,
 Hi 'zo bet mamm, ive(z).

10
 Ar gwerc'hezed ganti,
 Sur, a vo selaouet :
 Mamm ar Werc'hez Vari
 A gar ar Gwerc'hezed.

11
 C'houi holl, tud a labour,
 Dindan ar boan brevet,
 Goulennit he sikour.
 P'eo ganeoc'h ken troet.

12
 P'eo bet 'n em ziskouezet,
 'Voe d'eul labourer paour,
 Ha nann d'eun den gwikel
 E seiz, perlez hag aour.

13
 Ha c'houi holl, tud a vor,
 E-kreiz ar wall amzer.
 Anna, da rei d'eoc'h gor
 Ouz riskl, avel, reier.

14
 O, pegoulz ho kwelimp,
 Evel pirc'hirinded ?
 Ha pegoulz e pokimp
 D'ho skeudenn vinniget ?

15
 Na chomit ket en hent,
 C'houi erru war an oad ;
 'Vit mervel evel sent,
 Pedit Anna ervat.

16
 Grit d'imp douja bepred,
 D'hon bugale, ive(z),
 Evel gwir vretoned,
 Da holl lezenn Doue.

17
 Itron Santez Anna,
 Mil bennoz, trugarez !
 Ni 'ray 'vit ar gwella
 D'ho karout mui bemdez

(Ar re a yelo da Santez-Anna Wened, a gano :)

18
Betek Santez-Anna,
Eomp holl, Bretoned,
Rak di an neb a ya
'Vez selaouet bepred.

19
Sed an tour du-hont pell,
Daoulinomp, kristenien,

Ra viot, lec'h santel,
Meulet da viryiken.

20
Klevout a ran breman
O seni ar c'hloc'h bras ;
Itron Santez Anna(n),
M'ho kwelo, eur wech c'hoaz.
(Hervez Kantigou Gwened)

N° LXXVIII. — Da santez Anna.

Ton : Kalon dous a Vari.

Diskon

Enor, enor da Santez Anna,
Meulomp, meulomp ar vamm
[ar wella.

1
Aeolz kaer an Nenvou,
Deut a-denn-askell,
D'unani ho moueziou,
Gant re Vreiz-Izel.

2
Meulomp a vouez uhel
Eur vamm a druez(z),
Ni holl e Breiz-Izel
'Zo he bugale.

3
Mamm ar Werc'hez Vari,
Mamm-goz da Jezuz,
D'an neb 'zeu d'he fedi
'Zo trugarezus.

4
Soudarded Breiz-Izel
Ken gwevn en emgann,
A c'houlenn he skoazell
A-raok mont d'an tan.

5
Bemdez 'klever kana
Gant tud ar mor doun :

« Itron Santez Anna,
Pedit evidoun ! »

6
Al labourer kristen,
D'oc'h, Santez Anna,
A lavar e bedenn,
A zeu da gana :

7
Ar c'hlenvejou gwasa(n)
Hoc'h eus pareet ;
Nag a bedenn aman
Hoc'h eus selaouet.

8
C'houi 'zo Patronez Breiz,
Gwechall bro ar Sent ;
Dalc'hit enni ar Feiz
Evel diagent.

9
Spontus eo an arne,
Patronez santel,
Mirit ho pugale
Dindan ho mantell.

19
Eun deiz, en ho kichen,
Grit ma vimp eürus
O veuli da viken
Mari ha Jezuz.

EN ENOR DA SANT ERWAN

N° LXXIX. — Aotrou sant Erwan Binniget.

(♩ = 88) Diskon

Ao-trou sant Er-wan bin-ni-
 get, enor ha skoazell bon bro
 an neb bo ped en deus. be-pred
 eun di-fennour en Nenvou. En bon
 touez eus a sant Er-wan bras eo ar
 ma-so-be-rou O zon jal en-
 no pep u-nan a wir ga
 lon 'la-va-ro.

2. En Nenvou 'vel war an douar
Sant Erwan 'zo galloudus,
Hag e galon da neb e gar,
'zo mat ha trugarezus.

3. Kement hini da sant Erwan
A vo bet en em ouestlet,
E pep ezomm hag e pep poan,
Gantan a vo skoazellet.
4. Pa vez glao bras, re a dommder,
Gant an trevadou nec'het,
Da sant Erwan e tereder,
Sur da veza selaouet.
5. D'ar beleg, d'an den a lezenn,
Beleg santel, advokad,
Sant Erwan 'ro skouer, sklerijenn
Evit ren o c'harg ervat.
6. Ar vamm pa lavar eur bedenn
Da sant Erwan beure-noz,
Kalon he mab 'vel eur rozeun
'Dro war-du ar Baradoz.
7. An intañvez paour en he foan,
He bugale hep sikour,
En em erbed ouz sant Erwan,
Ha sant Erwan he rekour.
8. Ar bugelig kaez, emzivad,
Tad ha mamm gantan kollet
E Sant Erwan a gav eun tad
D'e vlenia ervat bepred.
9. Ar soudard galvet d'an arme,
Kent kuitaat, da Sant-Erwan
A ya da bedi, ha neuze,
A-greiz e galon a gan !
10. Ar martolod war ar mor do(u)n.
Gwall hejet e vag vihan,
A zo fizians en e galon :
E sturier eo sant Erwan.
11. Al labourer a gar ar sant
A gav skanvoc'h an arar,
Kalz blotoc'h 'vez ar park, pa blant
Pa sko e bal en douar.
12. An devezour, an den a boan,
Bemdez kent mont d'e zevez,
Mar deu da bedi sant Erwan,
A gano gant levenez :

13. Ni a zo holl devezourien
Er bed-man ha tud a boan ;
Ha c'houi 'zisprizfe hon pedenn,
C'houi, Aotrou mat, sant Erwan.
14. Kalz ac'hanomp hep pell dale
A vo echu o devez :
Grit d'imp mont da gana, neuze,
En Nenv gant anaoudegez !

N^o. LXXX. — Breiz-Izel da sant Erwan.

(♩ = 92)



1. Ni 'ya da gana, hell bras ha bihan,
Gloar hag enor d'eoc'h, Aotrou sant Erwan.
2. Sant Erwan e Breiz dre-holl 'zo brudet,
E Treger, Leon, Kerne ha Gwened.
3. Gant tud a bep stad, uhel hag izel,
E peder Erwan, a-dost hag a-bell.
4. 'vit an holl e oa leun a garante(z),
Evel gwir vreudeur o degemere.
5. Eun deiz e teuas Jezuz e-unan
Da glask aluzen digant sant Erwan.
6. Graet en deus ar vad 'hed e holl amzer,
Bremen 'toug en Nenv eur gurunenn gaer.
7. Bep bloaz sant Erwan a vez c'hoaz gwelet
El lec'hioù santel 'lec'h ma oa ganet.
8. Rak deiz e bardon, penn an den santel
A vez douget c'hoaz betek e chapel.

9. Na dous eo pedi pa vezer er boan,
Er chapel e-lec'h ma pede Erwan.
10. N'en deus ket e Breiz eun iliz ken kaer
Hag e iliz-veur, e kêr Landreger.
11. Evit sant Tual, ho tad binniget,
Aotrou sant Erwan, c'houi 'n deus he savet.
12. Burzud war vurzud war ho Pez eno ;
N'hoc'h eus ket bet graet mui neblec'h er vro.
13. Gant fizians, eja ho pedimp bemde(z),
Hag evel doc'h-c'houi ni 'garo Doue.
14. C'houi 'voe advokad pa oac'h er bed-man,
Bezit advokad c'hoaz en Nenv breman.

F. G.

N° LXXXI. — Kantig sant Erwan.

TON : LXXX

Diskan.

- Nann, n'eus ket e Breiz, nann, n'eus ket unan,
Nann, n'eus ket eur sant evel sant Erwan (2W)
1. N'eus ket en Argoad, na mui en Arvor,
Koulz ha sant Erwan 'vit an dud a vor.
 2. N'eus ket, nann, er vro 'vel ma lavarar,
A vefe ken mat 'vit al labourer.
 3. N'eus ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezen,
Evit sant Erwan, skouer ar veleien.
 4. Ha d'ar beorien gaez, ha d'an dud a boan,
Nann, n'eus ket gwelloc'h eget sant Erwan.
 5. N'eus ket eur chapel, e beder enni
Gant mui a galon 'vit er Vinihi.
 6. Ma fell d'eoc'h an tu da gaout ho mennad,
Pedit sant Erwan, ha pedit ervat.
 7. Pegen mat pedi, pa vez poan-spered,
E-lec'h ma pedas ar sant binniget !
 8. Pegen brao pleustri an douar santel,
Bet pleustret gwechall gant Sant Breiz-Izel !
 9. Eus a Gervarzin, stok d'ar Vinihi,
Ez oa genidik Erwan Helouri.

10. Eno e c'hanas eun devez hon Sant,
Er bloaz daouzek kant tri hag hanter-kant.
11. E-pad e vuhez eur skouer 'vit an holl,
Bevomp eveltan, n'aimp ket da goll.
12. D'e hanter-kant vloaz e varvas neuze,
Hag a-denn-askell, d'an Nenv, e ene.
13. N'en deus ket e Breiz, eun iliz ken kaer
Hag e Iliz-Veur e kêr Landreger.
14. Evit sant Tual, hon tad binniget,
Dre urz sant Erwan ez eo bet savet.
15. Goude e varo e gorf archedet,
En e Iliz-Veur a voe douaret.
16. Eur bobl-tud, bemdez, adalek neuze,
'Zeus war e vez da bedi Doue.
17. N'eus bez, evit gwir, en defe gwelet
Burzud war vurzud ken kaer c'hoarvezet.
18. Yann V, dug a Vreiz, 'vit e enori
'gaeraas e vez d'Erwan Helouri.
19. Ar bez dismantret 'kerz an Dispac'h Vras,
'Zo bet adsavet kaeroc'h 'get biskoaz.
20. Sant Erwan e Breiz dre-holl zo brudet
E Treger, Leon, Kerne ha Gwened.
21. Ha gant pep rannvro, 'barz ar bez nevez,
Lakaet he maen, gant joa, levenez.
22. Ma n'eus ket eur sant evel sant Erwan,
Kaeroc'h 'get e vez, nann, n'eus ket unan.
23. E miz Mae bep bloaz 'vez eur pardon Kaer,
Pardon sant Erwan e kêr Landreger.
24. Neb a ya da Rom ar Ger-Veur gristen,
War bez Per ha Paol lavar eur bedenn.
25. Plijout d'hon Sant bras neb a fell d'ezan,
A dle war e vez mont da zaoulina(n).
26. Eomp, kristenien, betek Landreger,
Ha ne gollimp ket, sur mat, hon amzer.
27. Hag eur wech m'hon bo gant kalon pedet,
A-berz sant Erwan e vimp selaouet.

28. Bepred, da c'hortoz, pedomp sant Erwan,
E pep lec'h, dalc'hmât ha kuit a ehan.
29. Evel hon Tadou, int, tud a gredenn,
Lavaromp d'ezan 'n eur gaer a bedenn :
30. Aotrou sant Erwan patron Breiz-Izel,
Beza treitour d'eoc'h !... nann, kentoc'h mervel !

EN ENOR DA JAN D'ARK

N° LXXXII. — Betek ho tron en Nenvou, Jan d'Ark.

(J. = 54)

Be - tek ho tron en Nenvou Jan

Dark en or Bro-e'ball E ka-somp hon pe-

den-nou gant fi-xians ha gant m'ell an

dus di-foiz di-kou-e a sav u'bel o

genn Deuz c'hoaz da rei d'imp skoazell ha

tit donz d'bon di - genn.

1. Jan Dark, en ho yaouankiz 'vidoc'h pebez glac'har
Gwelout ho pro ken karet, he stad eur gwir galvar,
Beuzet eo ho taoulagad en eur mor a zaerou,
Gwad ho preudeur o ruilha war ar maez, er c'hêriou.
2. Jan Dark, sec'hit ho taerou, grit eur sell ouz an Nenv,
Ha kent pell an enebour 'ranko souza a-drenv ;
Bro-C'hall 'vo dichadenet, ze zourn eur plac'h dister,
C'houi 'eo, krogit 'n ho kleze, hag ar pal a dizfer.
3. Jan Dark, deut eo ar mare da guitaat evit mat,
Ho tenved hag ho kerent, breudeur ha mamm ha tad ;
Eman Santez Marc'harid, ganti Santez Katel,
Ouz ho pedi, truezuz, da rei d'ho Pro skoazell.
4. Jan Dark, gant brec'h ho Toue e voec'h kement harpet,
Mar hoc'h eus graet burzudou, ganto ho Pro salvet.
War ho pannel skrivet ano Jezuz Mari,
An enebour 'rank tec'hout, kaer en deus argadi.
5. Jan Dark, tachenn ha tachenn, deut eo ganeoc'h an trec'h ;
En eur yudal an treitour a rank kemer an tec'h.
Entanet eo e galon a gounnar en e greiz,
Met sakret eo da roue, dre ho perz, Jarlez seiz.
6. Jan Dark, al labour dispar 'c'h eus graet betek breman
A dlefe d'eoc'h talvezout mil bennoz, a gredan.
Siouaz !... ez it da blegad d'eur blanedenn c'haro ;
Gwerzet, taolet er prizon ha barnet d'ar maro.
7. Jan Dark, gwenn eo hoc'h enê evel eul lilienn,
Met kavet ez eus abeg en ho puhez kristen ;
Eur barner kriz, digalon, 'n e gorf an droukspered,
D'eur marv spontus ho parno : en tan viot devet.
8. Jan Dark, en tandad, warnan ho korf santel
Gant ar flamm a vo gwisket, evel gant eur vantell ;
Kent mervel, ano Jezuz tridal 'ray 'n ho kenou,
Ha prim evel eur goulmig, hoc'h ene d'an Nenvou.
9. Jan Dark en Nenv galloudus, ni a zeu d'ho kervel :
Harbit ar vro 'c'h eus karet, karet betek mervel
Ha grit m'ho lezo Doue da sikour, c'hoaz eun dro,
Ar re a labour bemdez da savetei o bro.
10. Jean Dark, pa 'z oc'h c'houi breman e renk ar sentezed,
Ni ho ped hag hoc'h asped, d'imp da veza klevet :
Ar bed-man 'zo eur stourmad, ennan poan ha lenvou,
Grit d'imp gounit al lore hon c'haso d'an Nenvou.

EN ENOR DA SANTES TEREZA AR MABIG JEZUZ

N° LXXXIII. — Gant fizians vras ni 'zeu d'ho pedi.

TON: LX

1. Gant fizians vras ni 'zeu d'ho pedi,
Tereza ar Mabig Jezuz,
Peogwir 'fell d'eoc'h hon darempredi
Goude ho maro eurus.

Diskan.

2. Selaouit pedenn ho pugale,
Ha lezit da goueza warne
Ar gliz roz a raio hepdale
Diwan bleunv kaer en o ene. (§ w).
3. C'houi c'hoarezig dinamm an Aele(z),
Na stokas kammed fank ar bed
Ouz ar sae ken gwenn 'wiske hoc'h ene.
Mirit hon c'halon glan bepred !
4. Grit d'imp heulia hent ar vertuziou,
Ha dreist-holl santelaat ar boan,
Beza, pep-hini, 'pad e zeiziu,
Kristen direbech ha dizoan !
5. « An Nenv a zo evit ar bugel »,
Hervez komz hon Salver Jezuz,
Er skol ganeoc'h lec'h klask 'n em sevel,
Ni 'vo doujus, karantezus !
6. « Ar Baradoz, 'vidoc'h 'n em guze
En Osti Sakr » pa oac'h aman ;
Hon renit 'ta da gaout an hent-se
Ha deskit d'imp komunia(n).
7. Grit ma welo sklaer-mat hon spered
Talvoudegez an oferenn,
Kaera tra c'halfe beza klevet,
Hag a c'hras ar wella mammenn.
8. Dreist-holl ra vo deiz santel ar sul
Roet da Zoue penn-da-benn ;
Eno peurvuia 'man ar muzul
Eus talvoudegez ar c'hristen.

9. Lakait da sevel 'n hon parroz,
Tereza, bleunioù kaer ha stank,
Ma vo gwelet bemdez ha bemnoz
Furnez e-touez an dud yaouank.

10. Lagad Doue ivez a baro
War hevelep eneoù kaer,
Hag en o zouez sur e tibabo
Ar re 'savo ouz an Aoter.

11. Hag ar Werc'hez, e Vamm vinniget,
'C'halla gwelout gant levenez,
Muioc'h a verc'hed yaouank douget,
Da veva 'n he Breuriez.

12. Pedit ma vevimp er santelez,
Dre ar garantez unanet,
Ha m'erruimp er Rouantelez
'Lec'h m'oc'h gant Doue kurunet. Y. M. G.

Imp. 18-1-29 H. Trehou, v. v.

N° LXXXIV. — Santez Tereza ar Mabig Jezuz.

(J. = 69)

Gwerc'hez yaouank Li - xieu li -
li - ann ar C'har-mel di - rak ho skeudenn
goan Brei-xiz 'c' Boulenn skoazell Ro.
is s'ho puga - le si. Roue ha skleri.
jenn da yirou ar vu-bez kris - ten

1. Renet 'c'h eus er bed-man nebeut a vloaveziou,
Pleustret betek ar penn hent bras ar vertuziou,
C'houi 'eo skouer ar c'handed, burzud a garante(z)
Etre Jezuz hag an ene.
2. Bugelig, ho kalon 'oa prederiet dalc'hmat,
Dindan sellou santel ho mamm ger hag ho tad,
Da bellaat diouz an droug ha da greski bemde(z)
Ho santelez dirak Doue.
3. Eur vouez ho poa klevet abred 'n ho yaouankiz :
Galv Doue, da guitaat madou ar bed iskis.
War-lerc'h ho c'hoarezed e viot leanez
Dindan skeud leandi Karmez.
4. Henvel ouz ar rozenn a zigor he deliou
Pa 'zeu tommdar an hanv, glizenn ar beureou,
Bleuniou leun a c'houez vat a ziwan 'n ho kalon,
Jezuz enni a ra e dron.
5. N'eus ket rozenn hep broud, gwir garantez hep poan,
'Kreiz he buhez kuzet kalz a zrein a ziwan,
Gouzant a rae hep klemm : ar garantez 'zo trec'h,
Start 'man Jezuz war ho tivrec'h.
6. Doue 'n deus kutuilhet timat ar « Rozennig »,
Klenket 'n e Varadoz ene glan ar Verc'hig ;
Bremen tost d'he Salver, eürus 'kreiz ar c'hloar,
E skuilh bennoz war an douar.
7. Pedet oc'h, Tereza, e pevar c'horn ar bed :
Dre-holl ho madelez 'zo burzudus-meurbet ;
War hon parroz ivez strewit ar bokedou
Dizeliet e-barz an Nenvou.
8. Jezuz en deus sec'het a garantez doujus ;
Kalz eus e vugale a ren buhez mantrus.
Tommit ar c'halonou ha kasit ar pec'her
Betek Kalon Sakr hon Salver.

B. L.

KANTIGOÙ EVIT AR RETREJOÙ

N^o LXXXV. — O, ma Jezuz, setu deñt an amzer.

(♩ = 69)

O ma je-zuz se-tu deñt an am-
zer da bar-do-ni da
c'bla-c'bar ar pe-c'ber nann bi-ken
mui bugel di-val ne dreuzin dre ar
pe. c'bed ka-lon ma xad ka-
lon ma xad Parce Domine, etc.

Diskan.

*Parce, Domine, parce populo tuo,
Ne in aeternum irascaris nobis.*

2. D'eoc'h, ma Jezuz, pa 'm eus koustet ken ker,
Dre ho maro pa 'z oc'h bet ma Salver,
Na skoit ket ar wech-man c'hoaz
Eun ene ganeoc'h prenet
Eus lein ar Groaz.

(2 w)
Parce...

3. Gwir vab foran, aman war ma doulin,
O, ma Jezuz, ho pet truez ouzin ;
Gant ma daerou ha gant ho kwad,
Ra vin gwalc'het, adwalc'het,
Oan dous ha mat.

(2 w)
Parce...

N° LXXXVI. — Poent-bras eo d'eoc'h, pec'her,
distrei ouz ho Salver.

(J. = 66) *Diskan*

Poent-bras eo d'eoc'h pe. c'ber. distrei ouz
ho sal-ver poent-bras eo d'eoc'h pe-
c'ber distrei ouz ho sal-ver. Penaos 'vix
eur blija-dur dis-ter a gaver e-barz ar pe-
c'her e ti-lez-fec'h Doue ho
Krou-er bay e beuilh-fec'h an drouk-spe-red !


2. Hen eo ho Mestr leun a vadelez,
Hen a vo ho Parner, ivez :
Hag hoc'h eus c'hoaz an hardisegez
Da derri e lezenn bemdez.

3. Sellit ouz hoc'h ene, gant truez,
Gouelit druz war ho pec'hejou.
Hag eus holl dechou fall ho puhez,
Torrit raktal ar chadennoù.
4. Betek breman hoc'h eus baleet
En hentoù ledan ar pec'hed,
E meur a riskl bras en em gavet,
Ha koulskoude ne grenec'h ket !
5. En eur stad ken trist, ken ankenius.
Taolit evez ouz hoc'h ene ;
Dirak an dud oc'h beo ha joüs,
Ha c'houi maro dirak Doue !
6. O, ma teufe, hep mui hoc'h espern,
Ar maro d'ho skei koulskoude,
E kouezfe hoc'h ene en ifern,
Ha c'hoaz ne sonjit ket e se !
7. Penaos kaout ken bras dizeblanted,
Dirak eun ifern eternel,
Ha da vont di e viot barnet,
Ma chomit er pec'hed marvel !
8. O, pegen skanv, pegen dall ez oc'h,
O chom da hunvreal ken pell !
Deut eo ar gwella koulz evidoc'h,
P'eman Doue ouz ho kervel.
9. Na skuisit ket e basianted,
Nag e vadelez da Zoue ;
Rak sur-mat e viot kastizet,
Ma tisprizit e vouez hirle.
10. Gant eur gwir glac'har d'ho pec'hejou,
Deut da gaout Doue, me ho ped ;
E zourn a Dad zo leun a c'hrasou,
Ha, bezit sur, n'ho skoo ket.

N° LXXXVII. — Tremenn ra pep tra.

(J. = 60)

Se-leun ma breur ker tec'hout na an am.



2
Skeudenn ar vuhez
Eo al lestr a welez.
Tremen 'ra pep tra.
E roudou er mor
'N em gloz a-vec'h digor.
Tremen 'ra pep tra. (2 w).

3
Deiziu prizius
Grasou gwella Jezuz,
Tremen 'ra pep tra.
Eur wech tremenet
En-dro ne zeont ket.
Tremen 'ra pep tra. (2 w).



4
Tud skanv hag hep stur
A glask ar blijadur,
Tremen 'ra pep tra.
Fenez o tansal,
Arc'hoaz er bez tenval.
Tremen 'ra pep tra. (2 w).

5
Tud a zo temptet,
Stourmit, stourmit bepred.
Tremen 'ra pep tra.
Echu d'ar brezel,
Ho po ar peuc'h nenvel.
Tremen 'ra pep tra. (2 w)

6
Berr eo pep devez ;
N'eo ket hir ar vuhez.
Tremen 'ra pep tra.
Klaskomp hepdale
Savetei hon ene.
Tremen 'ra pep tra. (2 w).

7
Kant mil bloaz amzer
A zo c'hoaz gwall zister :
Tremen 'ra pep tra.
Nemet c'houi Doue,
Hon Mestr hag hon Roue,
Tremen 'ra pep tra. (2 w).

N° LXXXVIII. -- Evit beva gant levenez.



2. Evit beva gant levenez
N'eus ket ezomm aour na perlez ;
Hag ho pefe holl vel leve
Leon ha Treger ha Kerne,
Gant ho tanvez ne brenfet ket
Eun hanter-devez eurstet ;
Evit beva gant levenez
Karit Jezuz hag ar Werc'hez.

3. Evit beva gant levenez
N'eus ket ezomm aour na perlez.
Kalon an den, a zo c'hoantus,
P'en deus bet gwen, e c'houlenn ruz,
Pa ve sec'hour e c'houlenn glao...
Eun dra benag a vank atao :
Evit beva gant levenez
Karit Jezuz hag ar Werc'hez.

4. Evit beva gant levenez
Karit Jezuz hag ar Werc'hez.
Eurus, Eurus eo an hini
Zo da Jezuz ha da Vari ;
Gant Jezuz hag e Vamm Santel
Mad ea beva, dous eo mervel :
Evit beva gant levenez
Karit Jezuz hag ar Werc'hez.

N^o LXXXIX. — Diviz etre ar Sent hag an dud.

an dud

Par - ziou an henv di - go - rek 'Vik

ma klevimp er - var Gant ar sent ha sen.

te - red Pe - naoz e-man o stad. O

eu - rus-ted hep he far! di - aes eo dis-kle-

ria Dre gom-zou tud an dou-ar Pe -

gen ma omp a - man.

AN DUD. 2. Dreist-holl ni 'fell d'imp gouzout
Kelou eus hon c'hrouer
E vadelez, e c'halloud
E pel lec'h a weler.

AR SENT. — Anaout reiz anezan
Biken ne rei hini
Nemet ar re 'zo gantan
En nenv evelomp-ni.

AN D. 3. C'houi, merzerien didrec'hus
Teurvezit disrevel
Pegement ez oc'h eürus
Abaoe fin ar brezel.

AR S. — War hon penn ar gurunenn
En hon dorn al lore
Ruz-gwad ha splann hon seienn
Ni 'zo gwir Rouane(d).

- AN D. 4. Ha c'houi, doktored Santel
'Zo ken lemm ho spered.
Hirie d'imp c'hoaz reit kentel
Eus an nenv d'imp komzet.
- AR S. — 'R pezh a skrivemp a gaeran
'Kenver ar wirione(z)
'Zo evel eun elvenn dan
Etal an heol kreiste(iz).
- AN D. 5. C'houi, ermited ar c'hoajou
Pell diouz ar bed kuzet,
Goude ho pinijennou
Penaos en em gavet ?
- AR S. — Hon c'halon a zo beuzet
En eur mor a zudi
Ha war-dro gant an Eled
E Kanomp meuleudi.
- AN D. 6. Gwerc'hezad leun a vertuz
Alies disprizet
Petra breman a ret-hu
E palez ho Pried ?
- AR S. — 'Kreiz ar roz hag al lili
Ni a heuilh Oan Doue :
Tostoc'h d'ezan n'eus hini
Dre-holl lec'h ma vale.
- AN D. 7. C'houi labourerien douar
Ken dister ho madou,
Petra hoc'h eus bet er gloar
O kuitat ho parkou ?
- AR S. — An ne'ch a zo tremenet
Dreist-muzul eo an eost.
A zo ganimp dastumet
O-senti ouz hon Mest !
- AN D. 8. C'houi, peorien gez, dilezet
Gant ar pinvik digar,
Hag-en eo ho naon torret
Evel hini Lazar ?
- AR S. — Ouz taol Doue azezet
Eus e voed e tebromp
Hag eur vantel alaouret
War hon c'hein a dougomp.
- AN D. 9. Pec'herien hoc'h eus gouelet
Ken c'houerv ho pec'hejou,
Hag-en ez eo dizec'het
Ar wech-man ho taerou ?

- AR. S. — An daerou o deus gwalc'het
Hon ineou kablus ;
Splannoc'h evit ar stered
Ez omp e lez Jezuz.
- AN D. 10. Holl sent, diskuilhit d'imp c'hoaz
Pegeit e pad ho kloar ?
Moarvat keit ha ma padas
Ho puhez a c'hlae'nar ?
- AR S. — Hon gloar bepred a bado
Ken eürus ha ken splann
C'houi ganimp he z anvao
Ma karit chom gwenn kann.
- AN D. 11. Deskit d'imp eta breman
'Touez kement a hentchou
An hent mat pelec'h eman ?
An hent 'gas d'ar joaiou.
- AR S. — Dre hent an dek gourc'hemenn
Mar heuilhet hon roudou
Eveldomp, c'houi da viken
Vo eürus en Nenvou.

N° XC. — Doue gwir Bried.

(d = 66)





- 1
Doue gwir bried
An eneu,
C'houi 'ch eus ma chrouet
C'houi 'c'h eus ma frenet
C'houi 'ch eus ma c'hrouet
'vit an Nenvou.
- 2
Ez eus pell amzer,
Pelec'h rei peuc'h !
Ma'z oun, ma Salver,
Siouaz, eur pec'her,
Ma'z oun, ma Salver,
Enebour d'eoc'h.
- 3
Eur bugel tec'het
Diouz ti e dad,
Eun danvad kollet,
Pe bell dianket,
Eun danvad kollet,
Spontus e stad !
- 4
Siouaz ! ez oun bet
Betek breman,
Ya, ken aheurtet
E-barz ma fec'hed,
Ya, ken aheurtet ;
Chench a rankan.
- 5
Pignomp, ma ene,
War ar C'halvar,
Sellomp ouz Doue,
Leun a garante(z),
Sellomp ouz Doue,
En e c'hlae'har.
- 6
E dreid zo treuzet
Gant an tachou,
E gorf dispennet,
E benn kurunet,
E gorf dispennet
Gant skourjezou.
- 7
Sed, hen diwisket,
E gorf e noaz,
E zaouarn tachtet,
E gostez toulet,
E zaouarn tachtet
Ouz koad ar groaz.
- 8
Ha me, ma Doue,
Me ma-unan,
Am eus, hep truez,
Dre ma gwall vuhez,
Am eus, hep truez,
Kresket ho poan.
- 9
Me wel pardonet
Ar Mab Foran,
Kouezet er pec'hed,
Ar plac'h dirollet,
Kouezet er pec'hed,
Al laer forban.
- 10
C'houi a zo bepred
Eur gwir Salver ;
Ne c'houlennit ket
E ve den daonet,
Ne c'houlennit ket
Koll ar pec'her.
- 11
D'ho treid e pokañ
Gant Madalen,
Re e talean,
E tigarezan,
Re e talean
Ma finijenn.
- 12
Jezuz, ho kened
Bepred nevez,
Ho karout, dleet,
Salver binniget,
Ho karout, dleet,
E gwirionez.

Setu ar mare
Deut da ouestla
D'eoc'h, o ma Doue,

Ma nerz. ma buhe(z),
D'eoeh, o, ma Doue,
D'ho servija.

N° XCI. — A-vihanik em eus pec'het.

(J. = 58)



Diskan.

Gwerc'hez Vari, Mamm druezus,
O ouela war ar C'halvar,
Grit ma sello ho Mab Jezuz
Ouz ma anken, ma glac'har.

2. Pion a chenko ma daoulagad
E diou feunteun a zaerou,
Ha ma-daerou e daerou gwad,
Da ouela d'am pec'hejou.

3. Ya, evit eun netra, siouaz !
Me am eus bet dispignet
Madou evel n'eus bet biskoaz
E tenzoriou bras ar bed.

4. Gwchall e oan eur palez aour
Da dri Person an Drinded,
Ha breman ne doun nemet paour,
Ha da Satan c'hoaz gwerzet.

5. Perak n'eo ket deut, dizamant,
Ar maro kriz d'am gervel,
A-ziwar ma maen-badeziant,
Pe vailhurenn ma c'havell ?

6. Neuze evelkent, ma Doue,
N'em bije ket bet tennet
Kounnar ma Mestr ha ma Roue,
Siouaz evel ma 'm eus graet.

7. Pellait holl, fals vignoned,
Rak c'houi gant ho skouerioù fall,
Ma spered hoc'h eus peurdroet,
D'hoc'h heul, dre an hentou dall.



8. Gant ho komzou lous ha mezus,
Ma c'halon bet mastaret,
He stad, na pegen truezus !
Pegement eo glac'haret !


9. Ma Doue, gwalc'hit ma c'halon,
Gant daerou a binijenn ;
Roit d'in, ivez, ho pardon,
M'ho karin da virviken.

10. En ho kalon em eus sanket
Eur c'hleze, o Pastor Mat !
Grit ma teuy an oan dianket,
Adarre da gaout e Dad.

N° XCII. — Selaouit gant spont hag eston.

(J. = 69)





2. Holl, emezan, rankomp mervel,
Pa blij gant Doue hon gervel,
Evit mont raktal dirazan,
Da glevout hon setans gantan.
3. Meur a zen a goll e ene,
Ha ne rafe ket mar sonjfe
Pegen berr eo ar vuhez-ma(n),
Pegen tost an deiz diweza.
4. Ar c'horf ne glask dre e natur,
Netra nemet e blijadur ;
Ha koulskoude prestik, hep mar,
Ec'h ay da vreina d'an douar.
5. Gant aon eta na grogfe re
E siou fall war hoc'h ene,
Grit d'ezan dre ar binijenn,
Plega d'an holl lezenn gristen.
6. Ar c'horf n'eo ken met eur mevel
D'ho servija betek mervel :
E gastizit, kuit da espern,
Ha biken n'eot d'an ifern.
7. Ar bed, ivez, a zo treitour,
Evel eur planken war an dour,
Fiziout ennan zo gwall risklus,
Daoust d'e sellou flour ha c'hoarzus.
8. Gaou a lavar da bep hini.
Mont a ra betek prometi
Eurusted, yec'hed, hir vuhez,
D'an dud erru 'kichen o bez.
9. Dastumit madou an ene
N'hallit ket kaout kaeroc'h leve :
Madou ar bed, holl en eur bern,
Ne dint nemet maged ha spern.

10. Eur goz linsel, pevar flanken,
Eun dorchenn blouz dindan ho penn,
Setu hepken 'r pezh a chomo
Ganeoc'h-c'houi goude ho maro.
11. Ha pa vec'h yaouank pe vugel,
N'it ket da gredi beva pell,
Ar vered a zo leun a dud
Shoet didruez 'kreiz o brud.
12. Eur wech maro ha sebeliet,
Betek ho pezh c'houi 'vo douget ;
Ho kerent eno ho lezo,
Hak a zeuy d'ar gêr, graet o zro.
13. Piou a sonjo neuze ennoc'h,
Ha piou a bedo evidoc'h ?
Poanit 'ta da veva ervat,
Keit ha ma c'hellit labourat.
14. Hoc'h holl oberou mat ha fall,
Ne day ken ganeoc'h d'ar bed all ;
Da eur ho maro 'vint pouezet
Gant ar Barner 'n deus o gwelet.

N° XCIII. — Ar Maro.





2. Pa zeuy spes ar maro da sponta ma daoulagad,
Ho karantez, Jezuz, en c'halon deut da lakaat.
3. Eun euz 'vit ma nesa, liou ar maro em c'herc'hen,
Deut neuze, ma Jezuz, d'am frealzi, em c'hichen.
4. Pa n'hallin ken klevout komzou an dud, ma Salver,
Komzit ouz ma c'halon, gant ho mouez dous ta tener.
5. 'vit ar wech diweza, pa lavarinn : « Ma Jezuz ! »
Selaouit, m'hoc'h asped, mouez ho pugel truezus.
6. Pa gouezo an daerou eus ma lagad o vervel,
O binnigit, Jezuz, 'vit ma vint daerou santel.
7. Pa welot ma c'halon hantervouget, o ranna,
A garantez 'n ho kenver, deut, Jezuz, d'he zomma.
8. Pa vo ret d'in kuitaat ma zraou ha ma ziegez,
Bezit c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma finvidigez.
9. Ha pa zispartig ma c'horf paour diouz ma ene,
Ma hirvoud diweza 'ginnigan d'eoc'h, ma Doue.
10. Ha dirak ho lez-varn p'en em gavin, ma Jezuz,
Teurvezit em c'henver beza holldrugarezus.
11. Lakaat ran ma maro kenkouls hag ma holl vuhez,
Etre daouarn Jezuz hag e Vamm leun a druez.

N° XCIV. — Ar varn gantan.

TON : XCIV.





1. Sonjomp, o kristenien, Ya, sonjomp, e gwirione(z),
Deut ar maro, raktal e vimp barnet gant Doue.

Diskan.

- Gwerc'hez Vari, ma Mamn leun a druez,
Grit d'in douja ar varn e-pad ma 'z oun e buhez.
2. Ne vo ket c'hoaz serret d'hon c'horf paour e zaoulagad,
Ma klevimp ar Barner o c'hourc'henenn d'imp tostaat.
 3. Ha neuze hon ene strafuilhet-holl gant ar spont,
Hep gallout 'n em guzat a dleo renta e gont
 4. Pa zigoro al lev'r a skrivomp ennan bemdez
Kement tra mat ha fall a reomp, pebez enkrez !
 5. Raktal 'kreiz hon ene, e lennimp hon pec'hejou,
Nemet ar re gwalc'het gant pinijenn ha daerou.
 6. Pegen hir al listenn evit an dud na glaskont
Nemet o flijadur er bed-man 'pad ma vevont.
 7. Na sant, nag ael eno ne zeredo d'hon difenn ;
Bouzar e vo an Nenv, didalvoudus ar bedenn.
 8. Met an den fur 'welo, dirak e Varner ledet,
An tenzoriou gantan en amzer an eost medet.
 9. Fur setans a glevimp, a vuhez pe a varo ;
Hag hon stad goude se da virviken a bado.
 10. Pep hini ac'hanomp kerkenet 'yelo d'e dachenn,
Gant aelez pe ziaoulou a zeuo d'e ziarbenn.
 11. Kalz war hent an Nenvou 'vo ret d'ezo dalea,
D'ober er Purgator ar binijenn galeta.
 12. Heuliomp hent ar furnez, sed aze ar pep gwella ;
He mouez d'imp a lavar : « karit Doue, ho nesa. »
 13. Skarzit diouz hoc'h ene, dre gofes, o den santel,
Holl gailhar ar pec'hed, ha grit d'ho techou brezel.
 14. Tremenit pep devez, evel ma rankfe beza.
Ar fin eus ho peaj, hag ho devez diweza.
 15. N'eus forz pegoulz a zeuy Doue neuze d'ho kervel,
Abred pe zivezat, e viot prest da vervel.

N° XCV. — Ar varn diweza.

(♩ = 104)





2. Kent eur ho pardedigez, kent degouez fin ar bed,
O, bezit trugarezus, ma Jezuz, ni ho ped ;
Gras d'imp da c'hallout beva, evel ma vev ar sent,
Hag evit mont d'ho lez-varn, 'c'h aimp dinec'h en hent.
3. Pa dostao fin ar bed, 'vo dre-holl ken gwaz reuz,
Ma tizec'ho diouz o sav, an holl dud gant an euz ;
Pa savo an « Antekrist » en aer e vanniel,
War an douar 'n em ledo ar spontusa brezel.
4. Gant ar c'hurun o strakal, e kreno an douar ;
Ha pa gouezo ar stered, d'o heul, an heol, al loar,
E krogo dre-holl er bed, war eun dro, an tangwall,
Ma vo an holl dud gantan devet, koulz mat ha fall.

5. E tregerno an drompill en draonienn, er menez,
Evit degemenn ar varn, sonet gant an aelez ;
Ha kerkent eus kreiz o bez, a bep tu e savo,
Leun a nerz hag a vuhez, an holl gorfou maro.
6. Int ken buan 'n em vodet e traonienn Jozafad,
Pa savint war-du an Nenv neuze o daoulagad,
E welint karget a c'hloar, hag e holl zremm skedus,
O tiskenn war an douar, ar Barner bras, Jezuz.
7. E Groaz douget dirazan gant eur rummad aelez,
En eun doare kaer-dispar a lintro a-nevez ;
Ha kerkent 'vo diskleriet du bep hini e stad.
Na pegen eürus neuze e vo an holl dud vat !
8. Met en o c'hichen, siouaz, ma pegen truezus
Ar setans a vo hini enebourien Jezuz !
Ne welint ken dor digor nemet dor an ifern,
D'o degemer da leski, kig ha mel hag eskern.
9. Diskuliet dirak an holl pec'hejou pep hini,
Ma chomo, ouz o c'hlevout, nec'het meur a hini.
O, na pebez rangalon, pa ranko dizale,
Pried kuitaat e bried, tad, mamm o bugale !
10. Kerkent, graet gant an aelez eus an dud diou lodenn :
Ar re dle mont d'an ifern pe d'an Nenv, 'vit biken.
O Gwerc'hez santel, m'ho ped, ; roit d'imp ho skoazell,
Ma nijimp, goude ar varn, d'an Nenv a-denn-askell.

N° XCVI. — An ifern.

(♩ = 100)



Ber eun tam-mig tro 'vñ ma
 Beuil Bimp ar fur - nez, an
 v - nes - tiz Kris - tan Bon
 mi - ro ouz ar poa - niou &
 Ba - so sa vi - ken.

*ad lib.
Diskan, ton XC1*

Ton all (♩=60)

Dis - kennomp holl Kris - te -
 nien Dis - kennomp war - eun - so
 Be - tek e - kreiz an i -
 fern s'o - Ber eun tam - mig
 tro 'vñ ma Beuil - bimp ar

fur - nez ; an o - nes - tiz Kris -
 ten Bon mi - ro ouz ar
 poa - niou & Ba - so
 sa vi - ken.

Diskan, ton XC1

2. An ifern a zo eul lec'h leun a denvalijenn,
 Ne weler kammed ennan eur fulenn sklerijenn,
 An doriou 'zo bet serret ha prenet gant Doue,
 Ha n' o digoro biken ; kollet eo an alc'houe(z).
3. An tangwall an euzusa ne deo nemet moged,
 E-kichen tan an ifern, pa grog er re daonet ;
 Hag aman e-kreiz an tan, ma tev korf, izilli,
 En ifern, korf hag ene chom bepred da virvi.
4. Eno, war ar re zaonet 'vo redet ar c'houez,
 A-berz lealded Doue, dalc'hmat hag hep paouez.
 Na pegen kriz ne vo ket eno 'ta ar vuhez,
 E-kreiz eun tan peurbadus, hep gallout kaout truez.
5. Kaer devo eno yudal, klask distana o foan,
 Ne ray nemet o brouda war wasaat an tan.
 Siouaz kouezet en ifern, echu da bep pardon
 N'eus met dizesper eno o krignat ar galon.
6. N'eo ket eur vuhez hounnez, klevout eno dalc'hmat
 Ar malloziou o koueza barrad war-lerc'h barrad :
 Tad ha mamm ha bugale bepred en em damall,
 O skei an eil egile, didruez, en tangwall.
7. Pa vezer leun a yec'hed, yaouank ha dibreder,
 Da heul kement fals vignon, dinet'h-brao e reder ;
 Met e-kreiz tan an ifern, mignoned an douar,
 N'int ken met enebourien, 'vel chas klanv e kounnar.

8. Diwallit-mat, m'hoc'h asped, c'houi a vev hep kredeñ ;
N'eus Doue 'bet evidoc'h, na mui feiz na lezenn.
An neb na glask er bed-man nemet mont en e roll,
Deut ar maro, en ifern, da viken a 'n em goll.

9. Pegen kriz chom da viken da leski 'kreiz an tan !
Mar deo eur Gwall boan hounnez, ez eus c'hoaz gwasoc'h
Beva pell diouz Doue ha biken pardon ebet, [poan :
N'eus gwasoc'h merzerenti da galon, da spered.


10. Dalc'homp, evel kristenien, hon penn uhel d'an nec'h,
Hag hon treid, hed hon buhez, digailhar war ar sec'h,
Ha ne vo ket evidomp ifern ebet goude ;
A-denn-askell e nijimp da Varadoz Doue.

N° XCVII. — Ar Baradoz.

(♩ = 86)




ge - aux, pe - gen bras vez pli -




ja - sur an e - ne pa vev e gras Dou




e Bag en e ga - ran - tex, pa




vev e gras Dou-e Bag en e ga - ran - tex.




pe ge - aux pe - gen bras vez pli -



ja sur an e - ne pa vev e gras Dou



e Bag en e ga - ran - tex pa



vev e gras Dou-e Bag en e ga - ran - tex.

1

Berr 'kavan an amzer,
Hag ar poaniou, dister,
O sonjal deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

2

Pa sellan en Nenvou,
Etresek ma gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmig wenn.

3

Gant joa e c'hortozan
An tremen diweza(n)
Hast am eus da welet
Jezuz, ma gwir bried.

4

Kerkent ha ma vezo
Torret ma chadenno(u),
Me a savo en aer
Evel eun alc'houeder.

5

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar c'hloar,
Dreist an heol, ar stered.
Me a vezo douget.

6

Pa vin -us d'an douar,
Traonienn leun a c'hlaç'har,
Neuze me ray eur sell
Ouz ma Bro Breiz-Izel.

7

D'ezi me lavaro :
Kenavo d'it, ma bro ;

Nag a zaerou skuilhet
Ennout, bro vinniget !

8

Kenavo, da viken,
Paourentez hag anken,
Kenavo, pec'hejou,
Trubuilh ha klenvejou.

9

Pelloc'h ne zoujin ket
Ardou an droukspered :
Netra ken n'am sponto
Goude taol ar maro.

10

Goude taol ar maro,
Joatiz me a gano :
Torret eo ma chadenn,
Dizalc'h oun da viken.

11

A bep tu pa sellin,
Kement tra a welin
A ray d'am daoulagad
Ha d'am c'halon mil vad.

12

Doriou ar Baradoz
Digor ouz ma gortoz ;
Ar sent, ar sentezed
War o zron azezet.

13

Me vo degemeret
E palez an Drinded
E-kreiz an enoriou
Hag ar meuleudiou.

14.

Me c'hall, evit mat,
Gwelout Doue an Tad,
Gant e Vab eternel,
Hag ar Spered-Santel.

15

Me a welo Jezuz,
Gant eur c'hoarz dudioz,
O lakaat war ma fenn,
Eur gaer a gurunenn.

16

Pegen brao vo klevout
Jezuz o lavarout :
« Deut, ma servijer mat,
Da gaout Doue ho Tad. »

17

Eus bered an iliz,
Ho korf, bev war e giz,
Aman, hep pell dale,
A vo douget ive(z).

18

C'houi zo em Baradoz
Evel bokedou roz,
A zivleugn d'ar mare,
Hag a vleugn adarre.

19

Gwenn evel al lili,
Gwennoc'h n'eus ket hini,
Setu c'houi em falez,
Eürus gant an aelez.

20

Evit poaniou dister,
Evit ankeniou berr,
Me a vo paeet-mat
Gant Doue ma gwir Dad.

21

Eno e vo gwelet
Ar Werc'hez vinniget,
Gant daouzek steredenn
A ra he c'hurunenn.

22

Gwelout a rin ivez
An aelez, arc'haelez,
Ma tregern an Nenvou,
Gant o meuleudiou.

23

Hag eno unanet,
An holl batriarked,
Ganto ar brofeted,
Holl, o fenn kurunet.

24

An ebestel eürus,
Gant diskibien Jezuz,
Hag an holl verzerien,
Enor ar gristenien.

25

Tud salvet, a bep bro,
A welin c'hoaz eno
'-kichen ma zadou koz
Pell'zo ouz ma gortoz.

26

Gwerc'hezad a bep oad,
Sentezed a bep stad,
Gwragez, intanvezed
Er bed-man disprizet.

27

Bugale diniver
Tro-war-dro d'o Salver,
Gant sae o badeziant,
O nijal skanv ha drant.

28

Eürusted hep he far
A-vreman me ho kar
Hag ennoc'h pa sonjan
Dinec'h en em gavan.

29

Em holl boaniou kalet
A gorf hag a spered,
Sonjal rin deiz ha noz,
E gloar ar Baradoz.

N° XCVIII. — Baradoz dudioz.

(♩ = 60) Diskan

Ba - ra - doz du - si - us!

Bro ar sent eo ma bro. A!

pe - gen e - i - rus e vir -

me be - pred en - o! O' pe -

gen glac'ha - rus be - va

e stad a be - c'bed.

pe - goulz 'o ma ge - ruz

e ve - rin 'ta di - ve - c'bed?

2

Noz ha deiz, ma Jezuz,
E lavaran 'n eur ouela :
Pegoulz, bed touellus,
E teuy ma eur diweza ?

3

Skuiz ha melkoniet,
En draonienn-man a zaerou,
Ma Jezuz, me ho ped
D'am degemer en Nenvou.

4
En Nenvou, ma Jezuz,
Neuze e vo lavaret :
An daerou hirvoudus
Ar boan a zo tremenet.

5
O peuc'h, O joatisted !
O ma Jezuz, ma Salver,
Na pebez eürusted,
Eno 'pad an holl amzer.

6
Neuze, O ma Jezuz,
Me a gano deiz ha noz,


Gloar d'eoc'h, Tad truezus
Ha da Vari mil bennoz !

7
Aelez eus an Nenvou,
O ! me a zo eürus
O klevout ho moueziou
Hag ho kan meuleudius !


8
Peurstanket ma daerou,
Bezit, ma ene, joaüs !
Hepdale en Nenvou
Me a welo ma Jezuz !

N° XCIX. — Karomp Doue da genta.


(J.=84)




Ka - romp Dou - e da gen - ta ma en .




e Ka - romp Dou - e da gen - ta .



Er poa - nion, er joa bed hon holl



Vu - Bez , 'vel ar senz klaskomp be .



va Ka - romp Dou . etc

Diskan.

Karomp Doue da genta,
Ma ene
Karomp Doue da genta.

2. Disprizomp madou ar bed
Milliget
Disprizomp madou ar bed :
N'int netra nemet ludu ha moged ;
Pinvidik an neb a bed.

3. Lezomp ar plijaduriou
A dremen,
Lezomp ar plijaduriou :
Luziet e vefemp en o chadennoù,
Ha ganto dallet a-grenn.


4. Ni breman 'zo war ar mor
Houlennus,
Ni breman 'zo war ar mor :
Etrezek an Nenv, war-eeun ha joaüs,
Deomp a-raok daoust d'e fulor.

5. Doue a roy d'imp sikour
E c'hrasou,
Doue a roy d'imp sikour :
Ember e vo fin d'hon holl drubuilhou,
Ha trec'het hon enebour.


6. Eürus e vimp eun deiz
'N e balez,
Eürus e vimp eun deiz :
Lod hon bo en e holl binvidigez,
'pad an holl beurbadelez.

N° C. — Feiz hon Tud-koz.


(J.=66)



Ar vre - to - ned 'n o e - ne - zenn



a bell am - zer a oa kris - ten



Kenz sont en ar - vor bon tud - koz

A ga-re he-zuz e Bro-Saoz.
Diskan
 Feiz bon tud-koz, O feiz san.
 tel c'houi 'vo be-pred feiz Breiz-I.
 rel Mac'h bon Dou-e ken-toc'h mer.
 vel ken-toc'h mer. vel ken-toc'h mer.
 vel.

Ton all
(Diskan ba paos) *(♩=64)*

ar vre-tu-ned'no e-ne
 zeun A Bell an-xer a sa kris-ten ken-sonz en
 Ar-vor bon tud-koz a gare Jezuz e Bro-Saoz.


2. D'hon sent gwechall e plije-kaer,
 Mont betek Rom da welout Per ;
 Karomp ar Pab, ivez, d'hon tro :
 Ra vezo doujet en hon bro.

3. Drezan 'teu d'imp a-berz Doue
 Gwir vagadurez d'hon ene :
 Ar wirionez, d'he heul an hent
 Hon reno sur da vro ar sent.
4. Hon sent-gwechall a-dreus ar mor
 A zouaras 'n hon Bro-Arvor,
 Evit prezeg an Aviel,
 Da gristena hon Breiz-Izel.
5. Abaoe, 'hed ar c'hantvejou,
 O deus tridet hon eneou,
 Dindan skend an daou vanniel :
 Kroaz Jezuz hag e Aviel.
6. 'Vel hon tud-koz, chomomp bepred
 Disi a galon, a spered,
 Ha lavaromp : « D'hon feiz kristen,
 Treitour biken, treitour biken !... »
7. O Sent hon bro, bezit truez
 Ouzimp hed-ha-hed hon buhez ;
 Grit mac'h heuilhimp lezenn Doue,
 'Vit mont ganeoc'h d'an Nenv, goude.

N. Cl. — Me 'zo Kristen.

(♩=88) *Diskan*

Me 'zo kris-ten ba ganz e-nor di
 rak an holl m'hel la-va-ro : Be.
 sa kris-ten kaera ten-zor 'pad
 ar vu-ber bay er ma-ro Me.



2. Me 'zo kristen bugel da Zoue
'N deus ma c'hrouet, korf ha spered ;
Ra vo eta bepred ma roue,
Da c'hortoz an eürusted.

3. Me 'zo kristen, ha d'am dasprena
Jezuz en deus skuilhet e wad ;
Ouz e garout, p'eo ma breur hena,
Evidoun-me, na pebez mad !

4. Me 'zo kristen ; e-kreiz ma ene,
Ar Spered-Santel war e dron,
Evidoun-me na pebez leve
E gaout gant e seiz donezon !

5. Me 'zo kristen ; O Iliz Santel,
Senti 'rin ouzoc'h gant doujans :
Kuzet dindan tommder ho mantell,
E c'hallin kaout dalc'hmat fizians.


6. Me 'zo kristen ; 'vel eur beajour,
Dre hent ar vuhez e kerzan :
Madou ar bed a zo re dreitour,
Outo biken n'en em stagan.

7. Me 'zo kristen, ha ma banniel,
Daoust da ardou an droukspered,
A zo Kroaz Jezuz, e Aviel :
A-du ganto chomin bepred.

8. Me 'zo kristen, ha d'ar Baradoz,
P'eo ma gwir vro, mont a fell d'in :
Eno 'man Doue ouz ma gortoz,
Gantan 'vit mat eürus e vin.

N° CII. — Doue fell d'imp.






2. Met c'houi, Mari, Mamm garantezus,
Hag a roas Doue d'ar bed,
C'houi a viro d'imp ho Mab Jezuz,
Da Zoue ha da Vestr bepred.
3. Doue fell d'imp e pep tiegez,
Doue d'an tad, Doue d'ar vamm,
Doue d'ar mab m'en devo furnez,
Doue d'ar verc'h ma vo dinamm.
4. Doue er skol d'ar mestr, d'ar vestrez,
Doue d'ar bugel o teski !
Sionaz ! na trista deskadurez,
Pa vez ar skol hep kreuseuli.
5. Doue fell d'imp en ospitaliou,
D'ar c'hlanvour kaez en e anken ;
Tud santel da zousaat e boaniou,
D'e ene paour an absolvenn.
6. El lez-varn, Krouaz Jezuz Hon Salver,
Lakaet er penn uhela,
'Vit ma heuliou bepred pep barner
Jezuz ar Barner diweza.
7. Doue en iliz d'an daou bried,
D'unani o friedelez !
Pa ne vez ket Jezuz en eured,
Ne bad ket pell ar garantez.
8. Gant ar soudarded hag o mestrou,
Doue dalc'hmat er penn-a-raok,
Evit kennerza o c'halonou,
En deiz, siouaz, ma savfe krog.

9. Ra gennerzo Hon Salver Jezuz
Sentus holl ouz lezenn Doue :
Eürusted eur vro, he gwir mammenn,
Eo kemer Jezuz da Roue.
10. Ra gennerzo Hon Salver Jezuz
An iliz Santel e Bried,
Ma beurdrec'ho er brezel spontus
A vez graet d'ezi dre ar bed.
11. Doue, mestr d'ar rouantelezoù,
Hag e Aviel o lezenn ;
Pegoulz 'ta, poblou, gant ho mestrou,
E plegot dirazan ho penn ?
12. Bezomp kristen evel hon tadou.
Lavaromp, Breiziz, a bouez penn,
En eur gerzout holl war o roudou ;
Feal bepred ! Treitour, biken ! »

N. III. — Aman pell diouz an trouz.

(d=63)



2. An douar a bourvez
E vara d'ar poaniour ;
N'e ro ket d'an den didalvez :
N'eus ket a vara hep labour.

3. Me a wel ar gwenan
Savet da c'houlou-deiz ;
Me ivez a dle kemer poan
Ma reno gras Doue em c'hreiz.
4. Hep ehan, ar wazig
A dreuz ar saonennou,
'Trezek Doue eo mont braoik,
Hep luzia er plijadurioù.
5. An oan kaez gant fizians
A heuilh e bennrenour ;
Heuliomp Jezuz evit kaout chans ;
An droukspered a zo treitour.
6. Ar gwez gant an avel
A bep tu vez hejet ;
Koueza 'rin ma savan uhel :
Well eo pleustra an izeldor.
7. An delienn a chom ye,
Pa vez stag ouz he barr ;
Ma 'n em zistagan diouz Doue,
E teuin da wenvi hep-mar.
8. Ar rozenn a zigor,
Hag a sec'h 'n eur beure ;
Hirie ma 'z oun serz, yac'h, didorr,
Arc'hoaz e varvin marteze.
9. Al laboused a gan
Meuleudi d'o C'hrouer ;
Duoc'h oun-me eget eur vran,
Ma n'e veulan e pep amzer.
10. Skourn hag erc'h a-wechou
A droc'h ken a grenan ;
Kals gwasoc'h dre ma fec'hejou,
A-berz Doue kaout a dlean.
11. Faez oun gant an tommder,
Dindan an heol, pa boaz ;
Ma foaniou n'int mann e-kenver
Poaniou Jezuz stag ouz e Groaz.
12. C'houi hepken, ma Doue,
A glaskan e pep tra ;
Renit warnoun c'houi, ma Roue,
En em ouestla 'ran d'eoc'h gant joa.


N° CIV. — Eürus an hini a garo Doue.





TON : LXXX

1. Eürus an hini a garo Doue
Gant e holl galon hag e holl enc. (2 w)
2. An den a blijio da Zoue hon Tad
A vo diwallet ha diwallet mat.
3. En ti hag er park, dre-holl, deiz ha noz,
Doue a skuilho warnan e vennoz.
4. Gantan e bried hag e vugale
O devo o lod e bennoz Doue.
5. Evel eur wezenn douret he gwrizioù,
Dougen a ray frouez, deliou ha bleunioù.
6. Mar deo pinvidik, e ray vad d'ar paour ;
Stlabeza a ray e arc'hant, e aour.
7. M'eo paour a zanvez, en deus 'vit leve
Karantez Doue ha peuc'h an ene.
8. Gant c'houezenn e dal en deus paeadra
Da c'hallout dinec'h debri e vara.
9. Laouen er vuhez, laouen er maro,
Etrezek an Nenv eürus e savo.
10. Ha te, pec'her paour, trenket da vuhez,
Ma varves daonet, na pebez truez !
11. Pec'her paour, distro ha distro buan,
Rak ganit dija eman c'houez an tan.
12. Kemer hepdale hent ar Baradoz,
Pe, m'hel lavar d'it, e kavi malloz.

N° CV. — Meulomp Doue ! Meulomp Doue !

(J.=58)





2. Diouz ar beure, dal ma tihunan
E kanan ye : Meulomp Doue !
E-pad an deiz dre ma labouran,
Ma c'hanaouenn : Meulomp Doue !
Pa led an noz tenval he mantell
-Us d'an douar : Meulomp Doue !
Lavaran c'hoaz an diou gomz santel :
Meulomp Doue ! Meulomp Doue !

3. Na glevit ket 'kreiz al levezeg,
Ma mouez lavar : Meulomp Doue !
Ha ma c'halon en dristidigez,
A lavar c'hoaz, Meulomp Doue !


Pe vo brao, pe vo fall an amzer,
Sul-gouel-bemdez : Meulomp Doue !
Em zi, er maez, ma mouez a gan kaer :
Meulomp Doue ! Meulomp Doue !


4. E Breiz-Izel, gant ma mignoned,
Ma diskan eo : Meulomp Doue !
Pell diouz ma bro, mesk ar C'hallaoued,
N'ankounaan ket : Meulomp Doue !
'Vel ma zud koz, er peuc'h, er brezel,
Yac'h-mat pe glanv : Meulomp Doue !
A-greiz beva ma rankan mervel,
Meulomp Doue ! Meulomp Doue !

5. Gant ma madou, mar doun enoret,
Dirak an holl, Meulomp Doue !
Ha mar doun paour, mar doun disprizet,
'lec'h damanti : Meulomp Doue !
Er Baradoz e vin dic'haouet,
Hag en tu-hont : Meulomp Doue !
Hent ar furnez ganin bet heuliet,
Meulomp Doue ! Meulomp Doue !

6. War ar C'halvar Jezuz o tremen,
A hirvoude : Meulomp Doue !
Daoust d'he glac'har e vamm 'n e gichen
A responte : Meulomp Doue !
Hag e rankfen evel ma Salver,
Skuilha ma gwad, Meulomp Doue !
Ma ger vefe 'vel e pep amzer :
Meulomp Doue ! Meulomp Doue !

N. CVI. — Jezuz 'lavar d'imp Pedi.





2

Ar bedenn noz-veure.
A-dal ma sav sklerijenn,
E pedan da veure :
Da noz, en denvalijenn
E pedan adarre.

3

Ar bedenn en iliz.
Pedi ran en ilizou,
Tost d'an Aoter stouet,
Ma Jezuz ha ma Aotrou
A chom eno kuzet.

4

Ar bedenn war bep tachenn
N'eus forz pelec'h 'n em gavan,
E kêr pe war ar maez,
A-greiz kalon e pedan,
Dirak an holl, hep mez.

5

Ar bedenn e-pad al labour.
Pa vez kalet al labour,
Pec'hi zo didalvez,
Hag e pedan d'am sikour
Jezuz a oa kalvez.

6

Ar bedenn war-gan.
A-wechou, a-vouez izel,
Pedan diouz ma gwella,
'Vit kana a-vouez uhel,
Goude, diouz ar c'haera.

7

Ar bedenn 'kreiz ar boan.
Pa gouez warnoun ar c'hlenved,
Pa semplan gant an nec'h,
Ar bedenn eo ma yec'hed,
Ar bedenn am divec'h.

8

Ar bedenn hag an oberou-mat
Rei ra nerz d'in ar bedenn
Da garout ma nea,
Hervez al lezenn gristen,
D'e sikour da veva.

9

Ar bedenn hag ar baourentez.
Lezel a ran gant ar bed
E arc'hant hag e aour :
Ar pinvidik ma ne Bed,
E gwirionez zo paour.

10

Ar bedenn hag ar Werc'hez.
Ma fedenn dre zorn Mari
Da Zoue 'vez kaset,
Hag he mouez 'vel ma hini
Gant Doue 'vez klevet.

11

Ar bedenn 'hed ar vuhez.
Dalc'hmat, keit ha ma c'hallin
E pep lec'h, e pep bro,

Evel breman e pedin
Betek eur ma maro.


12

Ar bedenn hag ar varn.
Dirak ar Barner kerkent
E redin bep krena(n)
Rak goude pedi kement
Arru mat 'vin gantan.

AR BLOAVEZ KRISTEN

N. CVII. — Ar Salver ez omp o c'hortoz.

(J=80)



2. C'hoant-bras hon eus holl koulskoude
E parfe 'us d'imp ar beure :
Tenva ha spontus eo an noz
Abaoe pec'hed hon tud-koz.

3. O ! dont a ray hep pelldale
 'Vel bugel 'touez e vugale :
 Nerz a roy d'imp ha sklerijenn,
 Ma fell d'imp ober pinijenn.
4. D'eun arc'hael gant Doue kaset
 Betek he zi e Nazared,
 Ar Werc'hez Vari respontas :
 « Mat eo, Mamm 'vin d'ar Mesiaz. »
5. Eur steredenn en oabl glas-pers
 Etrezek ar Jude a gerz ;
 War he lerc'h prinsed a-bell bro,
 A weler o tont war-eun-dro.
6. War Vetleem, eus an Nenvou,
 An Aelez a daol o sellou :
 Eur veuleudi o deus desket
 Na oa ket bet biskoaz klevet.
7. Krouer ar bed, c'houi adarre
 Zo douget 'vit ho pugale ;
 D'eoc'h ha da Jezuz 'n e gavell
 Hon eus hast da gana Nouel.

N° CVIII. — Deut, Salver ar bed.

TON : XXV






1. Deut, Salver ar bed, diskennit,
 Ha diouz Satan Hon dizammit ;
 Diskennit eus ar Baradoz,
 Ni 'zo pell 'zo ouz ho kortoz.
2. Graet e bec'hed, hon tad Adam
 A rankas kuitaat an Eden :
 Abaoe 'veltan pebez samm
 N'hon eus ket ni ranket dougen.
3. Raktal, eneb d'e vugale,
 An diaoul a stignas e lasou,
 Hag an dud dallet dizale,
 A 'n em golle a-vagadou.
4. War ar bed kablus, ma Doue,
 An dour-beuz hoc'h eus c'houi ledet ;
 Eiz den hepken en Arc'h Noe
 Ouz ar maro a voe miref.

5. Ha goude ken spontus kentel,
 Hon tadou koz a bec'he c'hoaz.
 Nag ho mouez, na kurun Babel
 N'hallas o derc'hel fur, siouaz !
6. En ho madelez koulskoude,
 Daoust d'hon pec'hejou e fiziomp,
 O kredi e teuy hepdale
 Ho tourn da sevel ac'hanomp.
7. Lavaret ho poa da Adam,
 Gant an diaoul pa oa bet trec'het,
 E teufe eur Mab hag e Vamm
 Da flastra e benn milliget.
8. Abaoe Abraham ez eus brud
 E tle eur bugel eus e rumm
 Sevel e dron e-touez an dud
 Hag en-dro d'ezan o dastum.
9. Moizes hag ar Brofeded
 Eus ar bugel-se 'deus komzet :
 E c'hloar, e vuhez hed-ha-hed
 A zo bet ganto diskuliet.
10. P'erruas an amzer merket,
 Eun arc'hael a-berz an Aotrou
 A zeuas betek Nazared,
 Ha gantan eur c'haer a gelou.
11. — « Gwerc'hez Vari, 'me an arc'hael,
 Kemenn 'ran d'eoc'h a-berz Doue :
 Genel a reot eur bugel,
 Salver ar bed hag e Roue. » —
12. Trugarez d'eoc'h, Aotrou Doue,
 D'hoc'h ano mil ha mil bennoz ;
 Roet hoc'h eus d'imp hon Roue,
 N'hon eus ken netra da c'hortoz.
13. Grit d'imp, ni ho ped, ma Doue,
 Douja ho Mab, bemdez, bemnoz ;
 Ha kaout ar c'hras da vont goude
 Da eürusted ho Paradoz.

EVIT GOUEL AN NEDELEG

N^o CIX. — Spered santel Doue.

(♩ = 60)



Diskan.



Nouel, Nouel, Mabig-Jezuz,
Ken koant ha ken karantezus :
Ni hoc'h ador en ho kavell,
Hon joa zo bras : Nouel, Nouel !


2. E oamp ouz e c'hortoz, oar den pegeit e oa,
Da zont war an douar evit hon dasprena ;
Degouezet eo an eur ma vezimp dinec'het,
E kerig Betleem Jezuz a zo ganet.

3. An Nenv hag an douar o welout ar bugel
A drid a levez en eur gana Nouel ;
Klevout reer en oabl mouezioù ar Baradoz,
Hag eur sklaerder dispar splanna 'kreiz an noz.
4. E-kichen Betleem eun ael a ziskennas,
Gantan eur c'helou kaer, ar c'haera bet biskoaz :
« Dihunit, emezan, ha savit, pastored,
It d'ar c'hraou da welout ho Salver zo ganet. »
5. Pa glev ar bastored eus e berz ar mister :
Oa deut war an douar o Mestr hag o c'hrouer,
E lezont o denved war ar roz da beuri,
Evit mont 'trezek kêr raktal d'e adori.
6. N'oa ket c'hoaz sklaer an deiz pa gavjont ar bugel
En eur c'hraouig dister, eur prezeb, e gavell :
Da c'holo e gorf paour, eun tammig lienenn,
Hep eur bannac'hig tan, ha kriz ar yenijenn.
7. Hag int war o daoulin tro-war-dro d'ar Bugel ;
D'ober eur bedenn gaer ha da gana Nouel ;
Rei a rejont d'ezan diwar o faoutentez,
Pep hini e damm prof, eur merk a garantez.
8. Me ho ped holl, poblou, heuilhit ar bastored
Adorit ho Krouer war ar plouz astennet ;
Ha sonjit dirazan e ranko, pa vo bras,
Astenn e izili evidoc'h war ar Groaz.
9. Diwar e baoutentez 'teu hon pinvidigez ;
Deut eo d'hon kennerza dre e sempladurez ;
Dont da ren 'n hon c'halon Hon Salver ne glask ken
Pegen bras e c'hlac'har ma vefe kollet den ?

N^o CX. — Petra zo henoz a-nevez.

(♩ = 84)







Diskan.

- Kanomp Nouel da Vab Doue,
Ganet er c'hraou dre garante(z) ;
Da Jezuz ha d'e vamm santel,
Kanomp mil gwech Nouel, Nouel !
2. Perak d'an eur a hantez-nouz
'Son ar s'hleier e pep parroz ?
Perak e lavar pep beleg
Teir oferenn d'an Nedeleg ? (2 w).
3. Pelec'h oc'h c'houi, Patriarked,
Holl dud santel ha profeted,
Ez oac'h pell 'zo, oc'h hirvoudi,
D'eoc'h eo breman 'n em frealzi. (2 w).
4. Gloar da Zoue, tadou santel,
Kanit ganimp Nouel, Nouel !
Ar Mesiaz a zo ganet
Gant eur Werc'hez, Mari anvet. (2 w).
5. Mari a zo e gwirione(z)
Gwerc'hez ha Mamm da Vab Doue.
Mamm d'ar Salver voe prometet
D'hon tad Adam ha d'e bried. (2 w).
6. Eun ael eus an Nenv, en noz-se,
D'ar bastored a lavare :
'N'ho pet ket aon na spont. ebet,
Rak ganet eo Salver ar bed. (2 w).


7. E Betleem, en eur c'hraouig,
C'houi a gavo eur bugelig :
En-dro d'ezan eur vailhurenn,
Ha gant e vamm war he barlenn. » (2 w).
8. Neuze 'voe klevet an Aelez
O kana, war eun ton nevez,
Ar Gloria in excelsis,
Gwel 'get na ganer en iliz. (2 w).
9. Gant pebez stad er bastored,
P'o deus ar c'helou-mat klevet !
A lavar an eil d'egile :
« Deomp da welout Mab Doue. » (2 w).
10. Kichen ar c'hraou, ar bastored
A lavar kerkent daoulinet :
« Ni hoc'h ador, Salver ar bed,
Pegen eürus n'omp-ni ket ! (2 w).
11. Siouaz d'imp, o Mabig Jezuz,
Ni 'zo holl peorien d'ezan ;
Met a-ziwar hon paourentez,
D'eoc'h hon c'halon, hon c'harantez.. » (2 w).
12. Neuze ar bastored joäis,
Graet o gweladenn da Jezuz,
'N eur zistrei daved o loened
A gan : Doue ra vo meulet ! (2 w).
13. Kenavo d'eoc'h, Mabig Jezuz,
Ouzimp holl ken karantezus ;
Gras d'imp da vont gant ho pennoz,
Ganeoc'h, eun deiz, d'ho Paradoz. (2 w).

N° CXI. — O pebez burzud a welan.






eur bugel war ar plouz kous. kel




in e gieben e Vamm daou li. nez


Con all
(J=88)




O pe bez bur. aud a we. lan



da Vet. le. em pa ze. re. dan eur



bu. gel war ar plouz kous. kel




in e gieben e Vamm daou li. nez

Diskan



Kana ze. lez ho Kko. ri. a



ga. nes. je. aur al. le. lu. ia

2. E-tal ar Bugel, hon Salver,
'Man c'hoaz Joseb, e dad mager ;
Ha pastored diwar ar maez ;
Hag en oabl, o kana, aezez.

3. Ha bez ez eo a renk uhel,
Daoust d'e baourentez, ar bugel ?
Hen eo Jezuz, gwir Vab Doue,
Hon Salver, hon Mestr, hon Roue.

4. Doue ha den eo war-eun-dro,
Deut er bed d'ober eun tamm tro ;
Da vont d'e heul, deut d'hon gervel,
Hag evidomp deut da vervel.

5. Deut da baea 'vit ar pec'hed,
Da zidrona an droukspered,
Da rei d'imp peadra e-leiz,
Da vont d'ar Baradoz, eun deiz.


6. Gant ar c'hoant e vefemp holl sent,
Hoc'h eus diskouezet d'imp an hent ;
Diouz hon gwella ni a sento,
Ha d'an Nenvou, c'houi hon reno.

7. Ni 'heulio ervat ho lezenn,
Hag a zalc'ho start d'hon c'hredenn :
O veva evel kristenien
E vimp eürus da viken.


8. Kentoc'h mervel a-raok an oad,
Eget dilezel an hent mat !
Gras d'imp neuze, mar bevomp pell,
D'ho karout bemdez bepred gwell.

N. CXII. — Pa voe ganet Jezuz.

(J=88)




Pa voe ganet je. aur, hon Salver,



Ma. ri, e Vamm e vail. bu. ras,



e Betle. em, en eur c'braou dister,




war eun tamm plouz e as. tennas



2. War ar maeziou edo pastored,
War ar bale e-kreiz an noz,
Evit diwall gwelloc'h o denved ;
Dousik ha brao e oant war-gaoz.
3. A-berz Doue eun ael a ziskenn,
Hag a lavar d'ar bastored :
« Bezit dinec'h, stankit hoc'h anken,
Ma c'helou-me zo kaer meurbet.
4. Ar Mesiaz d'an dud prometet
Abaoe oar den pet mil vloaz,
E kêr David zo nevez-ganet,
Eno man war ar plouz, e noaz.
5. D'e di, eur c'hraouig bihan dister,
It, me ho ped da zaoulina ;
It, dre garantez ouz ho Salver,
D'e adori diouz ho kwella. »
6. Ker-kent, en oabl aelez a-vandenn,
A voe klevet o c'hantigou :
Nijal 'raent 'kreiz eur sklêrijenn
A bare a-us d'ar maeziou.
7. Kanomp hirie evel an aelez,
Meuleudi d'ar Mabig Jezuz,
Da c'hortoz kana c'hoaz a-nevez,
Ganto en o bro eürus.


N^o CXIII. — Diskennit eus an Nenvou.





- ar peuc'bwat an ! Sou - ar.
2. Diwanet zo eur rozenn war wri zienn Izai,
N'eus ket en hol liorzou eur vleunienn evelti ;
Evel eur flourdilizenn savet e-kreiz an drez,
Eus ar wezenn a bec'hed eo deut ar santelez.
 3. Ar Vamm he deus e c'hanet a zo anvet Mari,
Ar c'haera eus an aelez zo nebeut dirazi ;
Ar Spered -Santel en deus he choazet da bried,
Evit beza Rouanez e palez an Drinded.
 4. Pelec'h o kaout hon Roue hon bo-ni levez e
En eur palez alaouret pe 'n eur c'hastell nevez p
E Betleem, e klevan, e lle beza ganet...
En eur gêrig ken dister n'ez eus palez ebet !
 5. — « Selaouit, a lavare an ael d'ar bastored,
An tu d'e anavezout setu d'eoc'h diskleriet :
Ar bugel zo mailhuret en eur c'hraouig dister,
War eun tamm plouz astennet, hennez eo ho Salver
 6. O tont da welout Jezuz, tud yaouank a weler
O vale dre an hentou, gante o dilhad kaer :
Mestr an holl binvidigez ganet er baourentez,
A roy d'ezo eur gentel enep d'al lorc'hentez.
 7. C'houi, hudur-lous ho kalon, na zeuit ket aman.
Rak n'hall ket ho taoulagad divez sellout outan !
Na savit ket ho sellou war e Vamm, ar Werc'hez,
Tec'hit pell diouz al lec'h-man da ruzia gant ar vez.
 8. Deut c'houi, tud fur ha santel da domma ho krouer,
Krena ra gant an anoued ar bugelig tener ;
E lojit en ho kalon, klet-mat e vo eno,
Gwell eget en eur palez, ganeoc'h en em blijo.
 9. Pe gentoc'h, tommit ho Mab, Mari, ouz ho kalon,
Eno eman e balez, e aoter hag e dron :
Ne gavo nemet eno an deneredigez
He deus karantez eur vamm e kalon eur Werc'hes.
 10. Ar galon-se ken tener a ranno gant glac'har
Pa ranko ho Mab Jezuz mervel war ar C'halvar :
E holl wad dre bemp gouli a skuilh eo evidomp :
C'houi ivez, Mamm druezus, bezit sonj ac'hanomp.

N. CXIV. — An noz tenval.








2. Taolet er-maez a varadoz an Eden,
Hon tadou koz abaoe kantvejou
A hirvoude, beuzet 'n eur mor a anken :
Ne gredent ken sellout ouz an Nenvou.
Fals doueou pe gentoc'h droukspererejou
O dalc'he stag gant chadennoù pounner ;
Paganed paour, selaouit holl ar c'helou :
Nouel ! Nouel ! ganet eo ho Salver ! (2w)

3. Ar rouaned warlerc'h ar paour hep truez
A zo galvet en e graou bep eil tro :
D'hon c'hentelia e tispigno e vuhez
Ha d'hon prena ouz ar Groaz e varvo.
D'ezan e Dad a ginnig e holl vadou,
E vrec'h 'zo krenv, e galon 'zo tener :
'vit e veuli unanimp holl hon mouezioù :
Nouel ! Nouel ! ganet eo hon Salver ! (2w)

4. Ouspenn e wad hag e gelennadurez,
D'imp ar Bugel da vamm a roy e vamm,
An hini 'vo dre ar bed-holl Rouanez
Hag a zo bet a bep amzer dinamm.
Bet hon eus c'hoaz d'hon diwall, evel patron,
Pried Mari, Joseb e dad mager ;
O, pebez joa a dle birvi 'n hon c'halon :
Nouel ! Nouel ! ganet eo hon Salver ! (2w)

N. CXV. — Pe trouz war an douar ?



2. Kanit ive ganimp, kanit, pobl an douar
Deut omp da larout d'eoc'h eun neventi hep par :
Eur mabig benniget, Roue Jerusalem,
A zo ganet 'vidoc'h e kerig Betleem.

3. Eman deut an termen eus ar profesioù
O noz mil gwech eurus a dorr hon liammou !
Kanit gloar hag enor da Jezuz ha Mari,
Doue zo 'n em c'hraet Den ; ganet eo ar Mesi !

4. D'an taol a hanter-noz, fenez ez eo ganet,
En eur c'hraouig disto, en eur stad trist meurbed ;
Eman-eno etre eur c'hole eun azen :
Vit tomma e vemprou n'en deus met o alan.

5. Eno c'houi a welo Krouer ha Mestr ar bed
War eun dornadig plouz, 'n eul laouer astennet,
E teurvez beza paour, 'vit ho pinvidikat
Ha pellat ho kalon diouz ar bed evit mat.

6. E liammou santel, e gavel benniget
A gomzo splannoc'h d'eoc'h evit an doktored ;
Gante c'houi a gavo kalz gwelloc'h kentelioù
'Vit ar re a gaver 'barz ar c'haeran leorioù.

7. Tud staget ouz ar bed hag e blijadurioù,
Tostait ouz Jezuz ha sellit e zaerou ;
Troit kein da viken d'ar joaioù safarus,
O welout ho Toue 'n eur stad ken truezus.

8. Kraouig Kêr Betleem 'vo eun tammal 'vidoc'h
Mar ne fell ket d'ac'h ren eur vuhez santeloc'h ;
Ar c'hrouadur dister-man eun deiz a vo gwelet
Leun a c'hloar eus an menv o tont da varn ar bed.

9. Pegen eurus oc'h c'houi, o Gwerc'hez venniget,
C'houi zo Mamm d'ho Krouer hep kolla ho kwerc'hded
Goulennit m'hon bezo, 'vit plijout da Zoue,
Gant lod eus ho klanded, lod eus ho karante(z).

10. Ha c'houi Jozeb, den just ha fidel d'ho tever,
Choazet oc'h bet da ren da vaga hon Salver,
Goulennit 'vidomp ar c'hras da virout bepred
E-kreiz hon c'halonou Jezuz, Salver ar bed.

11. O Jezuz, ma Salver, Krouadur benniget,
Bezit meulet noz-deiz, e pevar c'horn ar bed !
Reit d'imp 'raok ho huitaat grason gant largente(z),
Ha renit hon c'halon da viken, o Doue !

N° CXVI. — Mabig Jezuz (Nedelek) (War don XIX)

TON : XIX

Diskan

4

Ni hoc'h ador, Mabig Jezuz,
Mabig dous ha karantezus,
Doue meurbet madelezes.

Mabig Jezuz, me oar ervad
Perak e ouel ho taoulagad :
Hon fec'hed 'ra d'eoc'h kalo-
[nad.

1

5

Mabig Jezuz, e-kreiz an noz
C'houi a zilez ar Baradoz
'Vit dont en hon touez henez.

Mabig Jezuz, evit bepred,
O ! me a dro kein d'ar pec'hed,
Ma c'halon d'eoc'h zo gounezet.

2

6

Mabig Jezuz, Doue-bugel.
Ra vezo klouar an Avel,
En noz-man en dro d'ho kavel.

Mabig Jezuz, war ma daoulin
Dirazoc'h betek ar mintin,
D'ho pedi henez e chomin

3

7

Mabig Jezuz, dre an menvou,
Aelez a gan d'eoc'h kantigou..
Perak glevan me ho klemmou?

Mabig Jezuz, hed ma buhez,
Me a veulo ho madelez :
Ra varvin en ho karantez !

N° CXVII. — Evit gouel ar Rouaned.

TON : XXV

(Hervez eun himn koz : O, sola
magnarum urbium.)

1. Betleem, ar gêr vihana,
'Zo deut da veza ar vrasa,
Peogwir enni eo bet ganet
Ar Mesiaz, Salver ar bed.
2. E bolz an nenv, eur steredenn,
Trec'h kalz d'an heol he sklerijenn,
A zisklerias d'an tri Roue
E oa ganet gwir Vab Doue.
3. Raktal int da guitaat o bro,
Ha da ober hent war-eun-dro ;
O steredenn kaer a luc'he
D'o blenia betek ar Jude.
4. Ar Mesiaz p'o deus kavet,
Dirazan o zri zo stouet ;
N'oant bet biskoaz ken eürus
'vel e kraou ar Mabig Jezus.
5. 'vit diskouez o anaoudegez,
P'o deus kalz a binvidigez,
E roont aour, ezans ha mir.
Pebez karantez ! N'eo ket gwir ?
6. An aour a ziskouez eo Roue,
Hag an ezans ez eo Doue ;
Dre ar mir e anavezomp
Eo, ivez, eun den evelomp.
7. Deomp, evel an tri Roue,
Da welout Jezuz, Mab Doue,
Ha pe 'z omp pinvidik pe baour,
Profomp d'ezan mir, ezans, aour.
8. Roomp d'ezan gant largentez
Aour hon c'halon, hon c'harantez,
Ezans ar gwir bedenn gristen,
Ha goude, mir ar binijenn.
9. Meuleudi d'eoc'h Salver ar bed,
Ho kloar, hirie, dre-holl a sked ;
Meuleudi da Zoue an Tad,
D'ar Spered-Santel, evit mat.

J. Sk...

N° CXVIII. — Gloar da Jezuz.

(♩=84)

Gloar da je-zuz ! a. greiz ka-lon me ga no :

Gloar da je-zuz ! D'eu-leu. di d'e a. no !

a. no ka-ret, de-ga-ser eus an D'eu-vou,

e-vel ar mel ho ka-van dous d'am ge. nou

Gloar da je-zuz ! Gloar da je-zuz !

2. Gloar da Jezuz ! Jezuz hoc'h ano Doue
War ma ene eo glizenn ar beure ;
Bokedig paour, neuze me oar digeri,
Arc'hantet holl ha laouen 'vel al lili :
Gloar da Jezuz ! (2w)
3. Gloar da Jezuz ! War ma c'halon en anken,
Ano Jezuz, ar wella louzaouenn ;
Sklerijenn gaer hag eur peuc'h leun a zouster
'Zeu em c'halon gant ano dous ma Salver :
Gloar da Jezuz ! (2w)
4. Gloar da Jezuz ! Jezuz, hoc'h ano santel,
'Zo nerzusoc'h 'get mil den a vrezel :
War an douar, en Nenv, en ifern douna,
Ano Jezuz a ra d'an holl daoulina :
Gloar da Jezuz ! (2w)
5. Gloar da Jezuz ! Ya, gloar d'ezan da viken,
Er Baradoz n'eus kaeroc'h kanaouenn ;
An arc'haelez, ar sent holl, ar sentezed,
A lavar holl hep paouez, o fenn stouet :
Gloar da Jezuz ! (2w)

6. Gloar da Jezuz ! ha gloar ivez da Vari ;
Anoioù sakr, d'eoc'h ho taou meuleudi !
Hed ma buhez hag e-pad an holl-amzer,
'Fell d'in diskouez d'eoc'h eur garantez tener :
Gloar d'hon Salver ! Gloar d'e Vamm ger !

N° CXIX. — Ar « Jezuz dulcis memoria ».

(♩=60)

je-zuz, ken dous d'ar son-je-nou, holl

domander holl nerz ar ga-lon ; dou-

soc'h ez oc'h e-viz ar mel d'an

neb ho kaer, d'an neb ho kwel.



2. Netra ken flour ne vez kanet,
Netra ken kaer ne vez sonjet,
Netra ken brao ne vez klevet
Evel hoc'h Ano binniget.
3. Jezuz, holl fizians ar pec'her,
P'oc'h bet ken prim d'e zegemer,
Mil gwech eürus neb hoc'h anav,
Ho klask a bep tu, hag ho kav !
4. N'eus teod a c'hallfe diskleria,
Na pluenn a c'hallfe skriva,
Ret eo tanva 'vit lavarout
Pegent c'houek oc'h-c'houi da garout !
5. Bemnoz, serret ma daoulagad,
Ano Jezuz, ha beure mat,
Eus ma c'halon deut em genou,
Ha 'pad an deiz em oberou !

6. Bezit, Jezuz, hon levez,
Da c'hortoz joaiou ho palez :
En ho kloar, neuze, dianken,
Ni ho meulo da virviken. *Amen.*



PASION HON SALVER

N^o CXX. — Jezuz e liorz an Olived.

(♩ = 80)



Diskan



Jezuz gwerzet gant Judas.

Erru eo Judas, an treitour,
Gant eur vandenn soudarded :
Ha Jezuz, 'vel eun torfedour,
A chadennoù zo karget.

Jezuz nac'het gant Per.

Dre deir gwech Per en deus nac'het,
'Kreiz ar porz, e Vestr, Doue,
Ken en deus bet teir gwech klevet
Kan ar c'hog, diouz ar beure.

Jezuz dirak Kaifaz.

Kaifaz hag e Yuzevien,
Ha falstetou, tud mezus,
Holl war bouez heulia al lezenn;
'Fell d'ezo laza Jezuz.

Jezuz dirak Pilad.

Pilad ne c'houll ket, da genta,
Sina eur setans ken fall ;
N'haller kondaoni, emezan
Eun den a zo didamall.

Jezuz dirak Herodez.

Herodez hag e vignoned
A ra goap ouz hon Salver :
Jezuz ne respont ger ebet
D'ar roue lous ha muntrer.

Jezuz dirak ar bobl.

An holl bobl gounezet breman
Gant arc'hant ha komzou kaer,
A sav e vouez enep d'ezan,
War eun dro gant prinsed kêr.

Jezuz ha Barabaz,

Etre Jezuz ha Barabaz
Ar Yuzevien, en eun taol,
A ziskleri eo graet o choaz
Barabaz fell d'ezo, holl.

Jezuz skourjezet.

D'o c'hounnar evit ma torro
Pilad a c'haly soudarded,
Ha, stag ouz ar peul-maen, ganto
Jezuz a zo skourjezet.

Jezuz kurunet a spern.

War e benn dre fent 'lakaont
Barrou spern da gurunenn,
Ha dirazan e taoulinont
Da c'hoarzin ouz e anken.

Jezuz kondaonet.

Pilad, er stad-se, a ziskouez
Jezuz d'ar bobl kounnaret ;
Houman da hopal a-eur-vouez :
Ouz ar groaz ra vo staget !

Jezuz o tougen e Groaz.

Jezuz, e Groaz war e ziouskoaz,
A gerz 'trezek ar C'halvar,
Dinerz eo, ha dindan e Groaz
E kouez teir gwech d'an douar.

Jezuz war an hent.

Veronig, ar gwragez santel,
Ha Simon, war hent ar Groaz,
E-pad ma tec'h an ebestel,
'Zo gant Jezuz en e c'hloaz.

Jezuz ouz ar Groaz.

Ouz ar Groaz neuze e stager,
E izili gant tachou :
Eman breman etre daou laer
Brudet dre o zorfejou.

Jezuz en e eur diweza.

Seiz gwech, Jezuz diwar e Groaz,
Kent mervel en deus komzet :
Ganimp eman e galon c'hoaz,
Daoust d'e boaniou ken kalet.

Jezuz o vervel.

Da deir eur ne chom ken eno,
Nemet eur c'horf dizec'het :
Salver ar bed a zo maro,
Gant e vugale skoet.

Goude an tremenvan.


An heol 'n em guz, ar bed a gren,
Jeruzalem zo spontet ;
Ha d'e Vamm ger, war he barlenn,
Jezuz a zo diskennet.

Pedenn da Vari.


O, Mari, O Mamm a druez,
Gant ho sikour, birvidik,
Ni zalc'ho sonj hed hon buhez
Eus maro ho Mab unik.

N° CXXI. — Gouelit ma daoulagad.


(♩ = 124)



Goue. lit ma daoulagad ; setu maro ge.



zuz ma ro evisomp boll, pec' be.



rien gwaleñ - rus ma ro Jezuz vi



Somp war lein Menez. Kal - var,



Pe ga - lon na rann - fe gant keuz ba




gant glae' bar gant keuz ba gant glae' bar

2. Tosta, pec'her, ha deus, sell mat ouz da labour ;
Pep pec'hed graet ganit zo aman torfetour.
3. Deus da gichen ar Groaz ha gouel d'az pec'hejou ;
Sonj c'hoaz ez int kiriek da grizder e boaniou.
4. Mar deo ruziet e gorf gant ar gwad o redek,
Te a dle e walc'hi gant da zaerou dourek.
5. N'eo ken met eur gouli eus traon betek e benn ;
Kurunet eo a spern. Na pebez Kurunenn !
6. E gorf zo dispennet, e izili, brevet ;
E dreid hag e zaouarn gant tachou hir treuzet.
7. Gant ar poultr hag ar gwad e zremm zo dislivet ;
Gant eur goaf lemmet-mat, e gostez digoret.
8. Pec'her ha pec'herez, c'houi gantan a sko c'hoaz ;
Ho kalon aheurtet, 'vitan, na-pebez kroaz !
9. Koulskoude d'ho kervel, e benn a zo stouet,
E galon zo digor, e zivrec'h astennet.
10. O ! breman, ma Jezuz, eo rannet hon c'halon,
Hag ouzoc'h evit mat e c'houlennomp pardon.
11. Pardon, O, ma Doue, eus hon holl bec'hejou ;
Kentoc'h mervel eget nevezi ho poaniou.

N^o CXXII. — Meulomp hirie a vouez uhel.

(♩ = 126) *Diskan ha paus*



Meulomp hirie a vouez u.

bel Jezuz-Krist hag e Groaz santel

Meulomp hirie a vouez u. bel Jez.

Jezuz-Krist hag e Groaz santel.

= pe ton gallek Vive Jésus, vive sa croix.

1. Kalet-kaer eo kalon an den
A chom hirie sklaset pe yen,
A chom sklaset pa wel Jezuz
En eun doare ken truezus.
2. Betek ar maro e sentas,
Betek ar maro war ar Groaz ;
Eun tamm plouz, e wele kenta
Ha koad kalet, an diweza.
3. Mestr ar bed a zoug war e benn
Spern dreinek evit Kurunenn
En e dreid hag en e zaouarn
'Z eus tachou hir graet gant houarn.
4. E galon baour a verv ennan
Evel ar c'hoar dirak an tan,
C'houi zo gwasket, Salver Doue,
Evel ma wasker ar c'houe(z) !
5. Ho nerz a red evel an dour,
Ha n'hoc'h eus digant den sikour ;
Ouz ho sec'hed n'hoc'h eus netra
Nemet gwin trenket da eva !
6. Eul laer a-zehou, eul laer a-gleiz,
Dre-holl enebourien direiz,
Hag ar pezh a zo gwasoc'h c'hoaz,
Ho Mamm dener e-tal ar Groaz !
7. Evet eo ar c'halir c'houero
A oa warnan blaz ar maro !..
Jezuz breman a bleg e benn
'vit mervel, ha prena an den.
8. Eur c'hleze lemm a zo aet do(u)n
'n e gostez, betek e galon,
Evit lakaat da zevera
Eur berad gwad, an diweza !
9. O, ma Jezuz, a-raok kuitaat,
D'ho treid me a fell d'in pokat,
Starda goude ma muzellou,
Ouz ar c'hoad sakr, ouz an tachou.
10. Hirie, arc'hoaz, 'hed ma buhez,
E vevin en ho karantez ;
Mar 'm eus kalon, penaoz c'hallfen
Hep ho karout, Jezuz, tremen !

N^o CXXIII. — Enor d'ar Groaz, sin ar C'hristen.

(♩ = 96) *Dishan*

È - nor d'ar Groaz, sin' ar c'hristen.

ten. ha da Jezuz-Krist hon gwir Rou.

e ! Heuliomp ar Groaz e pep-ta-

chenn e - nep d'an diaoul, e. va Dou.

e ! Gwe-eball ar ba-ga-ned paour a

de - c'he pa-ga-venn eur groaz bennaken

he sav di-ra-zo war o benn : ou.

ti ar bouneo hepken a dos-tae gam

henn, pa ve-re rei di-wa. da eur

mun-trer pe eul l'ar.

2. Abaoe m'eo bet Jezuz, e gorf staget outi,
Abaoe m'eo bet ruziet gant gwad ar pemp gouli,
Kals splannoc'h eget an heol, e par'-us d'ar bed-holl
Da c'hortoz para spontus er varn dirak an holl.
3. Ar re a gar hon Salver a gar ivez e Groaz,
Met gant an diaoul hag e re n'eo bet karet biskoaz :
Dal m'o lezer en o roll ne weler a bep tu
Nemet kroaziou bruzunet pe daolet el ludu.
4. Jezuz-Krist en deus amzer, ne ra van na seblant,
Met e vrec'h a vo pounner da skei p'en devo c'hoant ;
Hag eun deiz e tibabo e re diouz re Satan,
Da rei d'ezo eürusted ha d'ar re-man an tan.
5. E-keit ma vo enoret gant an holl Kroaz Doue,
E peuc'h c'hallot labourat, sevel ho pugale ;
Ma kouez, e vrallo ar vro hag e kreno pep ti ;
Netra ne bad er bed-man ma ne vez harp outi.
6. Ar Groaz war dour hoc'h iliz pa vezo lakaet,
'Ziskouezo eo ho parroz da Jezuz gounezet ;
Ha pa vo war an hentou e c'hallot 'n eur dremen,
Lavarout war ho taoulin da Jezuz ho pedenn.
7. Stagit ar Groaz en ho ti, ha 'kreiz hoc'h ankeniou,
E-lec'h pec'hi, damanti, sonjit en holl boaniou
A c'houzanvas ho Salver pa voe e-pign outi,
E-pad teir eur hep sevel e vouez enep hini.
8. Grit sin ar Groaz war ho tal da eeuna ho spered,
War ho kenou d'e brenna ouz ar gomz difennet,
War ho kalon d'he zomma gant ar gwir garantez,
War ho tiouskoaz d'o c'hrenvaat dindan bec'h ar vuhez.
9. Na grogit ket 'n eur benveg, n'azezit ket ouz taol,
Hep beza graet sin ar Groaz gant feiz dirak an holl ;
Bemnoz 'n eur vont da gousket, 'n eur dihun, da veure,
Saludit Jezuz ha grit sin ar Groaz adarre.
10. Ma enorit Kroaz Jezuz 'n ho puhez hed-ha-hed,
Ho pezh, goude ho maro, hep kroaz ne chomo ket ;
Neuze bep sul dirazi ho tud a zaulino,
Ha Jezuz d'ar Baradoz hepdale ho tougo.

N. CXXIV. — Kenteliou ar Groaz.

(♩ = 132)

Di - war lein an tou-riou ar Groaz
la - var dalc'hmañ : kris - te - nien d'an Neñvou
sa - viñ ho taou - la - gad. Bepred e-lec'h ma
vo di - ra-zan Kroaz Je-zuz, eur c'hris.
ten a ga - vo ken-te-liou tal - vou - dus.

Con all (♩ = 138)

Di - war lein an tou-riou ar Groaz la -
var dalc'hmañ : kris - te - nien d'an Neñvou sa -
viñ ho taou - la - gad. Bepred e-lec'h ma
vo di - ra-zan Kroaz Je-zuz, eur c'hris.
ten a ga - vo ken-te-liou tal - vou - dus.

2

Ar Groaz war an Hentou
Lavar d'an tremener :
Gwir hent bro-an Nenvou
Eo hent Kroaz hon Salver.

3

Dirak holl dud an Ti
Ar Groaz ouz ar vogel
A zesk da bep hini
Ober mat e zevel.

4

Deski ra d'ar Bugel
Beza bepred sentus ;
Senti betek mervel
Setu buhez Jezuz.

5

D'an Tadou ha Mammou
E lavar hon Salver :
« Beilhit war eneo
A 'm eus prenet ken ker ! »

6

Kroaz an Ti d'ar c'hlanvour
Zo ivez talvoudus

Enni e kav sikour
Da veza gouzanvus.

7

Ar Groaz war ar Beziou
He deus eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har

8

Ar Groaz pa vez savet
E-kichennek an Aod
A ro fiziañs bepred
D'ar paourkaez martolod.

9

E fin eur Mision
Pa vez savet eur Groaz,
D'an holl dre ar c'hanton
Kentel gaer e roy c'hoaz.

10

Hi lavaro bepred
Madelezeou Doue
D'ar re 'deus he savet,
Koulz ha d'o bugale.

T. B

N. CXXV. — Sul fask. Alleluia !

TON : O Filii et Filiae.

1

Klevit, holl vugale Doue :
Jezuz, ho mestr hag ho Roue,
A varv da vev zo deuit hirle
Alleluia !

2

Madalen, ganti diou all c'hoaz.
Ouz bez Jezuz pa dostaas,
Digor ha goull e gavas.
Alleluia !

3

Erruet ganto an doare.
Daou abostol diouz ar beure
Etrezek ar bez a rede.
Alleluia !

4

Met an diskibl muia-karet,
Primoc'h 'get Per en deus re-
P'o deus gwelet, o deus kredet
Alleluia !

5
Eun ael gwenn eno azezet,
A respont d'ar gwragez nec'het,
Ez eo Jezuz da vev deuet.
Alleluia !

6
Er sal, dek eus an ebestel
Eri e sav dirazo E wel :
Peuc'h, emezan, d'eoc'h, tud
[santel !]
Alleluia !

7
An nevezinti pa glevas,
Eun abostol anvet Tomaz
Diskredik daoust da se 'chomas.
Alleluia !

8
« Sellit, Tomaz, hep digarez
Ma zreid, ma daouarn, ma
[c'hostez]
Hag anzavit ar Wirionez. »
Alleluia !

9
Pa wel Tomaz kement goul
'Zispenn d'ezan e izili :
« Ma Aotrou, emezan, -oc'h
[c'houi. »
Alleluia !

10
Eürus ar re o deus kredet.
Hep da welout ezomm ebet,
An Nenvou d'ezo vo roet.
Alleluia !

11
Er gouel-man kaer dreist pep
[hini]
Ra vezo dre-holl meuleudi
D'eun Doue ken mat ouzimp-ni
Alleluia !

12
Ya, O Jezuz, 'vel ma tleomp
'Vit ho karantez evidomp
Mil trugarez d'eoc'h a ganomp.
Alleluia !

GOUEL AN ASANSION

N° CXXVI. — Ar salutis humanae sator.

(♩=58)

je - zuz sal - ver an e - ne - ou -
holl le - ve - nez ar c'ha - lo -
nou , krou - er ar bed hoc'h eus bre -

ne , ske - ri - jenn gwer bo
mi . gno - ned

2. Penaos hoc'h eus c'houi teurvezet
Samma ar bec'h eus hon pec'hed,
Ha mont d'ar maro didruez
Evit rei d'imp ar wir vuhez ?

3. Goude terri dor al limbou
Ha d'ar sent koz o chadennou,
Trec'h war an holl, a c'hloar karget,
'Kichen ho Tad oc'h azezet !

4. Jezuz roit d'imp ho pardon ;
A c'hlae'har leugnit hon c'ha'on,
Grit d'imp beza nerzuz ha krenv
Da gerzout war ho lerc'h d'an Nenv.

5. Pa 'z oc'h an kent hag ar Pastor,
Bezit d'hon c'halon he zenzor,
Hon douter e-kreiz an daerou,
Ar priz eus hon holl drubuilhou.

GOUEL HANTER-EOST

N° CXXVII. — Setu mamm Doue.

(♩=60)

Se - tu Mamm Doue , ske dus ha splann 'vel al
loar gant tarz ar bou - re a se - vel eus an dou -

ar : Ei - gñit, Mamn Jezuz bo mañ zo ouz bo kor.

kor ae-lez e - ti - rus di - gorit ar ba - ra -

Diskan

doz. Gloar d'eoc'h o Ma - ri gwer.

c'haez ba mamm da je - zuz Gloar

ba meuleudi 'pad an amzer peurbadus.

2

Jezuz a ziskenn
Diwar e dron alaouret
Gant ar gurunenn
Dleet d'e Vamm vinniget :
« Ma Mamm, emezan.
Deuit em Rouantelez,
Ha ganin breman
Bezit en Nenv Rouanez. »

3

Kerkent en Nenvou
E trid an holl gant ar joa :
War o zelennou
An aelez zeu da gana :
« Gloar d'eoc'h, O Mari,
Gwerchez ha Mamm da Jezuz,
Gloar ha meuleudi,
'Pad an amzer peurbadus. »

4

Kanomp, ni, ivez,
En draonienn-man a c'hlae'har,
Ha gant an aelez,
Lavaromp war an douar :
« Gloar d'eoc'h, O Mari,
Gwerchez ha Mamm da Jezuz,
Gloar ha meuleudi
'Pad an amzer peurbadus. »

5

Mari, Mamm dener,
E-kichen ho Mab Jezuz,
'N eur mor a splannder
C'houi zo breman eürus :
Ni, ho pugale,
Siouaz ! a zo divroet :
Ra vimp hepdale
En Nenv ganeoc'h unanet !

(Levr bugale Mari).

N. CXXVIII. — Gouel an Holl Sent.

(♩ = 56)

6+9

Dou gomp kor sel - lou dreist an dou.

ar e - tre - zek ar sent hon ba -

dou bre mañ ku - ru - nez ba leun a

c'hloar, e - mainz gant Doue en Nleñ -

von, e - mainz gant Doue en Nleñ - von.

2. N'eus ken evito tristidigez,
Klenved ebet na trubuilhou :
Dastum a-reont-el levezet,
Ar frouez-hadet 'kreiz an daerou. (2w)
3. Bet o deus 'veldomp en o buhez,
Poan kaer o senti, o tevel,
Dinerz e oant, ha 'veldomp, ivez,
A bep tu e kavent brezel. (2w)
4. Kalz en o zouez 'oa izel o stad,
Darn labourerien, netra ken,
Savet abred, kousket diwezat,
N'eus forz d'an amzer domm pe yen. (2w)
5. O Spered 'veze kement troet
Gant o fedennou, gant Doue,
Ma tec'hent diouz ar bed milliget,
Gant aon da walla o ene. (2w)




6. Darn, pell er pec'hed, 'deus bet bevet, —
Na pebez gwallenn d'eur c'hristen ! —
Betek an deiz m'int bet 'n em walc'het.
E feunteun sakr ar binijenn. (2w)

7. O mouez tregernus hon eus klevet,
E riskl pa vezemp d'eur em goll :
"Fizians e Doue dalc'hit bepred,
Berr eo ar stourm, kaer an digoll. (2w)


8. Holl Sent, d'ho heul 'fell d'imp c'hoaz bale,
'veldoc'h dre hent ar gwir furnez :
Sikourit neuze ho pugale,
Pa n'int nemet sempladurez. (2w)

N° CXXIX. — En an' Doue hon sikouret !



(♩=48)



(♩=48)



Diskan (♩=46)



2

A bep tu d'imp n'eus nemet
[tan]
Tan war c'horre ha tan dindan:
C'houi hon eus-ni kement ka-
[ret]
En an' Doue hon sikouret !

3

Sonjit en ho tad, en ho mamm
Er Purgator e-kreiz ar flamm :
Ma mab, ma merc'h, a l' se
[laouet]
En an' Doue hon sikouret !

4

Ni n'hallomp ket dre bedennou
Distan na berraat hon poaniou ;

Doue ouzimp ne selaou ket,
En an' Doue hon sikouret !

5

'Vit paea hon dle da Zoue,
Evidomp-ni pedit bemde(z)
Grit aluzen mar hon c'haret,
En an' Doue hon sikouret !

6

Kalz a c'hallit dre ho poaniou,
Ho yuniou, hag oferennou :
Ken didruez na vezit ket,
En an' Doue hon sikouret !




7

Ha pa vimp-ni e gloar Doue,
Evidoc'h ni bedo ive(z) :
Ouzimp eta holl selaouet,
En an' Doue hon sikouret !

GOUEL AN ILIZOU

N° CXXX. — Iliz ma Farroz.

(♩=54)



2. Ma c'halon a zeu da domma,
Ha ma daoulagad da ouela,
P'ho kwelan, iliz vinniget
Rak ennoc'h oun bet badezet.
3. Salud d'an tour 'zo war e benn
Kroaz hon Salver, sin ar c'hristen ;
'zo 'n e greiz o seni kleier,
War bep ton hag e pep amzer.
4. D'in-me, devez ma badeziant,
Kleier sakret, c'houi sone drant ;
Ha pa zeuy devez ma maro,
C'houi d'in truezus a sono.
5. En amzer goz, ma c'hendadou
A leze ti ha labouriou,
Bep sul, bep gouel, evit diskuiz
Gant Jezuz aman en iliz.
6. Nag a wech ma mamm daoulinet,
En iliz-man he deus pedet,
Pedet evit he bugale,
Skuilhet daerou war ar pave(z).
7. Aman ez oun bet divec'hiet
Gant ar beleg diouz ar pec'hed ;
Ouz an daol santel pebez joa !
'vidoun e deiz ma fask kenta.
8. Gwelouf a ran tron ar Werc'hez.
Mamm hon ene, hon Rouanez ;
O, Mari c'houi oar, a-viskoaz,
'm eus bet 'vidoc'h Karantez vras.
9. Me wel, ivez, skeudenn ar sent,
A ro d'imp harp a-hed an hent ;
En o zouez me wel hon Patron :
N'ankounain het e bardon !
10. N'em eus ket kavet e-lec'h all,
Nag en Arvor, nag e Bro-C'hall,
D'am daoulagad ken dudius,
D'am c'halon ken karantezus !
11. Chom a rin betek ma maro,
Tost d'am iliz e-kreiz ma Bro :
Me fell d'in beza douaret,
Gant ma zud-koz en hon bered !

12. Deiz ar Varn, gant Doue galvet,
E savimp eus hon bez sklaset,
Da vont eus iliz ar barroz
'Trezeq iliz ar Baradoz.

N° CXXXI. — Kantig breuriez ar feiz.

Ton : *Kelven.*

1. Breudeur, ni glev ho klemnou eus an tu all d'ar mor ;
D'ho mouez ha d'hoc'h ezommou hon c'halon 'zo digor :
Ni a roio aluzen evit sikour ho pro,
Ni a savo beleien, ha d'eoc'h ni o c'haso.
2. C'houi hag a zo kristenien, ha na glevit-hu ket
Eur vouez 'zo leun a anken, e pevar c'horn ar bed ?
Selaouit holl hon pedenn, hon c'hlemmou truezus,
Selaouit petra c'houlenn ho predeur gwalleurus.
3. Kristenien a Vreiz-Izel, ho pet truez ouzimp :
An eürusted eternal, an Nenvou a fell d'imp,
Rak ni 'zo war an douar tud paour hag emzivad,
N' anavezomp, c'houi hen goar, na Jezuz nag e Dad.
4. Gwechall pell diouz sklerijenn, pell diouz lezenn Doue,
Er memes tenvalijenn ho pro a oa ive(z) ;
Mil bennoz d'an ebestel 'deus ho kelennet-c'houi,
Grit kemend-all, tud santel, breman evidomp-ni.
5. C'houi breman'zo eürus p'hoc'h eus ar sklerijenn
Hag eur Feiz ken prizius ; ho pro a zo kristen.
Hag ar sklerijenn gaer-se n'hallfe biken koueza,
Mar deut dre ar garantez en ho touez d'he maga.
6. Ma 'n deus Jezuz lavaret na ankounac'ho ket
Eur werennad dour roet d'ho preur en e sec'hed,
Petra 'dalvo, kristenien, ar gwenneq binniget
'vo gantan da virviken eneoù kalz prenet.
9. Ra zeuy Doue da nerza kement misioner
A zeuio betek aman, en ano hon Salver ;
D'eoc'h ivez, bennoz Doue, kristenien, hon rekour,
'vit rei gant gwir volontez ho kwenneq d'hon sikour.
8. Deut eta beleg yaouank, kuitait mamm ha tad,
Daoust d'an daerou puilh ha stank a skuilh ho taoulagad ;
Kuitait ho Preiz-Izel... Pegoulz vlot gwelet
O prezeg an Aviel e bro ar baganed ?

9. Nevez deut ha yaouank-tre, kalz aman 'rank mervel ;
Met gounit 'ra o ene ar vuhez eternal.
Roudou o zreid binniget 'chom merket en hon bro,
Ra zeuio c'hoaz Bretoned, kalz c'hoaz henvel outo.
10. Tud feal, a wir galon, o welout o foaniou,
Skoazellit hon mision, savit d'imp ilizou ;
Degasit skolioù kristen d'imp ha d'hon bugale,
Ni 'bedo evit goulenn warnoc'h bennoz Doue.
11. Ha c'houi misionerien ganet e Breiz-Izel,
Gant ar maro diskaret e-kreiz ar broioù pell,
Eus ar Baradoz pedit 'vit Breuriez ar Feiz,
Goulennit ma chomo start ar feiz kristen e Breiz.

N° CXXXII. — Kantig evit an Eurejou.

O de-vez leun a joa 'vi doc'h, tud
yaouank kris-tan, 'zo sent aman bi-rie d'en em rei
e-vi bi-ken ; da c'houlenn digant Doue bag e
I-liz san-tel war ho promesse ou laka e-vi
mae eur si-ell

1. Dre nerz ar Sakramant ez oc'h breman priedou ;
Netra met ar maro na dorro ho liammou,
Rak, hervez al lezenn, chadenn ar briedelez
Eur chaden dous ha krenv, a bad keit hag ar vuhez.

2. Ar beleg, ho kerent, hag ho mignoned ive
Test eus ho ker roet, evidoc'h a bed Doue,
'Vidoc'h e c'houlennont bemnoz iec'hed ha furnez,
'Vit ma c'hallfet bepred ren ervat ho tiegez.
3. Eus lein ar Baradoz, hoc'h holl gerent tremenet
Ema o sonj ennoc'h da zevez kaer hoc'h eured ;
Klevit mouez ho Tadou a lavar a-berz Doue
Penôz 'tleet beva 'vit kaout ar wir lezene(z).
4. Eürus ar re a vir doujans Doue 'n o c'halon
Hag a heuilh e lezenn gant eur garantez wirion ;
Eürus ar re 'laka o holl fizians en Neuvou
Rak gant Doue hepken e kaver ar gwir vadou.
5. Eürus ar priedou a labour e peb amzer
Da virout etrezo lealded, peuc'h ha douster ;
Etre ar priedou boket ar wir garantez
Na dle biken goenvi met kaerat a ze(iz) da ze(iz).
6. Jezuz, Mari, Joseb e tiegez Nazareth,
Roet hoc'h eus d'an dud ar c'haera skouer zo gwelet
Deskit d'an holl beva, evel doc'h gant santelezh
Gant peuc'h hag eürusted, keit ma pado o buhez.
8. Evit an daou bried, en Iliz-man daoulinet
Ni ho ped, ma Doue, gant fizians ha gant aked ;
Ni ho ped da rei d'e buhez hir, kalz a c'hrasou,
Eürusted er bed-man hag eürusted en Nenvou.

N° CXXXIII. — Kantig ar « Gonfirmasion »

TON : LI

1. Deiz ma 'C'honfirmasion, deiz a joa d'am c'halon,
Ar Spered-Santel a zeu gant e seiz donezon
Eus an Nenvou da grenvaat d'in ma buhez kristen ;
O deiz mil gwech eürus n'az ankouain biken.
2. A bep seurt fallagriez ar bed a zo karget ;
Dre-holl war hent ar vuhez e bechou a gaved ;
Pa ne ro d'am daoulagad nemet falsklerijenn,
Roit d'in, Spered-Santel, ho Furnez d'am c'helenn.
3. Hi 'ray d'in anavezout gant gwir anaoudegez
Petra 'dalv traou ar bed-man 'vit ma silvidigez ;
Hi 'ray d'in c'hoaz labourat 'vit servija Doue,
Ha beva leun a fizians da vont-d'an Nenv, eun de(iz).

4. 'vel eun treust em daoulagad, siouaz d'in, ar pec'hed
Am harz da welout ervat ar pezh 'c'h eus diskleriët :
Roit d'in 'ta, ma Doue, roit d'in sklerijenn
D'ho kredi ha d'ho kompren, d'ho heulia penn-da-benn.
5. Ma spered sklerijennet gant sklerijenn Doue
A welo ar Wirionez, hi, ken sklaer hag an de (iz) :
Ar madou-ene 'vidoun ken dister diagent
A-vreman me o frizo evel ma rae ar sent.
6. Furoc'h adalek breman, e heuilhin an hent mat ;
A-berz ar Spered-Santel, evidoun pebez mad !
Kaout skiant ar garantez, skiant ma deveriou
Ar skiant-se hi anvet skiant traou an Nenvou.
7. Hepdale ma spered paour, d'ho skiant o plega,
A gerzo war-du an Nenv, dre an hent ar gwella ;
Nag ardou an droukspered na gwallskoueriou ar bed,
Pa 'm eus bet Spered Doue, ma gwalla n'hallint ket.
8. Evit ma silvidigez ha skouer vat ma nesa,
Ez eo ret d'in kaout dalc'hmat ho kuzul, da genta.
Gantan e tizoloin ar skoasellou 'zo graet
'vit ma c'holl, gant an dud fall ha gant an droukspered.
9. 'vit ober ho polontez, ho pet ouzin truez,
Diskouezit d'in e pe stad eo tremenn ma buhez.
Piou a c'hallfe d'in gwelloc'h an doare displega
D'ober pep tra en e goulz hag evit ar gwella.
10. Enebourien ma ene, evel eur mor diroll,
Hep paqueiz na noz, na deiz, a glask ma c'has da goll ;
D'o zrec'hi, Spered-Santel, o ! roit d'in ho nerz,
Hag e teufent d'am zempti, n'hallint ket ober berz.
11. Breman, gant joa ma c'halon, ma buhez a roin,
Kentoc'h eget nac'h ma feiz, mar bez ret-a-walc'h d'in.
Ne grenin ken gant ar spont dirak ar c'hoaperien,
Me vo krenv d'anzav ma feiz evel ar verzerien.
11. Grit d'in tanva, ma Doue, ar gwir Doueusted ;
Grit ma kresko em c'halon, m'em bo eürusted :
Neuze 'vel eur gwir vogel, ouzoc'h e vin sentus,
Me ho servijo dalc'hmat laouen-bras hag eürus.
12. Ganti em bo 'vit Doue eur garantez tener,
Hag e vin ouz ma nesa bepred dous ha seder ;
Drezi bemnoz, bep beure, ez aio ma fedenn
War nij betek tron Doue, evel eur' goulmig wenn.

13. Ez oun, siouaz, hep sikour, gwall zouget d'ar pec'hed,
Ha war hent ar Baradoz e vezan gwall nec'het ;
Lakait 'ta em c'halon ho toujans d'am sikour
Da ziwall ouz ar pec'hed, ma gwsa enebour.
14. A-vreman e gwir vogel, e vevin 'n ho toujans,
Ho karin a-greiz kalon, C'houi, ma nerz, ma fizians ;
Tridal a ra ma ene gant anaoudegez vat,
Rak penn-kenta ar furnez am eus bet evit mat.
15. Teurvezit, o ma Doue, peurgloza an deiz-man,
O skuilha hoc'h holl vennoz warnomp-ni holl breman.
Roit d'hon Aotrou 'n Eskob, d'hon madoberourien,
D'hon tud ha d'hon mignoned, ho pennoz da viken.
16. A-greiz hon c'halon, ivez, ni ho ped, ma Jezuz,
Hon mouez 'vel ar c'hlaiz-klemmus : « Grit eur sell truezus
Ouz Anaon ar Purgator dizec'het o c'hortoz
An eur ma 'z ay d'ho kwelout e gloar ho Paradoz. »

N. CXXXIV. — Kantig ar Skol. Gristen.

(2.-63)

Kanomp, kanomp da viri-ken enor ha
gloar d'ar skol gristen, d'arskol a-ra d'ar vuga.
le anaou ha karou o Doue, d'arskol a
ra d'ar vuga - le anaou ha karou o Dou-e.
pe ton CXXXV

1. Pegen eürus ar parreziou
O deus dre forz aluzenou
Savet, kuit da glask digare(z),
Skoliou kristen d'o bugale.

2. Er skol gristen, ne vezint ket,
Kelennet evel paganed,
Hep klevout komz a-hed an deiz
Eus a Zoue nag eus ar Feiz.
3. Er skol-se, mistri, mestrezed,
Bep sul, bep gouel a ya bepred,
Gant kerent ha bugaligou,
D'an iliz 'vit an ofisou.
4. En holl skoliou kristen digor
'man ar Groaz er plas a enor ;
A-raok ha goude labourat,
Eno 'vez graet eur bedenn vat.
5. Ar skol gristen d'ar vugale
'tresek an Nenv a ra bale,
Bak ar genta deskadurez
Eo hent an Nenv, ar santelez.
6. War ar marc'had e ro d'ezo
Kement deskadurez a zo.
Gwelit ! gwelit ! tud dizoue
A gas d'ezo o bugale.
7. Doue, hon Tad, gwir vestr ar bed,
Skuilhit ho pennoz, ni ho ped,
War ar skol gristen, ma teuio
Da zerc'hel start ar Feiz er vro.
8. Grit ma vo sentus pep hini
Ouz gourc'hemenn an Eskopti
Hag a lavar d'an holl gerent :
Ho mab, ho merc'h, d'ar skol gristen !
9. Grit d'imp kompren er barrez-man
Pegen diaes 'eo gwizienna(n)
E kalon dinamm ar bugel,
Ar Feiz, ar vertuziou santel.
10. Grit d'ar gerent kompren ervat
'eo da genta d'ar vamm, d'an tad,
D'ar vamm dreist-holl, war he barlenn,
Deski d'ar bugel e bedenn.
11. Argasit pell ar gwallskouerieu,
Ar skridoù fall, ar gwallgomzou,
Labour euzus an droukspered,
An dud difeiz ha disakret,

N. CXXXV. — Kantig Breuriez Galv ar Velegiez.

(Breuriez S. Brieg ha S. Erwan)

(J.=63)

Senn hor Breiz - I - zel, ni ho ped savit be
le - ien war ar bed. Ro - i - si - gor da c'halv Dou.
e e ka - lo - nou ar vuga - le ro - i - si.
gor da c'halv Dou - e e ka - lo.
nou ar vu - ga - le.

1. Kelennet gant kerent kristen,
C'houi 'zo skouer vat ar veleien ;
'vel ho tud, hon mamm hag hon tad
'choulennno 'vidomp ar mennad.
2. Hon eskopti 'zo ezommek ;
Prestik 'vo parroz hep beleg...
Met hon pedenn 'vo selaouet,
Hag an eneau skoazellet.
3. Ar beleg 'zo eun den dispar :
N'eus ket kaeroc'h war an douar.
N'eus ket koulz bennoz hag enor
'get mab beleg e Bro-Arvor.

4. Ar beleg 'lak war an aoter
Korf ha gwad Jezuz, hon Salver ;
Ar burzud-se en oferenn
A santela ar bed kristen.
5. 'vit chom ganimp war an douar,
Kendalc'h e varo er C'halvar,
Jezuz 'glask bepred ebestel
E pep parroz a Vreiz-Izel.
6. Ar beleg 'ro ar wir vuhe(z)
Dre ar Vadeziant d'an ene ;
D'ar c'hristen kouezet er pec'hed
E ro ar peuc'h hag ar c'hlanded.
7. Ar beleg 'sav an tiegez
War sichenn ar Briedelez.
Kelenn a ra ar prijeou
Da sevel o bugaligou.
8. Ar beleg, pa zeu ar maro,
A ren an ene d'e wir vro.
En ano Jezuz, 'eo Salver
'vit ar poblou, 'hed an amzer.
9. Ar beleg a zalc'h plas Doue,
'n eur zezrevell ar Wirione(z).
E skridou kaer an Aviel
'man ar garantez divarvel.
10. Ar Feiz hag ar vuhez kristen
A dle bleunia e pep tachenn ;
Kerkoulz e pell-bro 'vel e Breiz,
Beleien 'zo ezomm e-leiz.
11. Da labourat gant ar beleg,
Doue 'c'houlenn tud kalonek,
Leaned ha leanezed,
Er skol mistri ha mestrezed.
12. Galv Doue da veza beleg
'zo eur c'hreunenn ken talvoudek
Ma tleer pedi an Hader
Da hada stank greun an Aoter.

B.-L.

N° CXXXVI. -- Beleg da viken.

Ton : CXIII

1. Eus an Arvor, ar Menez deredet gant dudi,
Kanomp hirie da Zoue, kanomp e veuleudi.
Eun deiz kaer evel heman, deiz eun oferenn nevez
A zo eun deiz a vennoz paret war eur barrez.

Diskan

- Bennoz, bennoz d'eoc'h Jezuz, ha mil gwech trugarez
Evit an enor dispar hoc'h eus graet d'hon parrez ;
O tont enni da zibab hag enni da c'hervel
'Vit sevel ouz an Aoter, adarre eur bugel.
2. Evit ober eur beleg, Doue, d'ar Vadeziant
A verk gant e zourn santel ar bugel 'zo d'e c'hoant ; -
Ha dre ma kresk en oad, e skiant, e'furnez,
Aked an Aotrou warnan a gresk ivez bemdez.
 3. Evit ober eur beleg, Doue, d'ar bugelig,
A laka eur vamm gristen e-tal e gavellig,
Eur vamm a oar luskellat ervat he bugale
E karantez ar Werc'hez, e karantez Doue.
 4. Evit ober eur beleg, Doue, gant plijadur,
Abred a ro da glevout e c'halv d'ar c'hrouadur ;
Hag ar bugel dibabet, sentus ouz mouez Doue,
A lavar a-greiz kalon : « D'eoc'h 'oun korf hag ene. »
 5. Neuze, tennet eus ar bed, lakaet er sioulder,
Ar bedenn hag ar studi, pell a vez e breder...
Eun deiz, deiz a levenez, e weler war e benn
Dourn an Eskob astennet... Beleg 'eo da viken !
 6. Skuilhit, Jezuz, ho pennoz war ho peleg yaouank ;
Lezit warnan ho krasou da redek puilh ha stank...
Ar beleg eo ho kannad, mignon hon eneou,
Hoc'h eus karget d'hon henchta betek porz an Nenvou.
 7. Ar beleg en e zourn sakr a zoug alc'houez an Nenv,
Gant e gomz, hon ene klanv a zeu nerzus ha krenv.
O burzud dreist pep burzud ! d'e gomz Jezuz zoken,
Eus uhelled an Nenvou, davetan a ziskenn.

8. Ya ! Jezuz, krouer pep tra, Jezuz, prener ar bed,
Jezuz gwir vab an Hini n'eus warnan mestr ebet,
Ouz komz nerzus ar beleg bemdez a zo sentus,
Diskenn 'ra eus e balez war e c'her burzudus.
9. Santez Mari, Mamm Doue, Rouanez Breiz-Izel,
Roit d'ar beleg yaouank, ho pennoz, ho skoazell.
E garg a zo damhenvel, Gwerc'hez, ouz hoc'h hini :
Grit ma kendalc'ho bemdez da santelaat enni.
10. O, Sant Erwan binniget, eus barr skedus an Nenv,
Harpit ho peleg yaouank, ho prec'h d'eoc'h-c'houi, zo krenv,
Ma c'hello war ho roudou pell, pell amzer bale,
Skuilha sklerijenn ar Feiz, 'veldoc'h, en hon ene.

An Aotrou Y. V. PERROT beleg. (Kemper).

N° CXXXVII. — A-raok kuitaat an Iliz diouz
an abardaez.



1. O, Mari, hon Mamm muia karet,
Roit d'imp ho pennoz ive(z) :
'vit hon mirout ouz an droukspered,
Chomit e-kichen hon gwele.

2. Ha c'houi, Jozeb, tad leun a druez,
Bezit bepred hon Patron mat ;
Deut bemdez hag e fin hon buhez,
Da serri d'imp hon daoulagad.
3. O, Ael-mat, mignon karantezus,
Hon difennit ha deiz ha noz ;
Pa zeuy hon maro, pedit Jezuz
D'hon degemer er Baradoz.



Evit klevout mat an Oferenn

AN OFERENN

Petra eo an oferenn ?

An oferenn eo ar sakrifik eus korf ha gwad hon Salver Jezuz-Krist kinniget da Zoue dindan ar spesou a vara hag a win.

Ar beleg, d'ar gorreou, a lavar, en ano Jezuz-Krist : « An dra man eo ma c'horf ; ha, warlerc'h : an dra-man eo ma gwad ». Kerkent, ar bara hag ar gwin a zo chen-chet e korf hag e gwad Jezuz-Krist.

An oferenn, eta, a zigas d'imp sonj eus sakrifiks ar Groaz, hag ouspenn, an oferenn eo ar sakrifik-se graet a-nevez. Evit petra ? Evit rei tu da bep unan da gaout lod eus ar madou gounezet d'an holl dre sakrifiks ar groaz.

N'eus netra ken kaer na ken talvoudus hag an oferenn. Rak-se, lavaromp hon oferenn, war eun dro gant ar beleg, gant eur feiz krenv hag eur garantez vras.

Pedennou an Oferenn

En oferenn e kaver daou seurt pedennou.

1° Al lodenn vrasa 'vez lavaret n'eus forz peseurt Oferenn a vez graet.

2° Al lodenn all a vez dishenvel bep sul ha bep gouel : da lavarout eo : an Introit, Ar bedenn, kentel an Abostol, kan an Alleluia, pe Graduel, Aviel, Ofertouer, Pedenn a vouez izel, Prefas, Komunion, Pedenn goude ar Gomunion. Aman e kavfet an holl bedennou-se, pep-hini en he flas, an eil warlerc'h eben.

C'houec'h lodenn an Oferenn

1a lodenn : Pedennou ar Gonfiteur e traon an Aotér betek an Introit.

2l lodenn : Pedennou ha kenteliou betek fin an Aviel.

3vet lodenn : An ofertouer hag ar pedennou all betek ar Sanctus.

4vet lodenn : Pedennou ar Sanctus, ar Gorreou, ar Ba-ter, betek ar Pax Domini, pa dorr ar beleg an Osti.

5vet lodenn : An Agnus Dei, hag ar pedennou araok ar Communion.

6vet lodenn : Pedennou evit trugarekaat goude ar Gomunion, betek fin an Aviel diweza.

KENTA LODENN

Pedennou ar Gonfiteur e traon an Aoter

Ar beleg, en em gavet e traon an Aoter, a lavar :

In nomine Patris et Filii
et Spiritus Sancti. Amen.

En Ano an Tad+ hag ar
Mab hag ar Spered Santel.
Evelse bezet graet.

Ar beleg. — Introibo ad
altare Dei.

Ar beleg. — Me a savo ouz
Aoter Doue.

Respont. — Ad Deum qui
laetificat juventutem me-
am.

Respont — Ouz an Doue
a ro levenez d'am yaou-
ankiz.

Psalm 42

*Bodet endro d'an Aoter, ar beleg hag ar Gristenien a
ziskouez o fizians e Doue.*

Ar beleg. — Judica me,
Deus, et discerne causam
meam de gente non sanc-
ta ; ab homine iniquo
et doloso erue me.

Barnit ac'hanoun ma
Doue, ha difennit ma
gwir a enep d'eur bobl
disleal ; ma diwallit
ouz an den fall ha gidas.

Respont. — Quia tu es,
Deus, fortitudo mea,
quare me repulisti, et
quare tristis incedo,
dum affligit me ini-
micus ?

Rak c'houi, Doue eo ma
nerz ; perak hoc'h eus
ma zaolet pell diouzoc'h,
ha perak e valean en
dristidigez, gwasket gant
ma enebour ?

Ar beleg. — Emitte lucem tuam, et veritatem tuam ; ipsa me deduxerunt et adduxerunt in montem sanctum tuum, et in tabernacula tua.

R. — Et introibo ad altare Dei : Ad Deum qui lætificat juventutem meam.

Ar b. — Confitebor tibi in cithara, Deus, Deus meus : quare tristis es anima mea et quare conturbas me ?

R. — Spera in Deo, quoniam adhuc confitebor illi : salutare vultus mei, et Deus meus.

Ar b. — Gloria Patri, et Filio, et Spiritui Sancto.

R. — Sicut erat in principio, et nunc et semper, et in sæcula sæculorum. Amen.

Ar b. — Introibo ad altare Dei.

R. — Ad Deum qui lætificat juventutem meam.

Ar b. — Adjutorium nostrum in nomine Domini.

R. — Qui fecit coelum et terram.

KONFITEOR

Ar beleg, stouet etrezek an Aoter, hag e zaouarn juntet, a lavar Konfiteor. Ar responder a lavar, hag ar gristenien, holl, eo mat d'eze lavarout ivez :

Digasit ho sklerijenn hag ho kwirionez ; i a reno hag a gaso ac'hanoun war ho menez santel, betek ho tabernakloun.

Ha me a savo ouz Aoter Doue, evit tostaat ouz an Doue a ro levezenez d'am yaouankiz.

Me a gano ho meuleudi war an delenn, o ma Doue ; perak oc'h trist, o ma ene, ha perak e rit anken d'in ?

Lakaït ho fizians e Doue, rak me hen meulo c'hoaz ; Hen eo ma Salver, ha ma Doue.

Gloar da Zoue an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

Evel er penn kenta, breman, dalc'hmat ha da viken. Evelse bezet graet.

Me a savo ouz Aoter Doue.

Evit tostaat ouz an Doue a ro levezenez d'am yaouankiz.

Hon harp a zo en ano Doue.

En deus graet an Nenv hag an douar.

Misereatur tui omnipotens Deus, et dimissis peccatis tuis perducatur te ad vitam æternam.

Doue ra vo trugarezus en ho kenver, da bardoni d'eoc'h ho pec'hejou : ma kaso ac'hanoc'h d'ar vuhez eternel.

Ar beleg a respont : Amen.

Hag ar responder d'e dro a lavar ar Gonfiteor :

Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper Virgini, beato Michaeli Archangelo, beato Joanni Baptistæ, sanctis Apostolis Petro et Paulo, omnibus sanctis, et tibi Pater, quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere : mea culpâ, mea culpâ, mea maxima culpâ.

pâ, Ideo precor, beatam Mariam semper Virginem, beatum Michaelen Archangelum, beatum Joannem Baptistam, sanctos Apostolos Petrum et Paulum omnes sanctos, et Te, Pater, orare pro me ad Dominum Deum Nostrum.

Ar beleg neuze, a c'houlenn digant Doue kaout truez ouz ar bobl

Misereatur vestri omnipotens Deus, et dimissis peccatis vestris, perducatur vos ad vitam æternam. Amen.

Doue da veza trugarezus en ho kenver, da bardoni d'eoc'h ho pec'hejou ; ma kaso ac'hanoc'h d'ar vuhez eternel. Evelse bezet graet.

Indulgentiam, absolutiorem et remissionem peccatorum nostrorum tribuat nobis omnipotens et misericors Dominus. Amen.

Ra vo rôet d'imp ar pardonn hag an absolvenn eus hon holl bec'hejou gant Doue holl-c'halloudek ha trugarezus. Evelse bezet graet.

Ar beleg, stouet adarre, a lavar :

Ar b. — Deus, tu conversum vivificabis nos.

O Doue, sellit ouzimp, ha rôit d'imp ar vuhez.

R. — Et plebs tua lætabitur in te.

Hag ho pobl a gavo levezenez ennoc'h.

Ar b. — Ostende nobis,
Domine, misericordiam
tuam.

R. — Et salutare tuum da
nobis.

Ar b. — Domine, exaudi
orationem meam.

R. — Et clamor meus ad
te veniat.

Ar b. — Dominus vobis-
cum.

R. — Et cum spiritu tuo.

Diskouezit d'imp, Aotrou
Doue, ho trugarez.

Ha saveteit ac'hanomp.

O Doue, selaouit ma fe-
denn.

Ma savo ma mouez betek
ennoc'h.

Doue ra vo ganeoc'h.

Ha gant ho spered.

Ar beleg a sav ouz an Aoter, hag a lavar :

Oremus

Pedomp

Aufer a nobis, quæsu-
mus, Domine, iniquitates
nostras, ut ad sancta sanc-
torum puris mereamur
mentibus introire. Per
Christum Dominum nos-
trum. Amen.

Lamit, ni ho ped Aotrou
Doue, hon fec'hejou, ma
c'hallfomp mont ouz an
Aoter gant eneoù glan
(pur). Dre J. K. hon Ao-
trou. Evelse bezet graet.

*Ar beleg a bok d'an Aoter, e-lec'h m'eman relegou ar Sent,
hag a lavar :*

Ni ho ped, Aotrou, dre veritou ar Sent, a zo aman o
relegou, hag an holl Sent, da rei d'in ar pardon' eus ma
holl bec'hejou. Evelse bezet graet.

EIL LODEN

Pedennou ha kenteliou

*Goude beza poket d'an Aoter, ar beleg a ya a zehou, da
gorn an Aoter, hag a lavar an Introit, ar C'hyrie hag ar
Gloria.*

KYRIE ELEISON

Kyrie eleison... ter
Christe eleison... ter
Kyrie eleison... ter

Aotrou, ho pet truez
Krist, ho pet truez
Aotrou, ho pet truez

GLORIA IN EXCELSIS

Gloria in excelsis Deo,
et in terra pax hominibus
bonæ voluntatis.
Laudamus Te.
Benedicimus Te.
Adoramus Te.
Glorificamus Te.
Gratias agimus tibi, prop-
ter magnam gloriam
tuam.

Gloar da Zoue war lein
an Nenvou, ha peoc'h d'an
dud a youl vat.
Ni ho meul.
Ni a lavar d'eoc'h bennoz.
Ni hoc'h ador.
Ni a rent gloar d'eoc'h.
Ni ho trugareka evit ho
kloar ken bras,

Domine Deus, Rex cœles-
tis.
Deus Pater omnipotens.

Doue hon Aotrou, Roue an
Nenv,
Doue an Tad holl-c'hallou-
dek.

Domine Fili Unigenite.
Jesu Christe.

Domine Deus, Agnus Dei,
Filius Patris.

Qui tollis peccata mundi,
miserere nobis.

Qui tollis peccata mundi,
suscipe deprecationem
nostram.

Qui sedes ad dexteram Pa-
tris, miserere nobis,

Ha c'houi e Vab Unik,
Doue ivez, Jezuz-Krist.
Aotrou Doue, Oan Doue,
Mab an Tad.

C'houi a lam pec'hejou ar
bed, ho pet truez ouzimp.

C'houi a lam pec'hejou ar
bed, selaouit hon feden-
nou.

C'houi a zo azezet en tu
dehou d'an Tad, ho pet
truez ouzimp.

Quoniam tu solus sanctus.

Rak c'houi hepken a zo
santel.

Tu solus Dominus.

C'houi hepken a zo hon
Aotrou.

Tu solus Altissimus, Jesu
Christe.

C'houi hepken a zo Uhel
meurbet,
Jezuz-Krist.

Cum sancto Spiritu in glo-
ria Dei Patris. Amen.

Gant ar Spered Santel e
gloar an Tad. Evelse be-
zet graet.

Ar beleg, goude poket d'an Aoter, a dro ouz ar bobl,
hag a lavar :

Domine vobiscum.

Doue ra vo ganeoc'h.

R. — Et cum spiritu tuo.

R. — Ha gant ho spered.

Kant.Bret.

PEDENN

E tu dehou d'an Aoter, ar beleg a lavar : Oremus : Pedomp. — An holl a dle pedi gant ar beleg.

Lavaret ar beden, ar responder a lavar : Amen.
Neuze ar beleg a lenn eur pennad skritur sakr eus an Testamant koz pe eus liziri an Ebestel. Ar c'holist, d'ar fin, a respont : Deo gratias,

PEDENN

A-raok mont e tu an Aviel, ar beleg stouret izel dirak an Aoter, a ra ar bedenn-man :

Netait ma c'halon ha ma muzellou, Doue Holl-C'halloudek, c'houi hag hoc'h eus netait muzellou ar profet Izaiaz gant eun tamm glaou ruz-tan. En ho trugarez, lakait kaer ma ene, ma c'hallin diskleria, evel m'eo dleet, hoc'h Aviel santel.

Dre Jezuz-Krist hon Aotrou. Evelse bezet graet.

Binnigit ac'hanoun, me ho ped, Aotrou.

Ra vo Doue em c'halon ha war ma muzellou, ma c'hellin diskleria e Aviel en eun doare dereat. Evelse bezet graet.

AVIEL

Ar beleg a salud ar gristenien gant an « Dominus vobiscum » ; hag an holl a dle respont : « Et cum spiritu tuo ». — Ar beleg a ra sin ar groaz war levr an Aviel, war e dal, e vuzellou hag e galon, en eur lavarout : « Sequentia (pe initium) Sancti Evangelii secundum (aman ano unan eus ar pevar aviel : Maze, Mark, Lukas pe Iann), hag ar gristenien, 'n o sav, dre zoujans evit komzou Doue, a ra ivez warné o-unan, an tri sin ar groaz, evel ar beleg. An Aviel a zo ar geennadurez rôet d'imp gant Jezuz-Krist e-unan.

Ar c'holist a respont : Gloria tibi Domine.

Pa vez echu kan an Aviel ar beleg a bok d'al Levr, hag a ra ar bedenn-man :

Dre gomzou sakr an Aviel, ra vo lamet d'imp hon fec'hejou. Amen.

AR GREDO

Ar beleg, e-kreiz an Aoter, a lavar breman ar Credo pa vez da lavarout :

Credo in unum Deum.*
Patrem omnipotentem, factorem cœli et terre, visibilium omnium et invisibilium.* Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei Unigenitum.* Et ex Patre natum ante omnia sæcula.* Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero.* Genitum non factum, consubstantialem Patri : per quem omnia facta sunt.* Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de cœlis.

Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine, et Homo factus est.

Crucifixus etiam pro nobis : sub Pontio Pilato passus, et sepultus est.* Et resurrexit tertia die, secundum Scripturas.* Et ascendit in cœlos ; sedet ad dexteram Patris.* Et iterum venturus est cum gloria, judicare vivos et mortuos : cujus regni non erit finis.* Et in Spiritum Sanctum, Dominum, et vivificantem, qui ex Patre Filioque procedit.* Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur qui locutus est per prophe-

Me gred en eun Doue hepken, an Tad holl-c'halloudek krouer an Nenv hag an douar, an traou a weler hag ar re na weler ket ; Hag en eun Aotrou hepken, Jezuz-Krist. Mab Unik da Zoue. Ganet eus an Tad araok an holl amzer Doue eus Doue, sklerijenn deuet eus ar sklerijenn, gwir Doue deuet eus ar gwir Doue. Konsevet nann krouet, e natur a zo natur an Tad : gantan eo bet graet pep tra. Evidomp-ni, an dud, evit hon save-
te, eo diskennet eus an Nenv.

Konsevet eus ar Spered Santel gant ar Werc'hez Vari hag en deus en em c'hraet Den.

Staget ivez ouz ar groaz evidomp-ni, en deus gouzanvet dindan Pons-Pilat, hag eo bet sebeliet. Hag eo savet euz ar bez d'an trivet deiz hervez ar skritur sakr : hag eo pignet d'an Nenv, hag azezet en tu dehou d'an Tad. Hag adarre e teuo, leun a c'hloar, da varn ar re veo hag ar re varo ; ne vo fin ebet d'e rouantelez. Hag er Spered Santel, hon Aotrou ivez, a ro ar vuhez ; a zeu eus an Tad hag ar Mab. A zo

tas.* Et unam sanctam, catholicam et apostolicam Ecclesiam.* Confiteor unum baptismum in remissionem peccatorum.

Et exspecto resurrectionem mortuorum.
Et vitam venturi sæculi.

Amen.

adoret ha meulet evel an Tad hag ar Mab ; en deus komzet dre ar skritur sakr. — Hag en Iliz, a zo unan, santel, katolik hag abostolik.

Me anzav ez eus eur Vadeziant evit lemel ar pec'hejou. Ha gortoz a ran rezureksion ar re varo hag ar vuhez eternel. Evelse bezet graet.

TEIRVET LODENN

An Ofertouer, pe kinnig.

Aman, end-eeun, e krog ar sakrifis. Goude an Dominus vobiscum ha bet ar respont : « Et cum spiritu tuo, » digant ar c'holist, ar beleg a lavar : Oremus-Pedomp, hag a lenn ar bedenn : Ofertouer.

OREMUS — PEDOMP

Ar beleg, en eur ginnig ar bara, a lavar ar bedenn-man :

Digemerit, Tad santel, Doue holl-c'halloudek hag eternel, an Osti glan-man a ginnigan d'eoc'h, me ho servijer paour d'eoc'h-c'houi, ma Doue beo ha gwirion, evit ma fec'hejou, ma faziou, ma mankou ken niverus ; hag evit an holl dud a zo endro d'in, hag evit an holl gristenien vat, beo ha maro, ma talvezo d'in ha d'ezo, evit hon silvidigez er vuhez eternel.

Evelse bezet graet.

Ar beleg, e tu dehou d'an Aoter, a laka gwin er c'halir, a vinnig an dour hag a laka eur bannac'h gant ar gwin.

Doue, c'houi hoc'h eus, en eun doare burzudus, krouet an den ken uhel, ha savet anezan a-nevez en eun doare burzudusoc'h c'hoaz, rôit d'imp, dre vister an dour hag ar gwin-man, ar c'hras da gaout perz e divinite an hini

en deus prizet kemer hon natur, Jezuz-Krist, ho Mab, hon Aotrou a vev hag a ren ganeoc'h hag ar Spered Santel.
Evelse bezet graet.

Ar beleg a ginnig ar c'halir, e kreiz an Aoter :

Ni a ginnig d'eoc'h, Aotrou, ar c'halir-man a silvidigez, hag e pedomp ho madelez, evit ma pigno dirazoc'h, evel c'houez vat an ezans, evit hon silvidigez ha silvidigez ar bed-holl. Evelse bezet graet.

Ar beleg, eun tammig stouët, hag ar gristenien gantan, en em ginnig ivez da Zoue, dre ar bedenn-man.

Gant eur spered izel hag eur galon c'hlaç'haret, ni a c'houlenn diganeoc'h, Aotrou Doue, hon digemer, evit ma vo graet hon sakrifis hirie dirazoc'h, diouz plijout d'eoc'h, Aotrou Doue.

Ar beleg, en eur ober sin ar groaz war ar bara hag ar gwin, a ra ar bedenn-man d'ar Spered Santel :

Deuit, Spered holl-c'halloudek, Doue eternel, ha binnig ar sakrifis-man graet evit enori hoc'h ano.

LAVABO

Ar beleg, e tu dehou d'an Aoter, a walc'h e zaouarn, evit merka pegen glan ha didamall e tleer beza evit tostaat ouz Doue ; gant ar beleg, lavaromp ar bedenn-man :

Me a walc'ho ma daouarn e-touez an dud santel, hag en em lakaio en-dro d'hoc'h Aoter, Aotrou Doue.

Ma klebin kana ho meuleudi, ha ma c'hallin diskleria hoc'h oberou burzudus.

Aotrou, me am eus karet ho ti koant, al lec'h ma oc'h en ho kloar,

Na gollit ket ac'hanoun gant an dud fall, o ma Doue, na rit ket d'in evel d'an dud a gar laza,

A zo leun o daouarn a dorfejou, hag o dorn dehou o kinnig donezonou.

Evidoun-me, em eus dilezet ar pec'hed ; ma saveteit, hag ho pet truez ouzin.

Ma zreid a zo aet dre an hent mat ; me ho meulo, Aotrou, gant an dud fur. Gloria Patri.

PEDENN D'AN DREINDED

Digemerit, Treinded santel, an donezon-man a ginnigomp d'eoc'h, e sonj eus Pasion, Rezureksion hag Asansion hon Salver Jezuz-Krist, hag en enor d'ar Werc'hez glorius Vari, ha da sant Yann Vadezour, ha d'an Ebestel sant Per ha sant Paol, hag an holl sent all, ma roio enor d'ezo, ha d'imp-ni silvidigez, ma vefomp difennet en Nenv gant ar re a enoromp war an douar. Dre ar memes Jezuz-Krist hon Aotrou. Evelse bezet graet.

ORATE, FRATRES

Ar beleg, trôet ouz ar bobl, a bed ar gristenien da unani o fedennou gant e re, hag a lavar :

